

Eostik Kerinek (Yvon Crocq) (Poullan 1885 - Brest 1930)

Meur a vicher e-noa greet. O labourad en eun ti bank, miliner da houde ha tavarnour e Brest evid echui.

Adskrivet eo bet ar marvailhou-mañ diouz eul leor orin, med siwaz ne chome nemed ar pajennou diweza, ha diouz adembannadur "Buhez Breiz" (1924).

Taolenn

Eur Haper droch
Eur gontadenn euz bro ar Gaperien
Daou skolaer
Fillor Paolig a Gerzatan
Blaz ar jistr
Yann an Hinkin hag an aotrou Furzod
Euz an izel d'an uhel
Truillennig ha Gargarenez
Mab-kaer d'ar roue
Eul labous
Mizerig
Yann ar yod
Al laer a zo laer
Ar pare d'ar re vouzar !
Nebeud a dra !...
O-diou
An hader avel
Soazig Tagnouz, gwreg ar hidour
Arhant braz ar pillaouer
Kloh an interamant

EUR HAPER¹ DROCH

Ne fell ket din, tamm ebed, lavared eo droch kement den a zo war-dro Beg-ar-Raz. Nann, nann ! pell ahano ! Kredi a ran koulskoude ez eus dre eno eun amziod, eun hanter-fur bennag, evel el lehiou all. Ar Haper, a zisplegin deoh e zoare, ne oa nag euz Kleden nag euz Plogñ ; euz an Enez Sizun e oa ginidig.

Gwennole Mellfaout — hennez eo e ano, — a ranke beza ganet da zadorn goude koan divezad, rag gwall-skañvig 'oa e dammig penn dindan e goz tok. Gweled a reoh an dra-ze hoh-unan, pa glevoh an troiou divalo a hoarvezas gandañ, eur bloavez bennag a zo, en eur ober e dro e Kemper da zeiz Foar vraz Hanter-Ebrel, daoust d'e wreg, Mari Gaid.

Gwennole n'en-doa gwelet beteg neuze nemed dour zall, bili gwenn ha bezin druz an Enez Sizun ; kent-se, pa ziskennas euz e vag war an douar-braz e porz Douarnenez, e oa souezet hag e chome sebezet, koulz lavared, pep kammed ma ree.

« Setu amañ eun ti hag a zo uhel avad ! emezañ. Penaoz an tanfoeltr e heller kaoud plas a-walh, ichou a-walh, er-mêz da zevel tiez ken braz-se ? »

A bep seurt e lavare en eur vond gand an hent etrezeg Kemper.

E-kreiz eul lanneg e welas eur vilin-avel, gand he bannou hag he ibiliou goloet a lien. Ar vilin n'ez ee ket en-dro d'an ampoent, hag he bannou a chome e kroaz.

« Biskoaz kemend-all ! eme Gwennole, petra eo an istrogell-ze?... A ! e peleh e oa va zammig spered ganin ? Soñj am-eus bremañ, war an douar-braz e kaver kalz a groaziou ; sur a-walh hounnez a zo unan anezo... Me ho salud, Kroaz va Zalver !... »

Hag ar Haper o vond war benn e zaoulin da ober eur pennadig pedenn, rag eun den a feiz veo e oa, daoust dezañ beza hir e ziouskouarn !...

War-dro ar hreisteiz, Gwennole a zegouezas e Kemper. Kristenien, nag eñ a zigoras du-ze frank e henou e kêr sant Korantin ! Da genta tra, e reas an dro da blasenn al loened-korn.

« Nag a zaout ! » emezañ, souezet a-grenn. « Nag a zaout, paotred paour ! Saout-leueou, saout-lêz ! A ! pa zoñjan, ni, du-mañ en Enez Sizun, n'eus nemed diou vuoh ganeom : unan d'an aotrou person, hag eben d'an aotrou mêr. Gwir eo ivez, du-mañ n'eo nag hir na druz ar peuri ganeom. »

Hag eñ pelloh da gaoud ar holeou braz hag an ejenned lard-toaz.

« Aotrou Doue, eme hor Haper, biskoaz em buhez ne welis loened par d'ar re-ze ! End-eeun, tud a rank beza o veva war an douar-braz koulskoude, peogwir an oll loened-se a zo da veza gwerzet, lazet ha debret beteg an hini diveza. O ! ya, nag ar bed a zo brasoh eged an Enez Sizun ! Ouspenn kant gwech marteze !

Hag ar Haper o vond ahano da ober eur bale beteg marhad ar hezeg. Souezet-mar, sabatuet-net, sebezet-oll, mantret-krenn, e chomas eno eur pennadig, digor braz e henou ha difronket e zaoulagad. Ne chomas ket re bell koulskoude, rag ne grede na trei na distrei e tu ebed, na fiñval na flach an disterra ; a-boan m'o-doa e zivesker nerz a-walh da zerhel anezañ en e zav.

Ma n'en-defe ket gwelet kement a dud ha ma oa eno war-dro al loened kaer-ze, me 'gred a-walh, neuze e vije pignet an derzienn-grenerez war chouk Gwennole hag e vije tehet hemañ kuit ahano gand eur horvad spont ! Med nann ! Kaer o-doa ar roñsed gwinkal ha dispaha, kaer o-doa ar mammou-kezeg gervel d'o haoud ebeulien hag ebeulezed, ken na dregerne al leur-gêr gand o moueziou, an dud ne spontent ket evid-se, hag ar varhadourien ne gollent ket nebeutoh a amzer o varhata hag o hlabousad. N'eus forz, petra bennag ma wele ar re all o vond hag o tond dizaon dre eno, Gwennole Mellfaout ne oa ket dineh na dispont kennebeud.

« Peadra, emezañ, am-eus gwelet ar hezeg evel-se. Ma tistagfe unan bennag euz ar re-ze, nag a dud a vefe breset, gloazet, lazet marteze ; rag na buan e tegouez droug !... Deom ahann, tost da ziv eur heol eo, a gredan... Koulskoude me 'garfe beza gallet prena eur marh bihan da gas ganin d'an Enez Sizun !... Sell ! Aze bara o werza. Naon-du a zo deut din o chaokad goullo abaoe ar mintin-mañ !

Hag e prenas eun tamm bara-lakez hag eun daou wennegadig silzig-kamm da zebri gantañ...

¹ EUR HAPER : eun den a zo o chom e Kap-Sizun.

En eur vond penn-da-benn gand ar ruiou, e tegouezas dirag an iliz-veur.

« Feiz d'am Doue ! eme ar Haper, setu aze eur chapel gaer en enor da zant Kaorantin ; med perag an tanfoeltr ez eus pignet aze daou dour war an doenn ? Gwelloh e vije kas unan euz ar re-ze d'an Enez Sizun du-mañ, nemed an dra-ze ne blijfe ket a-dreist da zant Kaorantin. N'eus forz, mond a ran atao e-barz da lavared va fater. »

Echu e bedenn gantañ, Gwennole a deuas war blasenn an iliz da zelled ouz ar staliou-mezer, ouz marhadourien priachou Lomaria. E oa war-bouez ober e zoñj da glask penn an hent da vond d'ar gêr, pa welas eun den o werza sitrouillez. Ar Haper n'en-doa morse gwelet traou e-giz-se.

« Petra 'werzit aze ? » emezañ d'ar marhadour.

Hemañ a gredas e oa oh ober ar zod anezañ hag a respontas ken buan hag hep c'hoarzin :

« Gweled a rit hoh-unan, va den ; n'eus ket kalz a varhadourez mui ganin, rag mad eo bet ar foar war ar viou kezeg. »

« Petra ? Salver benniget ! eme ar Haper ; viou kezeg eo ar re-ze ? Feiz d'am Doue, biskoaz em buhez ne welis viou par d'ar viou-ze ! A ! petra 'zoñjan-me ? Neuze, mar prenan eur vi kazeg diganeoh, e hellin kaoud eur marh bihan diwarnañ ? »

« Ya, eur marh pe eur gazeg vihan, n'on ket evit lavaret d'eoh pehini ; med unan a zaou, netra surroh na sklêrroh. »

Ha Gwennole Mellfaout, leun e benn a huñvreou, a chomas eur frapadig da zoñjal.

« Viou evel-se a zo ker, n'int ket ? » emezañ.

« Nann, n'int ket, sur, a respontas ar marhadour ; war greiz ar foar ez eent beteg pemzeg, c'hwezeg real an tamm. Bremañ ar re vrasa 'zo eet er-mêz ; koulskoude setu amañ unanig brao. Mat ! klaskit ho pezh skoed, skoit aze hag e vezo deoh ! »

« Eur pezh skoed n'eo ken ? eme Gwennole ; peadra 'zo ganin neuze c'hoaz. Va yalh n'eo ket euz ar reuta, koulskoude trizeg real, daou wenneg ha tri liard a zo enni. »

Hag e paeas, hag e skoulmas e vi kazeg en e vouchouer-fri, ha yao etrezeg Douarnenez da glask e vag da zistrei d'an Enez Sizun, laouen an tamm anezañ, me 'gav din, laouen o veza bet amzioud, furzod a-walh da brena eur skoed eur hoz sitrouillezenn.

Gwennole Mellfaout, dre ma vuzule hent, a zoñje ennañ e-unan :

« Va gwreg a zifenne ouzin dond da foar Hanter-Ebrel, an arzodez 'zo anezi. Med pa welo ar vi kazeg !... A ! pa zoñjan c'hoaz, me a gaso d'an Enez Sizun ar henta penn-kezeg a vo bet morse enni. Hiviziken me a vo priziet gand an dud du-mañ, ha piou 'oar ? Evidon-me ne lavaran ket nann, marteze a-benn an taol kenta, e vezin anvet da vêr e-leh Tonton François hag a zo deut eun tammig mad zoken... Evid gwir, me n'on ket eun diod, eun azen, e-giz m'o-deus c'hoant hiniennou da gredi, da lavared zoken, ha va gwreg da genta.

Ha Gwennole a yee gand e hent, sonn ha sart : ne oa ket mestr d'e blijadur, d'e levenez, dre ma soñje e vije, heb dale re bell, mêr en e barrez. Ha penaoz 'ta ne vije ket mêr ? Gwir eo ne ouie na skriva na lenn nemed war eun tamm bara hag eur gram-poezenn ; med a-hend-all, daoust ha n'eo ket eñ en-dije an enor da gas d'an Enez Sizun ar henta penn-kezeg a vije bet eno a-viskoaz ?... Hag e dammig kalon a dride, a biltrote dindan e chupenn, pa zoñje e oa ar marh bihan aze e-barz ar vi kazeg, skoulmet mad en e vouchouer-fri, a-istribill ouz e zorn.

Koulskoude, evel

Gand amzer ha dre bilpaza

E reer an hent ar pella,

Gwennole a dostae ouz Douarnenez ; an abardaez, gwir eo, a dostae ivez, euz e du.

Ha setu or Haper da drei eun tammig er-mêz an hent, evid... dizoura, resped d'eoh, ouz eur vodenn-lann, e-harz eur bern mein. N'ouzon dare penaoz, med e vouchouer hag en-doa skoachet dindan e vreh, a risklas ; hag, a-barz ma hellas Gwennole Mellfaout diarbenn an taol, e kouezas d'an douar a-stok.

« Salver Doue, eme ar Haper, emañ rivinet ! Sur a-walh ar vi a zo rannet ha ne deuio ken da vad ! »

Hag e stouas da dapoud e vi kazeg. Siwaz, siwaz !... Ar zitrouilhezenn he-doa stoket ouz eur beg-mên hag a oa digoret dre an hanter... An dour a redas bill-bill diouz daoulagad Gwennole, kement e klemmas.

Hogen, eur had hag a oa hanter-gousket en he gwele, e-kreiz ar vodenn-lann, a zihunas a-grenn o klevet trouz ha klemmou, hag hi ken buan d'en em zifreta kuit ahano, gwella ha buanna m'her gouie ober ! Ar Haper, ha n'en-doa ken soñj nemed en e vi kazeg, - hag en enoriou ; siwaz ! kollet, - her gwelas o tilammed kuit. Hag eñ war he lerh ivez ; med re lor e oa e zivesker e-skoaz re al loen besk diousskouarn-hir...

Hag e glemmou a yee en-dro pounnerroh ha war wasaad.

« Setu aze, emezañ en eur zifronka etre daou bennad leñva, setu aze ar pezh am eus kollet ! Na lijer e oa va ebeul bihan, hag eñ c'hoaz o paouez dond er-mêz euz ar vi ! Pebez loen en-dije greet hennez ! A ! Salver benniget !... Daoust d'ar pezh a hellfe va gwreg randona din, evid ar bloaz a zeu e tistroin adarre da Foar Hanter-Ebrel da Gemper-Kaorantin ; ha, kousto pe gousto, eur vi kazeg a brenin c'hoaz, kentoh daou eged unan zoken ; rag sklêr eo d'am daoulagad, mar gellan kaoud eur marh en Enez Sizun, heb mar ebed me 'vo lakaet da vêr e-leh Tonton François.

Ha war gement-se, Gwennole Mellfaout, trist e benn, mezeg ha kouezet e glipenn, a gemeras e hent etrezeg Douarnenez.

Antronoz, pa zegouezas er gêr, en Enez Sizun, pa zisplegas e droiou da Vari Gaid, ar fur-zod a glevas pedennou ha sarmoniou digand e "hini goz", rag homañ, red eo kredi, n'he-doa ket fiziañs er viou kezeg !...

A ! paour-kêz Gwennole Mellfaout ! Kaper droch, droch ken a ree flao !!!

Eur gontadenn euz bro ar Gaperien

Gwechall-goz (abaoe zo ken pell amzer ma n'eus ket mui war an tamm daouar-mañ kalz a dud o kaoud eñvor a gement-se), gwechall-goz eta, ar parrezioù tro-war-dro da Veg ar Raz a oa eur vro dispar, he n'eo ket eur vro dizolo, hep brouskoajou,, heb disheoliennou, heb laboused evel hirio, n'edo ket eur vro hlaharet hag heñvel a-walh, dindan he oabl peurvuia du ha leun a vogidell, ouz Intañvez an Enez Sizun dindan he mantell a gañvou. Nann. Beg ar Raz, d'an ampoent, (ma ranker da vihanna teuler kred war lavarou ar Gaperien, troet eun tammig da fougeal, an darn-vrasa anezo), Beg ar Raz a oa eur vroig koant euz ar goanta, rouanez ar broiou, na petra 'ta ? Koajou braz, prajou glaz, steriou aleiz, hag ar mor don oh ober evel eur gouriz ledan ha flour tro-war-dro d'he reier dispennet. Ha da neuze, ar mor, morse en kounnar, ne ree dalhmad,, heb fulor,, nemed lipad gand e deod flour bezin druz an aochou. Ar steriou hag ar haniou dour a gane, a hiboude en eur vond gand o hent a-dreuz ar foenneier, en eur gildroi dre ar mêziou. Ar hoajou dreist-oll a oa dispar, eun dudi o gweled, kemend a laboused a richane, a hwitelle, en em gare enno.

Muioh c'hoaz ! loened a bep seurt, a beb liou hag a beb ment, a oa o chom dre ar vro, loened gouez koulz ha loened doñv. Red eo ivez lavared penaoz, da neuze, e c'hoarie ar bleiz gand an oan, heb na vije an disterra dispah etrezo, ha penaoz ne oa ket c'hoaz savet buhez fall da ren etre al louarn hag ar yar ; ar haz zoken a gave bepred digor e neiz al logodenn ; en eur ger, peoh a oa e bro dudiuz Kaperien Beg ar Raz etre al loened, braz ha bihan.

Koulskoude, ar peoh-se ne dlee ken padoud pell rag, da neuze e-giz hirio, eun nebeudig a zo aliez peadra evid hada draill e-touez ar wella vignoned, hag evid lakaad dispah da ziwana etrezo... Ha setu ar pez a hoarvezas gand loened Beg ar Raz.

Eur mintinvez hañv, e-pad ma tistage eur pennadig kousked, Roue al loened a oa dirusket dezañ e vruched : ken leun 'oa ar zahad droug a yeas en e greiz ma tihunas euz e gousk, (ha koulskoude n'endo ket kalz a dra, a-boan eun tammig debron), kement eta e kounneras ma hourhemennas kerkent mond e-mêz ar vro, pell diwar e dro, d'an oll loened a zouge kerniou war o fenn, rag d'ar re-mañ e tamalle beza greet an taol, an torfed. Hag ar re-mañ a zentas... Ha petra o-dije greet kentoh pa ne oant ket evid herzel ouz ar Mestr !... Daoust ha n'eo ket furroh d'ar re dinerz ha dister plega d'ar re hallouduz ha kreñv, ha pa ne ve ket gand aon da veza nasket berroh ha gwasket gwasoh ? ? ?

Neuze 'ta, ar paour-kêz loened-korn a reas o zoñj, anken leun o halon, da lavared kenavo da vro ar Gaperien, hag int ken buan d'en em zifreta ahano, an dour en o daoulagad, rag gouzoud a rit :

"Ouz kleñved ar red,
N'eus ket a remed "

O weled al loened-korn o vond kuit diouz ar vro, ar Had-Vraz (Rouanez ar Gedon) a zavas aon ganti ; ha gourhemenn a reas d'h sujidi heulia anezi. « Petra, eme unan bennag, mond e-mêz ar Vro ? Ni n'on-deus ket a gerniou war on tal. » « A ! diskiant, eme ar Rouanez, hag on diskouarn hir, keit ha bizied eur forh houarn ? Ar Roue, dallet gand e vuanegez, a gemerfe anezo evid kerniou, hag a rafe or stal deom. Mez n'her graio ket, rag emaoom o vond kuit ivez d'on tro. Kenavo, bro ar Gaperien ! » Hag hi prim en hent, ha pobl ar gedon war he lerh. Ne oa ket kalz a veh warno, nemed aon o-doa rag roue al loened gouez, rag sur e oant, a-hend-all, da gaoud leun o hov kaol hag irvin, geot ha melchon, da zebri, n'eus forz peleh ez afent.

Koulskoude broutahuz, pounner ha lor e oa an amzer, hag an heol tomm-bero ; eur fulahenn deñval a zave diwar an hent a-uz da bobl ar Gedon. Dizehet o beg hag o gourlañchenn, kemend a boultrenn o-doa lonket, ar gedon a reas o zoñj da gemered eun tammig diskuiz pa zegouezjont dirag eul lenn vraz, eet da hesk koulz gand gwrez an hañv. E oant eno gourvezet, heb dizerra grig, didrouz, pa glevjont eun dra hag a roas dezo kalon da hoarzin. Gleskerien eo a groane etrezo. Gand eur vouez raouliet ha tohor, e klemment evel-henn : « Krevi a raim... Krevi a raim ?? N'eus ket dour. .. Krevi a raim ! »

Ar gedon ne glaskent ket nemeur a dra evid c'hoarzin, ober a rejont ken ma spontas ar raned ganto ; ha kement e c'hoarjont, ken ma faoutas o muzellou, ha ma rogas o begou beteg o diousskouarn.

Hag abaoe kement gad a deu er bed-mañ, a han gand eur beg roget, diwriet, hag eur vuzell faoutet.

Hiniennou marteze a gavo goular va hontadenn ; d'ar re-ze e lavarín : « C'hwi 'zo boazet da dañva gwelloh soubenn ; koulskoude, arabad deoh heugi ; mar ne gavit ket dioh ho c'hoant ar gontadenn-mañ, - unan euz ar hontadennou a ziwan e bro Beg ar Raz, - ha ma tisplij deoh zoken, na lavarit ket ho soñj re uhel, rag droug a lakafeh da vond e-barz ar Gaperien ! »

Daou skolaer

Yaouankig-flamm e oan c'hoaz pa oen kaset da skolaj Pont-e-Kroaz, da derri ma fenn gand latin ha gregaj, ha da zastum ar muia ma helljen a zeskadurez. En em gaoud a ris da veza lakaet, e peb leh koulz lavared, e-kichenn an daou vrasa lakepod a oa e-touez ar skolaerien, hag a helle kaoud neuze c'hwezeg pe seiteg vloaz. Va gwele zoken a oa etre o daou wele, ar pezh ne viras ket ouzin da gousked kloz ha kaled, beteg ar mintin, 'hed an nozveziou kenta da vihanna. Mez a-raog eiz deiz goude, ne oan ket evid serra lagad ebed, gand ar savar hag ar jabadao a veze beb noz, beteg unneg eur pe belloh, gand va daou louarn, o komz eun tammig euz a bep tra, o c'hoarzin kreñv, hag o trailla avalou ken na vije eet skuiz ha kleret o dent.

Eun nozvez, an dra-mañ a oa war-dro eur miz goude ma oan deut d'ar skolaj, an daou gomperig en em zilas en o gweleou heb lavared na grig na ger. « Sell, sell 'ta ! a zoñjis ennon va-unan ; souezusad tra ! Aze zo eun dra bennag e gor ; diwallom hag e welim ! » Ha va daoulagad serret kloz-mik evel pa vijen kousket, e hortozis.

Eur pennadig goude, unan euz al lakepoded, an hini brasa, e ano Lanig, braz, mez seh ha treudig evel pao koad eur forh-houarn, a zeuas da gaoud egile e-tal e wele d'an tu kleiz din-me. Ha setu, evel kustum, ar jabadao o vond en-dro, ha me da zelaou, digor-frank va dioukouarn. « Laouig, a lavaras Lanig d'an hini a oa en e wele, goude eur zell taolet prim euz va hostez, Laouig, me 'zo skuiz-maroc er skolaj ; n'eo ket eur vuhez eo homañ. Morse frankiz ebed, ha bemdez a bep seurt traou da zeski divalloh an eil eged egile... Gwelloh, kant gwech gwelloh eo beza paotr-saout, rag henez, ar paotr-saout :

“Ma rank labourad stard, ne zesk evid kentel
Nemed kentel an heol, an erh hag an avel,
Kentel ar hoad, ar mor, al loar hag ar stered,
Kentel mouez ar hleier ha richan an evned :
Ar gentel-ze avad a dalv kalz a re all.”

E-leh ni, peseurt kenteliou na feller ket sanko ennon ? Petra 'zoñjez ? ha ma'z afem en noz-mañ d'ar gêr ?... » Ya, ya, a respontas Laouig ; er gêr. Lanig, ni a gavo peadra a frankiz a bep seurt hag a vakañsou heb fin. Mad ! kerz d'az kwele, ha peoh ! Warhoaz vintin, pa dinto teir eur e tour ar Pont, buan war-zao ha d'ar gêr ahann. Gwir eo, hir eo an hent, mez

“Piou n'en-deus ket kalon da ober labour vad ?”

Eur gerig bennag a oe lavaret c'hoaz, mez war-bouez ; da hoarzin en em lakajont o-daou, ha Lanig a droas d'e wele, goude beza strillet e skouarn da Laouig, o ! heb ober droug, bezit sur. Skuiz e oan o selaou, hag ar housked a gouezas buan warnon. Antronoz vintin, em hichenn, an daou wele 'oa goullo : nijet e oa an daou labous euz ar gaoued ! Setu amañ penn-da benn ar pezh a zegouezas ganto beteg Kemper ha goude zoken.

*

Koulz lavared hep poan ebed, Lanig hag ar paotr Laou a oa pignet dreist ar voger, hag en em gavet war an hent braz.

« Bremañ, eme Laouig, dre beleh e kerzom ? »

« Gand hent Konforz da genta ; goude-ze, ni 'welo, a respontas Lanig ; ha deom buan ganti, rag, te 'oar,

“Seul kent ez eer en hent, seul kent e tegouezer.”

Braz e oa an noz, prest an deiz da houlaoui ; a-boan ma lugerne c'hoaz ar stered en oabl, pa zegouezas an daou skolaer gand kenta tiez Koñforz. A vare da vare eur hilloh bennag a gane diwar e hlud da zaludi an devez-sul a oa o henel ; hag a-wechou chas a harze hag a chalpe war o lerh. Deut e oa ar poent evid paotred Koñforz da zilammad er-mêz euz o gweleou da strilla o c'hwenn.

Skuizet gand eun heveleb pennad bale, greet re vintin, ar paotr Laou, eur paotr korv braz, penn teo, ledan euz an a-dreñv, a lavaras chom eun tammig a-zav evid tenna an alan ; ha setu on daou baotr azezet diohtu war eur penn-moger, evid d'ar hlazenn beza glebiet oll, gand ar gliz-noz. Laouig a lavare uhel a-walh, en eur stoka e viz ouz e gov : « Hemañ n'eo ket gwall laouen ; trouzal a ra zoken a-wechou, evel pa zeufe dezañ c'hoant kaoud eun dra bennag : ha ni n'on-deus nemed daou wenneg evid oll danvez ! »

Lanig, evid dezañ digeri, da zihenaoui, eur beg ker frank ha... toull-ivern eur forn, a zoñje, stouet e benn. Mez d'ar geriou-ze e savas en eur hoarzin : « Nann, n'on-deus nemed daou wenneg etrezom on-daou, n'eus forz ! Mez paotred fin om... ha ma ne ebatom ket o vond d'ar gêr, da vihanha n'eo ket friko a vanko da vab va zad ha d'e vignon. Deom, Laouig, deom adarre ! »

E-pad ar houlz-se, e veze gwelet ar sklêrijenn en eun ti bennag, ha klevet trouz an noriou o tigeri, rag an deiz a zerede d'an daoulamm euz korn ar Zav-Heol.

“Du-hont, war gern ar menez
Setu-c'hwi o skedi, heol laouen ;
Heol glan, deiz al levenez,
Diskenn e strad teñval an draoñienn !”

Dirag ar Halvar, on daou skolaer en em gav gand eur hoz denig, lemm e lagad, didok, a-boan gwisket c'hoaz, deredet eno, diohtu m'eo savet, da zelled euz pe gorn e c'hwez an avel. En eun taol-lagad, Laouig, (atao mignon braz e gov), hen anavez : « Sell, ar marhadour gwestell » ; ha Lanig a gerz etrezeg ennañ : « Abred emao war-zao, tonton Herri. Ahanta, devez brao or-bezo da vond hirio beteg Kemper ? Warhoaz, mar plij d'an heol c'hoarzin, Laouig, amañ, ha me, ni a hoarzo on-daou, hag a fringo da eured va hoar ! »

« A ! ya, da Gemper, eured ho c'hoar ?, eme tonton Herri, a zo brao avad ; mez naon ho-pezo a-raog degouezoud ha ma karfeh dond d'am zi da weled va gwestell... rag Kemper a zo pell, ha mad a rit mond abred en hent. »

« Deom d'ar gwestell », a respont Laouig.

« Ho kwestell, eme Laouig, kement-mañ a zegas da zoñj din euz ar pezh a dlean deoh. »

« Petra 'ta, paotr yaouank ? »

« Eur gwenneg, abaoe ar wech diweza m'eo bet skolaerien ar Pont o pirhirina e Chapel Itron Varia Goñforz... »

« N'em-eus seurt soñj ebed, eme tonton Herri, mez pa lavaret, e kredan... »

“Neb a bae e dle,
A zastum leve !”

Or paotred a bren eur gwennegad madigou ha Lanig a ro e zaou wenneg :

« N'om ket pinvidig-mor, emezañ, ha ne vo ket tenn deom beza pinvidikoh en eur zond en-dro... »

Penaoz da houde, tonton Herri n'en-dije ket roet gwestell e termen da dud onest evel-se ? - N'eo ket gwestell hepken, mez bara gwiniz, eun dorz pemp lur, a brestas dezo ouspenn.

E-pad ma tebrent, eun tamm a gouezas euz etre o dent : gwelet o-doa o tremen war hent braz Douarnenez, daou vevel euz ar skolaj, kaset war o lerh a-dra-zur, ha karget d'o distrei war o hiz. Heb muioh a dreuz, e lavarjont kenavo en distro d'an tonton Herri, ha setu-int buan ha buan o kemered hent Poullan.

An overenn-vintin a echue er vourhadenn-mañ pa zegouezjont. War ar blasenn, eur vaouez war an oad a youhe a-bouez-penn :

« Pesked fresk ! brilli ! Emaint o vond !... emaint o vond !... »

« A ! da behel emaint o vond evel-se, moereb ? », eme Lanig.

« Da veza gwerzet, va niz !... Brilli ! Deg gwenneg an dousenn, marhad-mad ! Brilli ! Brilli ! »

« Ma ! Ar pezh a jom a vo din, eme Lanig en eur dostaad. Reñkit an diou zousenn-ze din e-touez ar raden a zo e strad ho paner !... Mad ! va moereb koz, mad pell 'zo ! Ha bremañ, deuit ganin d'ar zakristeri, evid ma vo paeet deoh ho pevar real : me eo mevel nevez an aotrou person. »

Ha Lanig kas an hini goz d'ar zakristeri, goude beza roet e besked da Laouig, beh dezañ en em ziwall da hoarzin.

Goude e overenn, an aotrou person a zo o kovés ; ar hloher a zo eet da glask penn euz e lein : an hini goz a jom er zakristeri houllou, e-pad ma'z a Lanig da skei war gador goves an aotrou person :

« Aotrou, mar plijfe ganeoh dond d'ho sakristeri da goves va moereb a zo bouzar ? Na zaleit ket re, rag pell-pell amzer a zo n'eo ket bet va moereb o kovés : eur zahadig a dle kaoud en dro-mañ ! »

Ha Lanig er-mêz euz an iliz buanna ma helle, hag an aotrou person war-eeun d'ar sakristeri :

« En em lakit war ho taoulin, emezañ krenn d'ar vaouez, ma welim. »

« War va daoulin... Gwir a-walh a lavare he niz yaouank, rag, diouz ma welan, dizonjet ho-peus... »

« Va niz, eun niz yaouank din-me ? N'em-eus morse bet na breur, na c'hoar, na tra all ebed zoken euz ar seurt-se... ha penaoz neuze 'mije bet eun niz yaouank ? Daoust hag ar veleien a-vremañ o-deus desket lavared gevier ? »

Koulskoude plega 'reas eun nebeudig he divesker, ha hi da houlen dioustu :

« Ha bremañ ? »

« Bremañ ? Grit sin ar Groaz ha livirit : "Ho pennoz din, va zad..." »

« Tra, tra, la, la, eme ar vaouez o sevel prim ruz glaou gand he imour ; a-wlh a vennoziou evid an taol-mañ, paeet din va fesked da genta a-raog ober din kovés. Pevar real din ! pe me... »

« Pevar real, rei pevar real deoh 'vid pesked ? »

« Ya, ar brilli eo bet ho mevel o kerhad... »

An aotrou person eo a baeas pesked Lanig, mez ar vaouez koz ne reas ket muioh a govesion evid se E-pad ar c'hoari kaer-ze a oa er zakristeri, on daou gomper a errue dija e Douarnenez. Lanig diohtu en eun ti, ha Laouig war e lerh. Eur plah, eur penn skañv a blah hervez an doare anezi, o degemeraz, hag o hasas da zebri en eur gambr war-laez.

Ar brilli a oe fritet druz-druz ken na rede an amann warno, evel ma tiver an eoul poulladet er boestou sardined. Ar hosa gwin euz an ostaleri a oe war an daol, ha meur a voutaill, goloet o hov gand ar bouldrenn, a oe divontet. Red e oa echui koulskoude a-raog na erruje ar mestr en ti. Setu Lanig 'ta gervel ar plah, ha hi ken buan war-laez.

« Pegement eo ? eme Lanig. Me a baeo. »

« Tra, tra, eme Laouig ; va zro-me eo hirio. »

Setu reuz ha dispah etrezo, ma'z oa red d'ar plah lared, evid degas ar peoh, tenna d'ar blouzenn verra.

« O ! nann, eme al louarn fin a oa Lanig ; skoulmit ho mouchouer war ho taoulagad, hag an hini ahanom a bakoh da genta e vo dezañ an enor da furchal e yalh. »`

Setu greet ar pezh a oa lavaret. Ar paour-kêz plah ! Troi da distroi a ra dre ar gambr, e-pad ma tiskenn war bouezig Lanig hag e baotr Laouig, laouennaet o-daou gand eur hovad brilli fresk. Troi ha distroi a ree c'hoaz par erruas ar mestr er gêr, hag hi lamma warnañ : « C'hwi a baeo ! », emezi.

Gwir e lavare : ar mestr a rankas paea ! Evelato, ar plah penn-skañv-se a brenas, en taol-mañ, skiant ha furnez diwar he houst ; rag kaset e oe kuit euz eun ti e leh ma'z edo en he êz.

A-raog an noz, on daou lakepod a skolaerien a zegouezas er gêr e Kemper ; e-leh friko, e oe roet dezo kordenn war o ler. Antronoz da greisteiz, Lanig ha Laouig a oe distroet d'ar skolaj ; ha goude beza, en devez-se, koaniet gand bara seh ha kalz ... mez, va daou gamalad a zistroas d'o gwele, na oa ket bet tommet en nozvez tremenet.

Direbech kaer int deuet da veza o-daou da houde, ha d'an 31 a viz Mae, d'ar bloaz war-lerh, pa'z eas skolaerien ar Pont da berhirina da di an Itron Varia, Laouig ha Lanig, deuet da dud onest evid mad, a baeas o dle da donton Herri, marhadour gwestell e Koñforz !

Fillor Paolig a Gerzatan

Bloaz a vije a-benn dilost miz Genver abaoe ma oa dimezet Per ar Paour gand Soaz an Dienez ; ya, a-benn pemzeg deiz e vije bloaz abaoe ma oant da jom en eur pennti, sko e-kichenn Maner ar Hagn, e leh ma veve aotrou an Didruez. Madig a-walh ez ee an traou en-dro gand an daou yaouank, abaoe o eured, Per o tevezia tost ken aliez ha bemdez, er hêriou a ziwad-dro ; ha Soaz, diouz he zu, oh ober war-dro an tiegez, hag a-hend-all o hounid eur gwennegig bennag ; rag eun tammig edo kemenerez, ha pa helle kaoud labour gwriad, e labour.

*

Siwaz ! da zerhent an Nedeleg, ar gurun a strakas a-zioh o fennou. Penngwennig, ar vuoh hag o-doa gellet prena gand o espern, dre galz a boan avad, Penngwennig a zegouezas dezi mond dre laer da beuri e foenneg Maner ar Hagn ; an Didruez he gwelas, ha prim ! e tennas warni... Tristidigez ! Petra d'ober er pennti bremañ e-pad ar goañv kaled, heb berad lêz, na begad amann ? Dioueret, a-dra-zur ! Mez, mar deo êz lavared ar ger, gouzañv an dra a zo tennoh. Hag ouspenn-ze, neh o-doa a-hend-all rag hebdale, euz an eil devez d'egile, e-leh daou, e vijent tri o chom er pennti.

Eun devez eta war ar genta sizun a viz Genver, Per ar Paour, o tevezia gand Herri ar Marichal, a oa bet kaset gand hemañ da droha mouded du-hont e laneg Poullarbrini. An deñvalijenn en em led abred d'ar houlz bloaz-se ; hag an devezour a oa war-nes diskregi diouz e labour, ha klask penn an hent da vond d'ar gêr, pa welas o tond etrezeg ennañ eun aotrou. Ya, mar plij, eun aotrou ! Kenta m'her gwelas, e kavas warnañ stumm an Didruez ; hag eur zoñj fall a bignas d'ar red d'e benn : ober e stal dezañ. Eun taol marr dre gostez e benn, prim, hag e tiskarfe d'an douar an Didruez, e-giz m'endoa diskaret hemañ, Penngwennig, en deiz all. Mez nann, n'eo ket aotrou Maner ar Hagn an hini eo, rag an Didruez a zo anezañ eur hov braz don ha teo, war eun divesker berr, e-giz eun irvinenn war he gwriziou moan ha bresk, ha du liou e zremm e-giz reor eur billig-krapouez ; e-leh an diavêziad-mañ a zo ruz e vleo, eur fri moan hag hir e-kreiz eun dremm eskernek, ha baro ruz-tan dindan e chink. C'hwez an dev a deu dioutañ, a lavarfed.

« Ahanta, devezour, emaut o vond d'ar gêr gand skuizder da zevez ? »

« Ya, eme Per ar Paour, e varr war e skoaz ; mond a ran da weled penaoz emañ va gwreg ganti du-hont. »

« A ! ya, gwreg az-teus ; bugale ivez marteze ? »

« N'em-eus ket evid c'hoaz. »

« Hag hebdale pell, marteze e-giz ma lavarit. »

« A ! A ! eme an aotrou ruz, c'hwez ar suill ouz e heul ; m'am-bije amzer da jom dre amañ, em-bije goulennet diganit beza ar paeron. Petra 'lavarez ? »

« Me ? O ! me, netra ebed. Nemed marteze va gwreg... »

« Da wreg ? Da wreg 'zo er gêr, mad du-ze. Kleo 'ta, mar karez neuze e vezin ar paeron, hag a-benn eun deg pe zaouzeg vloaz ahann, pa vo deut eur hrennard anezañ, e kasin va fillor ganin d'ar maner. Greet eo ar marhad ? »

« Ar marhad a vefe greet, rag mad a-walh eo marteze ; mez va gwreg ? »

« Eur stal gaer ; da wreg eo da wreg, ha n'eo ket te eo. »

« N'eo ket me, nann, gwir ; mez ar wreg eo hanter ar gwaz. »

« Gaou !... Marhad greet, ye pe nann ?... Ma'z aim du-hont beteg ostaleri Kabouig da gemered eun dra bennag ; rag an tan 'zo em gourlañchenn hirio. Ya pe nann ?... »

« Lakaom ya, neuze. »

Hag ez eont o-daou da eva.

En eur zond er-mêz, a-raog lavared kenavo an eil d'egile, an aotrou ruz a ziskrabas an hent braz a-ziwad horre gand e votez, hag a ziholoas kerkent eur yalhad aour.

« Del ! devezour, setu amañ evid va fillor da zond. Dalh soñj ! A-benn eun deg pe zaouzeg vloaz e tistroin d’e gerhad. Ahann di, mar en em gavez en diouer, goulenn sikour digand paeron da vab, an aotrou galloudeg Paolig a Gerzatan.

Souezet, sebezet, goude kenavo, Per ar Paour a droas kein evid dond d’ar gêr. Kerkent e klevas eur c’hoarz treñk, skiltr, rohellig, hag eun tenn o strakal pounner d’an hekleviou. Distroi a reas e benn : roud na merk ebed mui euz an aotrou ruz ! Tra, tra, nemed c’hwez an dev o flêria muioh-mui. Ha Per prim ahann d’ar gêr, hep chom da varhata, troet e zouez en aon !... Paolig a Gerzatan, soñjit ‘ta, tudou ! Soñjit ‘ta !

*

En eur zegouezoud er gêr, Per ar Paour a gavas, ouz e hortoz, eur mabig bihan nevez-ganet. Mez siwaz ! diwar an taol-ze, e wreg Soaz a jomas pell da stleja war he gwele ; ne deuas ket ar yehed dezi, ha bloaz bennag goude Per a oa intañv ; hag aliez e rankas furchal e-barz yalh Paolig a Gerzatan evid sevel ar paour-kêz minor Erwanig. Hag Erwanig eo e oa bet anvet ar paotrig, heb derhel an disterra kont euz ano Paolig an Daonet, en-doa c’hoant da gaoud anezañ da fillor.

*

Koulskoude Per a jome pouez ar yalhad aour da vehia e goustiañs ; ha n’eo ket hep keuz e wele ar bloaveziou o vond beb eil da goueza e donder puñs distradet an Amzer dremenet ; ha koulskoude Erwanig, dre ma kreske en oad, a greske ivez e furnez : gouzoud a ree e gatekiz euz ar penn d’al lost, ha desket braz en-doa lenn ha skriva a-benn e zeg vloaz. Koulskoude keuz ha glahar an tad, hag emichañs ivez pedennou ar vamm euz lein an Neñvou, a denereas kalon sant Erwan ; ha setu eun nozvez ar sant mad da zihuni Per ar Paour diwar greiz e bennad kousked : « Dihun, Per, ha bez dizaon. Me eo Erwan Heloury

Bet gwechall breutaer,
Mez heb beza laer.²

ar pez a zouezas pobl Treger ! Red eo din diwall va fillor Erwanig, peogwir az-teus roet va ano d’az mab. Bez dizaon, me lavar ! A-walh e vo dit rei da Erwanig ar vaz-mañ, eur vaz korz kleuz ; karg ar vaz a zour benniget ; lavar d’am fillor derhel tost dalhmad d’e vaz, ha pa deuio an diaoul d’e glask, skuilla dour benniget war al losteg-se, ha ni a welo pehini eo ar gwella paeron, pe me, pe Paolig a Gerzatan ! »

*

D’an abardaez-se zoken, Erwanig hag e vaz korz a oa o tond euz ar hatekiz. Degouezet e-kichenn Maner ar Hagn, e klevas eur c’hoarz a-dreñv e gein, ha pa droas dispont e benn, eun diaoul, stummet divalo a-walh evid se, a lavaras dezañ : « Me ‘zo deut da glask mab Per ar Paour da zond da gaoud e baeron. »

« Me eo mab Per ar Paour ; va faeron ‘zo er baradoz. »

« E ! E ! E ! Bet eo er baradoz a-dra-zur, mez n’emañ mui, rag me ‘zo deut kuit ivez war e lerh, eur pennad brao a zo ; ha bremañ emaom du-hont e Maner Kerzatan. Deus buan ‘ta da gaoud da baeron. »

Hag al losteg daonet a fellas dezañ kregi e breh ar paotr ; mez Erwanig a lammas a-gostez, a skuillas warnañ eur berad dour benniget euz e vaz : »Kerz, emezañ, da lavared d’am paeron e tle beza braz a-walh da zond e-unan da gerhad e fillor ! »

Kristenien ! Mevel Paolig a zifretas kuit ahano daved e vestr ! Hag hemañ, pa zegouezas e vevel d’en em glemm heb beza greet e gefridi, a zankas don dezañ e forh houarn ruz etre e haol. Dioustu daouzeg losteg all a oe karget a-nevez euz ar gefridi, hag an Diaoul Kamm a oa lakaet d’o bleina.

² Bet gwechall breutaer, Mez heb beza laer. E iliz ar Minihi-Treger e heller lenn, e latin :
Advocatus, sed non latro, Res miranda populo.

O weled eun heveleb strollad o tegouezoud, Erwanig a lavaras d'ar habiten : « A ! Paour-kêz kammig, berr e harr, ne dalveze ket dit ar boan dond beteg amañ. Greet eo va zoñj ganin da vond ! » Hag eñ en hent gante.

E Kerzatan e oa eur gambr evid Erwanig pa zegouezas. « Penaoz , eme paotr ar vaz korz ; daoust ha n'eo ket kiounid³ a welan-me aze e korn ar mogeriou ? Petra ! Kempennom buan ar gambr-se, lorgnez ; ha buan 'ta ! » Eur vrizadenn dour benniget d'o zikour ! Fentzu e oa o gweled o walhi, o skaoti, o tivergla, o spurad, o tigouinida ; int a lamme a-wechou beteg ar soliou, ken ma chome o bleo rostet stag ouz an treoustou !...

Pa ehanas an abadenn, an Diaoul Kamm, eñ, ne ehanas ket da vlejal evid-se, astennet penn-da-benn gand e gorv war al leurzi. Red e oa d'ar re all sevel anezañ en e zav, ha neuze e oe gwelet e oa hanter-dorret e harr vad gand ar paour-kêz diaoul ! Hag en eur gleved kemend a jolori, Paolig a Gerzatan a zeredas d'ar gambr gand e forh ruz, da lakaad ar peoh, eun toullad mevelien gorneg war e lerh. Seiz mil malis a yeas don en e gorv entanet o weled e gabiten kamm e pe stad edo. E oa o vond da hourdrouz Erwanig ; mez ar paotr a grog buan er vaz korz, hag eur vrizadenn dour benniget ivez d'ar Mestr Braz. Nag eñ a lamme ! Nag eñ a yude kounnaret ken ma tistone forn an ivern dindan e harmou rohellig ! Ar ferhier-houarn o vond en-dro, an diaoulien an eil o toullgorva egile. Tud keiz !

Hag evel-se Erwanig a oe lezet da zistrei d'ar gêr ! Nemed antronoz vintin e savas keuz da Baolig. « Penaoz ? penaoz , emezañ, me, Mestr ar Forn, a vezo devet gand eur mehieg evel-se ? Hag eur fillor din ouspenn-ze ? O ! O ! nann, ne vezin ket emichañs, m'hen tou war va forh, va lost ha va herbiel ! » Hag e tibabas eun toullad euz ar gwella, ar gwas, ar hrisa, ar spontusa e-touez e vevelien, da vond war-lerh e fillor. Ha setu strollad an diaoulien losteg gand o ferhier-houarn ruz da glask penn ouz paotr ar vaz korz.

Piou a oa en o fenn, a gav deoh ?... An Diaoul Kamm adarre, bizier loaieg gantañ, abalamour d'e harr vad hanter-dorret ha bloñset e-pad abadenn ar gambr. Ya, lavared a ree, eñ, e teuje a-benn euz e gefridi d'an eil gwech pe e kollfe e ano, hag e karfe dond da veza kamm euz an daou du.

Erwanig, eñ, d'ar houlz-se, o weled an noz o vond bremaig da goueza war e horre, a reas e zoñj da vond da glask goudor en eun tu bennag. Ar genta dor a gavas e oa dor eul lochennig, savet e gwasked eun dorgenn, war bevonn eur hoad, e-giz eun neiz gwennili savet e gwasked eur post dindan eun doenn. D'ar henta taol e skoas e teujed da zigori dezañ, rag n'eus ket gwelloh eged ar paour da zikour ar paour. Eun intañvez, yaouank c'hoaz, eo a veve el lochenn gand eur verh a zeg pe zaouzeg vloaz, plahig koant deuz ar goanta. Eur skudellad soubenn an avalou-douar a oe fardet d'ar beajour yaouank ; ha goude koan hag e bedennou, o veza ne oa nemed eur gwele en ti, ar paotrig a hourvezas war eun duill plouz.

E oa zoken e-kreiz an noz oh huñvreal d'e vaz korz ha d'e zant patron, pa zihunas gand ar hemend a drouz hag a strak a leunie an ti. C'hwez ar pillou suillet hag an tont devet a gleve ivez, ha neuze o tañsal e wele eun toullad goulaouiou, a zaou da zaou, lugernuz evel tan. Kerkent ma hellas enaoui al lutigenn rousin, neuze e welas piou a ree ar reuz. « A ! gagnou, emezañ, en eur zevel ; c'hwi adarre ? Gortozit ahanon 'ta ! »

Bzit ! Bzit !... An dour benniget er-mêz euz ar vaz korz.

« A-walh ! A-walh ! A ! Yaou ! » a vlejas an diaoulien.

« A-walh ? eme Erwanig ; ya, mez hepken ma teuit a-benn, a-raog ar goulou-deiz, da zevel en-dro d'al lochenn-mañ eur maner euz ar haerra ! »

« A-walh ! ya, ya, ar maner a vo savet ! »

Emichañs sikour a deuas dezo euz Kerzatan : mañsonerien, kilvizien, heskennourien, marichaled 'oa anezo ; beteg ar mintin ne gleved nemed mein o trailla, morzoliou o skei didruez, heskennou o skrignal o dent, anneviou o tiston, ha me 'oar, me !.. Ar pez a ouzon eo, pa strinkas an heol-mintin e vannou kenta dre an oabl, en-dro d'al lochenn, e oa war-zao eur maner dispar, mogeriou uhel, gand dorjoug braz, en-dro dezañ. En eur horn-tro, an diaoulien a hortoze beza lezet da vond ahano. « Tostait amañ, gagnou ! », eme Erwanig hag e skuillas warno eur vrizadenn diweza ! Eur jolori spontuz a zavas

³ kiounid : kevnid.Izellouh : o tigouinida.

etrezo, kerniel an eil o toulla egile. Gwasoh c'hoaz ! An hini kamm, brevet e harr vad dezañ etre daou pe dri damm, a oa red dezañ beza kaset d'ar gêr war eur hravaz daoubenneg.

En eur ober an nozvez-se, a-benn ar mintin, Erwanig en em gavas koseet ha deut da zen yaouank ; merh an intañvez ivez 'oa anezi eur grouadurez kaer, eur boked a yaouankiz. Eur pennadig goude, amzer da Erwanig da vond da glask e dad, e oe eureujet paotr ar vaz korz gand e zousig koant. Lod a lavar zoken eo sant Erwan Heloury a ziskennas euz lein an Neñvou, da skoulma an diou galonig yaouank. Ar pezh a zo gwir da vihanha 'oa penaoz, en o maner, nag Erwanig nag e bried ne ankounahaas morse e oant bet paour gwechall. Hag o-daou ez ejont war-eeun-tenn d'ar Baradoz, pa varvjont, dre zikour sant Erwan, petra bennag ma oa bet Erwanig ar Paour, "Fillor da Baolig a Gerzatan".

Blaz ar jistr

« Neuze 'ta, Herve Stroalleg, e hellan fizia warnoh ? »

« Ya, ya, aotrou ; ken gwir ha ma'z eo c'hwi ar mêt ganeom du-mañ e parrez Poullbrug, e kasin deoh eur varrikennad jistr ; mez, klevit mad, hein⁴ ! jistr euz ar gwella, n'eo ket jistr avalou pin na karotez gwenn. Ne vezo ket eur fall deoh doura genou ha korzailenn gand hennez. Bezit fiziañs ennon, aotrou mêt, rag, evid ar wech, ni 'zo bet daou vignon braz ha mignoned eveldom-ni ne glaskont morse en em douza etrezo. Ha koulskoude, sellit, gwelloh e vefe ganin ma hellfeh kaoud eur pennadig amzer evid dond, hoh-unan, da dañva ar jistr du-mañ. »

« Tra, tra, Herve Stroalleg, n'hellan ket mond ; n'em-eus ket amzer. Mez fizia 'ran warnoh, mignon koz ; dibabit din ho kwella jistr, ha bremañ kenavo ar henta gwelet. »

« Ma ! Kenavo, aotrou mêt, kenavo eur wech all ! ». Ha goude eur stard daouarn, an aotrou a zistroas d'e labour ; ar houër a bignas en e wetur, a zistagas eur hwitelladenn hir, ha *Baill*, ar marh dall, heb gortoz an taoliou skourjez da larda e gostezennou dezañ, a gemeras penn an hent a gas euz Douarnenez da Barrez Poullbrug.

Hag en eur ober hent, evel ma vleine *Baill*, e varh dall, Herve Stroalleg a zoñje : « Deom d'ar gêr da genta penn, evid distroi goude-ze da Germoal, rag gwelloh merouri eo Kermoal eged Kerdrizeg, da vihanna evid kaoud jistr, rag evid ar pastur hag an ed ne lavaran ket, feiz, nann ! Huo ! huo ! 'ta ! Baill, petra 'zoñjez, paour-kêz dall, ha ne welez ket emaut o vond da doullbenna e-barz ar foz ? Ahanta, Baill droch, deom gwellohig ganti. Arabad kousked a-hed an hent braz, peogwir, gouzoud a rez, e rank da vestr mond en abardaez-mañ beteg Kermoal evid tañva ha dibab eur varrikennad jistr, jistr euz ar gwella, evid an aotrou mêt ! Sou ! Baill dall ! Sou 'ta ! »

*

Pa zegouezas Herve Stroalleg e Kermoal e oa tostoh da bemp eur eged da beder eur. Mamm ar merour, du-ze, Katellig Fri butun, a oa da vad oh ober tan dindan eur pohouarnad patatez plusk hag all ; e-barz kogn al ludu, dindan an anduillenou, ar yontr koz, bouzar hag hanter-zall, relegou amzer ar Chouanted, a zache war e gorn-butun berr ar muia ma helle, ar moped o tua e fri dezañ.

« Emañ koan war an tan ? Hag ar jistr ? Pe vlaz a zo gantañ ? », a houlennas Herve en eur zond en ti. Ar yontr ne fiñve ket ; e gorn ne ehanas tamm da zislonka bouillou-moged. Katellig, war he daoulin e-tal an oaled, ne ehanas ivez kennebeud da reñka trojennou kaol seh en-dro d'he fodhouarn. « A ! emezi, va mab, evdi lod euz e Houel Mikêl, en-deus lakaet a-gostez evidoh eur varrikennad jistr bennag, evel kustum. Du-ze emaint, e-barz an ti koz en tu all d'al leur ; daou seurt a zo euz ar jistr, c'hwi 'welo. »

« Pehini eo ar gwella ? », a houlennas c'hoaz Herve en eur gemered alhwez an ti koz.

« Feiz d'am Doue ! eme an hini goz fri-butun, diêz a-walh eo gouzoud. Tañvait da genta, ha grit ho tibab goude-ze ! »

« Mad ! Mad ! Hag e rin », eme Herve en eur dreuzi al leur.

*

E-barz an ti koz, e wel diou varrikennad tennet a-gostez. N'eus ket da fazia : ar re-ze eo e re. Tapoud a ra krog er skudell diwar eur skabell gamm ; ha war bennou e zaoulin etre an diou varrikenn, e tiskenn eur skudelladig euz an hini genta. N'emañ ket seizdaletoh evid eva, en eur pennad, beteg ar berad diweza en-doa tennet. E zorn a dremen mond-dond war e gov ; e deod a dro en e henou, hag a deu war e vuzellou da bourmen. Komz a ra outañ e-unan : « Mad ! Mad eo ! Pod an dienn ! » Hag eur pennadig e chom da zoñjal, evid rei amzer d'ar jistr da ziskenn gand e hent :

« Jistr seh eo hennez ; skraba 'ra an diabarz, ha dre ma kosaio, e teuio da veza sklêr, tostig e-giz dour-red. Jistr euz ar henta evid debri, mad da zikour an den da gaoud naon... Paotred diwar ar mêz a

⁴ hein : galleg.

hell en em ober dioutañ ; mez paotred kêr, liou krampouez Kemper war o beg, pa vo lonket eur picherad ganto euz an evaj-se, a ! malloz-ruz ! setu neuze koz tudigou hag a vranskedillo war o divesker ! »

Eun taolig tro da bluenn an eil barrikenn, evid leunia a-nevez e skudell. Pebez liou ! pebez c’hwez ! ha pebez blaz ‘ta ! « Dous e-giz mel ! Me ‘gred e rafe gwelloh hemañ stal an aotrou mêt ; rag e kêr n’eus, koulz lavared, nemed lipouzerien, hag ar jistr-mañ ne ra ket muioh beh war ar penn eged lêz-dre-zienn. N’eus forz, ma ne vije red din selaou nemed va hoant va-unan... »

Hag e tiskenn c’hoaz eur skudellad leun-tenn euz ar genta barrikenn. « A ! koulskoude, bourdachou ! e karfen roi dezañ euz ar gwella ; mez gouzoud pehini eo ar gwella, aze emañ an dalh. An aotrou mêt, a gav din, a vefe gwelloh gantañ ar jistr seh, eun tammig c’hwerro, dre ma skrab en eur ziskenn... Mez n’emañ ket e-unan er gêr ; n’eus forz penaoz, eun hanter dousenn itronezed pe dimezelled, (me n’ouzon ket disheñvallaad ar varhadourez-se), a zo en e di d’an taol izella : e hini goz, e hoarezed, e verhed, ha me ‘oar-me !... Dond a ra da zoñj din, e blah loudourenn a jome er-mêz a gont... Hag ar merhed, ar re-ze a gav ken mad an traou dous, ma ‘m-eus c’hoant da gredi e redfent d’en em veuzi d’ar mor, ma vefe bet ar mor dour-vel e-barz. Neuze, kas dezañ jistr dous, e verhed a zizeho buan ar varrikennad... Gwasa ma vez, gand ar jistr dous e vez tommet d’an dud, muioh muoh c’hoaz d’ar merhed eged d’ar wazed... O ! tra, tra, arabad din mond da vernia war va houstiañs pehejou merhed an aotrou mêt, rag eur zamm brao am-eus gand pouez va re va-unan, ha peadra din d’ober ganto, siwaz, Doue ! »

Hag eh ev e skudellad.

« Ma ! Tanfouleh⁵ brein ! Aze n’eus na rag na perag ! Evidon-me, ar jistr seh a zo treh d’ar jistr dous. Koulskoude marteze e klevin trouz ha rebechou. Aliez, da weled an aotrou mêt, e teu genaouerien euz Pariz, Gallaoued begou fall !... Ha, pa ne vezer ket boazet outañ, ar jistr seh a gaver blaz c’hwerro dezañ ; e-leh ar jistr dous a ra e-giz allazig d’ar stomok.

Hag ar paour-kêz Herve Stroalleg a gendalh da dañva an daou seurt jistr, hag int, o-daou, mad-dreist.

« Satordallig ! Biskoaz kemend-all ! »

« Petra ‘hoarvez ganeoh, Herve ? »

Ar merour, Gwillou Tortig-Kamm, an hini a zo distroet d’ar gêr euz ar park gand e gezeg, hag a zo deut da gaoud ar “mestr”.

*

« Te ‘zo aze ? Hag ar yehed, niz Gwillou ? »

« Mond a reom en-dro ganti e-giz diagent. »

« Degouezet mad out, Gwillou ; oh ober eun dibab jistr emañ evid Ludueg, on aotrou mêt, ha, feiz d’am boutou ! nehet a-walh ez on ! »

Ma ! tonton Herve, va daou seurt jistr ‘zo mad o-daou. Em barrikennou n’eus ket jistr badezet ; va jistr a zo dour avalou, n’eo ket dour puñs, na dour-red. »

« O ! gweled a-walh a ran... med lavar din da hoant, te ! »

« Piou, me ? Feiz ! ganin-me eo kerkoulz kaoud euz an hini seh. N’eus ket e bar evid gwennaad an dent ; ha, pa vez greet “flip” bero gantañ, eur banne hini kreñv en e douez e plij kenañ-kenañ da vouzellou al labourer. »

« Ha koulskoude ar jistr dous a zo magadurez, ha yahusoh eo ivez, war am-eus klevet... Pehini da gas d’al Ludueg neuze ? »

« Aze ‘mañ an dalh, tonton Herve ! »

Hag ar skudell a gemer hent o genou, ha meur a wech c’hoaz ; med penaoz ober ? »

« Pep ! pep ! eme Tortig Kamm. Hag en eur ober eur hemmesk ganto o-daou ? »

Med ar hemmesk ne dalvezas netra, netra !

⁵ Tanfouleh : ? Tanfoeltr.

« Gwelloh eo pep anezo en e gostez. N'eus nemed eun dibab da ober etre daou. Kement-se n'eo ket gwall-denn. Kenavo, tonton Herve ! »

Ha Gwillaouig d'e varchosi da voueta e gezeg.

*

Med Herve Stroalleg ne flachas ket diouz kostez e varrikennou, hag an noz a deue. Eur wech kouezet an deñvalijenn en-dro dezañ, e savas koulskoude diwar e zaoulin.

« Ma ! emezañ, ar peb gwella am-eus da ober eo goulenn heh ali digand va gwreg, ha distrei warhoaz vintin. »

Reñka a reas ar skudell war ar varrikenn ; e dok, avad, a chomas war al leurzi, hag, en eur vond er-mêz, e tizoñjas alhweza an nor war e lerh. Siwaz ! re a draou a oa o tañsal en e benn !

*

Daou hent a gas euz Kermoal da Gerdrieg ; an hent braz ez eus kalz a dro gantañ, e-leh ar wenojenn eeun-tenn a droh kalz berroh, nemed ma tremen dre "Lanneg Toull ar Horrig".

Herve Stroalleg a gemeras ar wenojenn, e-giz m'edo boazet ; ha neuze, an noz a oa sioul ha kaer, hag al loar a lugerne sklêr en he hann. An avel a skube dirazañ war an oabl koumoul du a-doulladou, hag a hweze war ar paour-kêz Herve, ken didruez ma kornigelle euz an eil tu d'egile :

« Avel daonet, emezañ, ne deu ket mez dit ? Brao eo dit gwallgas eun den ken skuizet e zivesker outañ e-giz ma'z on. »

Hag e tiskoueze e zaou zorn d'al loar, e-giz p'en-dije bet c'hoant da zistaga eur jodad, eur javedad bennag ganti !...

E-kreiz al lanneg, ar wenojenn a dremene dre gichenn eur menhir, eur peulvan uhel-savet, anvet "Biz ar Hornig", pe c'hoaz "Toull ar Hornig", rag an oll dre ar barrez a grede stard e oa kleuzet ar peulvan en diabarz, ken ma tistone e-giz eur hloh pa skoed war e du diavêz, hag e kleuz ar menhir e oa o chom eur horrig, ken kriz e galon ha mein e di, hag a bep seurt siou fall en e greiz. Gwechall endoa laeret meur a blah yaouank diwar-dro, hag Herve en-doa soñj penaoz, pa oa bihanig, e yontr Laou-Pik a oa bet kavet beuzet gand ar Horrig el lanneg-se, e-barz eur roudenn-garr ha ne oa ket muih a zour enni eged n'en-defe gellet eva. Ha koulskoude Laou-Pik ne eve ket kalz a zour !

Hag a-greiz kement-se, Herve ne goll ket kalon :

« Ar Horrig, emezañ, n'en-desu krog ebed nemed war ar beherien. ha me, tanfoeltr, me 'zo didamall va houstiañs ! »

Ha koulskoude, en eur vond gand e hent, eun diaoul ivern bennag a lavare dezañ :

« N'az-teus ket soñj petra 'teus greet abaoe da Bask ? Epad an overenn-bred ne rez nemed mond da eva eur chopinad a-hed ar sarmon ; ha fest ar vaz az-teus bet koaniet eur wech da wreg ganti, abalamour ma tañgnouze re. Ha neuze bremaig az-teus evet, da vihanna, eur baillad jistr diwar-goust da verour ha greet koll dezañ. Laer ! Ever ! Riboter ! Kanner ar merhed ! Boued ar groug ! Daonet ! Milliget ! Mab an diaoul braz hag e gerniel !... »

Ha setu Herve Stroalleg o krena an derzienn, rag re wir eo, siwaz ! pehet en-deus ! Hag e talh da vond gand ar wenojenn, lann berr en daou du dezi, a-wechou eeun, a-waechou a-zehou pe a-gleiz, rag an avel, emichañs, a ree dezañ souza.

N'eus forz, a-raog bepred ! Hag, evid krena nebeutoh, e kan hag e c'hwitell, peb eil tro, eur ganaouenn ha n'en-doa bet morse spered a-walh nemed evid deski ar poz kenta anezi :

Selaouet oll ha selaouet ;

Tran lar di reno,

Eur zon a zo nevez-savet`

Tran lar di ra lan la,

Tran lar di reno !...

Emañ sko ar menhir : n'eus mui nemed eur hammed bennag da vuzulia, hag e vezo en em dennet kuit dibikouz !

Med, siwaz, Herve, e-pad ma tiskane “*Tran lar di reno*”, da vihanna evid ar seitegved gwech warn-ugent, pouloudefez⁶ ! setu Herve Stroalleg a-stok korv o vuzulia an dachenn, hag e fri tougn oh arad douar kerkoulz ha soh an alar, ha, gwasa ma zo, kement-se hep dezañ gouzoud netra krenn penaoz na perag.

« Savom adarre, emezañ, a-barz koueza mui ! »

Ya, med eur zamm iskiz a bouez war e ziouskoaz hag e rank chom da bokad d’an douar. Droug ennañ, e tiswink muioh-mui ; med diouharr dir a zo skoulmet en-dro d’e houzug ken en-deus poan dialana, hag eur goz vouezig a gomz outañ, lemm ha rohelluz e-giz rojou *Karrig an Ankou* o wigoura e-pad an nozveziou goañv :

« Petra, mignon Herve, penaoz c’hoantaad tremen e-biou d’am zi heb dond da lakaad eur horbadig butun gand ar Horrig ? »

« Va buhez ! N’am lazit ket ! Va buhez ! »

« Laza ahanout, mignon paour, an dra-ze n’emañ ket e-barz. Bezom mignoned kentoh, petra ‘lavarez ? »

« O ! Ya, Gwerhez, santez Anna, maeronez va gwreg ! Lezit ahanon, aotrou Korrig, mall eo ganin distroi da gaoud va gwreg... »

« ... Evid larda anezi gand treujenn ar skubelenn, evid degas dezi muioh a hoant kousked ? »

« Va buhez ! Forz va buhez ! Ne rin ken ! »

« Gwaz a ze neuze, rag ar gwragez oll ezomm da dañva aliez, gand o chouk, blaz ar geuneudenn. »...

Me ne ran forz, mez en abardaez-mañ eo du va fenn ; deus ganin d’am zi, hag e konti din kontadennou mamm-goz d’am diskuiza. »

Ar Horrig a lammas en eur berniad douar-goz, a frankaas an toull, hag a zachas Herve baour, diwar bouez e vleo, ken na zegouezas e-kreiz ar menhir !

*

Aotrou Doue ! Biskoaz kemend-all a binvidigez ne lugernas dirag daoulagad Herve Stroalleg ! Ar mogeriou ‘oa goloet gand peziou aour ha mein fin, beb eil reñkad, hag al leurzi ‘oa greet gand peziou ugent real ; war an daol, goloet gand eun doal ; eun doucher⁷ billeji-bank hag arhant paper, e oa eur varrikennad gwin-ardant ; ar sklêrijenn a deue en ti n’ouzon kalz mui dre beleh an tanfoeltr !... Herve Stroalleg a jome sebezet oll.

« Diwall da laerez netra ! » eme ar Horrig.

« Aon ebed da gaoud, eme Herve ; biskoaz n’em-eus laeret talvoudegez eur spillenn... »

« Hag ar jistr laeret bremaig diwar da verour ? »

« Hemañ a oar pep tra », a gredas ar mezhvier.

« Alo, mignon, kas din ar zon a deue ganit bremaig. »

« Nann ! n’ouzon ket kana ! », eme Herve, droug ennañ.

« Nann ? N’ouzout ket ? Ma ! en em denn ahann, mar gellez. »

Ker buan, an noz a deuas en ti, e-pad ma tiskorde ar Horrig kriz da hoarzin. Herve a ya d’ar voger, a hoari an dro dezi ; mez poan gollet ! N’eus toull dor ebed, ha kaer en-deus troi ha distroi, ne gav digor ebed. Skuizet o klask, e kouez d’an douar, hanter-varo, e-pad ma klev ar Horrig digalon o c’hoarzin goap !...

*

Antronoz vintin, Herve Stroalleg a oe gwall-nehet, pa zihunas en e wele-kloz, e-bazr Kerdrizeg :

« Ha koulskoude, emezañ, n’eo ket huñvreal am-eus greet. Nann, rag droug am-eus c’hoaz em bleo, hag em divesker... Aotrou Doue !... Hag ar Horrig ?... »

⁶ pouloudefez : ?

⁷ doucher : ?

« Petra ? mezhvier, gourlañchenn frank, lonk-e-zizun, koll-bara, dihoulliez⁸, debr-spered, torr-penn ? N'out ket eet c'hoaz d'ar bed all, amprevan ? Hag eur hristen a dlefe distaga korvajou evel-se ? »

E wreg eo a gomze dezañ en doare-ze, en eur weled anezañ o tigeri e zaoulagad ker frank ha p'endije bet c'hoant da zebri yod-kerh pe grampouez ganto.

Kerkent e teuas en ti Jermen an Troadeg, an deveziour koz, bet o voueta ar hezeg.

« Ahanta, eme an deveziour, en eur hoarzin, panevedon-me, Herve, e vijes c'hoaz du-ze e-tal menhir "Toull ar Horrig". »

« Ya, eme ar wreg, pehed eo bet deoh koll hoh amzer da zegas an toull-jistr-se d'ar gêr deh d'an noz. »

« Ma ! eme Jermen, poan a-walh am-oa bet gantañ kement m'am-oa goust da hoarzin. »

« Ha koulskoude ne oa ket peadra », eme Herve.

« Eo da ! Red e vije bet deoh beza bet o weled anezañ o troi en-dro d'ar menhir, o klask tremen dreizañ... »

« Tremen dre ar peulvan ? »

« Ya... hag o youhal a-bouez-penn e oa klozet e-barz gand ar Horrig ! »

*

Herve Stroalleg a zistagas c'hoaz eur pennadig kousked. Pa zavas, e oa dizoñjet e huñvre gantañ ; n'en-doa mui soñj, zoken, pe vlaz 'oa gand jistr e verour Gwillou Tortig kamm, e Kermoal du-ze, en tu all da "Lanneg Toull ar Horrig".

⁸ dihoulliez : ?

Yann an Hinkin hag an aotrou Furzod

Etre Gwaien ha Beg-ar-Raz e oa gwechall-goz kalz a vaneriou, hag hizio c'hoaz e heller gweled o mogeriou hag o zouriou hanter razet, debret gand ar gwall-amzer, goloet gand an ilio. Maneriou paour, c'hoarvezet a zo ganto ar pezh a hoarvez gand an dud koz-se a weler a-wechou krommet o izili, daoubleget o horv dindan samm an oad ha pouez ar vuhez.

Mad ! setu amañ trubuillou eun aotrou a oa o chom en unan euz ar maneriou-ze ; trubuillou hag a zo bet displeget din, eur pennadig a zo, gand va amezeg Herri ar Marichal.

An aotrou-ze 'oa lesanvet Furzod, abalamour ma ne veze morse na fur na sod a-walh hepken ; o chom edo e Maner ar Hastell C'hwitell, e leh ma oa eur wezenn gleuz oh ober siminal, evel ma lavare an teodou-fall ; mez an dud fur hag onest evel dom-ni n'eo ket c'hoaz debret kement-se ganto. Ar pezh a zo gwir-bater koulskoude eo e rede brud fall diwar-benn aotrou hag itron ar Hastell C'hwitell, beteg ma lavared e veze aliez, aliez (piou 'oar ped gwech bemdez ?), e veze komzou treñk ha c'hwero, taoliou dorn, krabisadennoù ha sachadeg vleo etre an aotrou Furzod hag an itron Fuzrodez, e wreg.

Tostig da Gastell C'hwitell e oa o chom Yann an Hinkin.

Yann ne oa anezañ nemed eur hreiz-denig, na braz, na teo, na ledan euz an a-dreñv ; na bihan, na moan kennebeud. Mez Yann n'oa ket hir e ziouskouarn ; finnoh e oa eged Alanig al Louarn, hag e zah a veze dalhmad leun-tenn. Kent-se, n'eo ket eur souez, tamm ebed, ma lavare ar Gaperien euz Yann : « Hemañ a zo eun *ebeul* anezañ ! »

*

Ti Yann a oa greet e vegeriou hag e doenn gand plouz keid ; eul lochennig n'edo ken, mez frank a-leiz evid e berhenn hag e wreg. Da vihanna ne oa ket eur gwennegad dle war e horre, ha gouzoud a rit oll :

« Gwelloc'h eo *heb dle* bara heiz
Eged e *prest* bara gwiniz. »

Yann 'ta ne oa ket pinvidig-mor ; koulskoude, goude diskonta e di ha Katellig Fri-Minaoued e vaouez, e chome c'hoaz gantañ e vuoh Moumoutig. Mez war douar Yann ne oa ket kalz a bastur, treud e oa ar peuri gantañ ; e-leh e park an aotrou Furzod, e amezeg, e oa melchon gwenn, tener, eur brao o gweled. Pa veze o tiwall he buoh, Katellig a veze gwelloc'h ganti distaga eur pennadig kousked, hag, e-pad an amzer-ze, Moumoutig a zizoñje a-wechou beteg mond da ober eun droig e-touez melchon gwenn an aotrou Furzod. Hemañ, kerkent ma anavezaz laeroñsiou ar vuoh, a redas prim da gaoud he ferhenn :

« Te 'oar, Yann, diwall mad da vuoh, emezañ ; rag, mar pakan anezi c'hoaz war va zraou, ne vo ket kosoh, ha diwar an taol-ze, e helli kas anezi da farda sklipou ! » Hag eñ kuit, ar Furzod, rog an tamm anezañ, tudou !

Antronoz, Katellig Fri-Minaoued ne gouskas en eur ziwall ar vuoh, rag katekiz ha sarmon he-doa bet piz digand Yann. Mez siwaz ! Petra 'faot deoh ? Gouzoud a rit, ar voazamant fall a vezo atao treh abred pe ziwezad. An daou pe dri devez goude Katellig a zizoñjas adarre da gousked ; mez Moumoutig, hi, ne zizoñjas ket da vond buan da dañva melchon gwenn ar maner. Hag ar pezh a oe gwasoh c'hoaz, an aotrou Furzod a zegouezas war an taol, e fuzul gantañ, hag a gasas buoh Katellig d'ar bed all. Katellig, en eur leñva evel eur Vadalen, a zeredas d'ar gêr da gas ar helou glaharuz-se da Yann.

« Foei ! eme hemañ, ar pezh 'zo c'hoarvezet a zo degouezet ha n'emañ ket mui da zond. E leh chom amañ da ouela kañv d'am buoh, pe e leh koll va amzer, Katellig, da uza ar gordenn war da gein pe da dorri trojenn ar valaenn war da zargreiz, eo gwelloc'h ganin mond da gerhad Kontellvraz, kiger ar Pont, evid diskrohenna Moumoutig. »

Antronoz vintin, Kontellvraz a zegouezas, e gontell hg e stalikerez kiger gantañ, ha Moumoutig ne oe ket seizdaletoh evid beza diskrohennet. Pa oa echu ar stal, e-pad m'edo Katellig ou ouela d'he loen paour :

« Bremañ, kiger, eme Yann, me n'am-eus ket arhant peadra da baea ahanout. Kent-se 'ta, rannom ar vuoh etrezom on-daou : ar hig a vo dit, rag me ne faot ket din debri Moumoutig, va loenig paour ; ar hrohenn a zalhan ganin hepken. Kenavo, kiger. »

Ar higer, e hellit kredi, a zamm ar hig en e garr hag a lavaras "yao" etrezeg ar Pont, laouen an tamm anezañ.

*

Deom bremañ da weled petra raio Yann an Hinkin gand krohenn Moumoutig.

Kerkent ma oa troet e gein gand Kontellvraz, e-pad ma oa Katellig en dizesper o yudal a-bouez-penn : « Emaom rivinet, rag maro eo Moumoutig ! » Yann a lakaas e voutou ler-goad en e dreid (pe e dreid en e voutou ler-goad), a wiskas e dok sul, a ziskennas e benn-baz diwar e arbel, a zamm ar hrohenn war e ziouskoaz... E oa o vond er-mêz an ti pa houlennas e wreg outañ, en eur zifronka :

« Yann, da beleh emaout o vond ? »

« Da beleh ? eme Yann, d'an ivern da ginnig chupenn Moumoutig da Baolig, evid gweled ha ker e preno anezi diganin ! »

Koulskoude n'eo ket hent an ivern a gemeras Yann, hent Pont 'n Abad an hini eo, rag antronoz e oa foar vraz e kêrbenn ar Vigoudenned. Eur pennadig brao a hent a oa da vuzula ; ha pa zegouezas an noz war e horre, Yann en em gavas en eur hoad don, e-harz eur wezenn uhel. A ! pa lavaran eur wezenn, va zud, honnez a oa unan ! Brankou he-doa da zisheolia ouspenn eun devez-arad douar endro dezi. He bleñchou a oa uhelloh eged daou dour Sant Korantin bern war vern ; he garr a oa teo, teo, mez kleuz en diabarz.

Hogen ar wezenn gleuz a oa brudet fall dre ar vro, rag en he hleuzenn, ma oa red kredi ar pez a lavared, e teue bemnoz laeron da farda o zoubenn ha da loja. Yann en-doa anaoudegez a gement-se, mez evel ne oa ket den da sponta rag e skeud, e reas e zoñj da dremen an nozvez e kleuzenn al laeron. Ha setu-eñ mond e-kreiz ar wezenn, reñka krohenn e vuoh en-dro dezañ gwella ma hellas, ha gourvez en eur hornig tro, goude beza dibunet eun tammig paper. Yann, skuiz-maro e zivesker outañ, ne zaleas ket da gousked e-barz krohenn Moumoutig.

War-dro an hanternoz, eun trouz iskiz a gasas ar housked diwarnañ, hag ar paour-kêz den, heb kredi flach an disterra, a zavas en e goañze da zelled : e oa al laeron o tond d'ar gêr. Da genta 'oa eur pikol den, eur zahad aour gantañ, hag en e houde, eur mell chalopenn⁹, eur zahad arhant war e gein ; ha war e lerh, eun tanfoletr hini gand eur zahad mouniz. Eun tammig goude an tri laer-ze, e tegouezas eur pevare, ha gantañ eun hanter ejenn hag eur pod-houarn heñvel a-walh ouz eur baill-kouez.

E-pad ma oa al laer keginour oh aoza ar zoubenn, an tri all a ziskoulmas an amarou war o zeier evid diskouez pe ar mouniz, pe an arhant pe an aour o-doa laeret en o nozvez. Ouz o gweled, Yann an Hinkin a haloupe meur a zoñj en e spered : « Che ! emezañ, ma teufen a-benn da veza mestr war an traou-ze !... »

Eur wech debret koan ganto, hag evet meur a bicherad jistr, meur a flipadenn gwin-ardant, (rag jistr ha gwin-ardant a oa kuzet er wezenn gleuz), al laeron a yeas skañv o zeod en-dro en o beg. Unan a-dreist ar re all, distagellet gwelloh emichañs, a gonte penaoz e oa deut a-benn da laerez e zahad mouniz : en eun iliz e oa bet o furcha kefiou ar zent, ha kef braz ar zakristiri en-doa bruzunet. Tost 'oa bet dezañ beza paket koulskoude, rag ar hloher a oa degouezet warnañ p'edo o tigeri kef sant Alar, mestr ar hezeg.

« Ha n'az-peus ket bet aon ? » a houlennas ar re all ; « ni ne gredom ket c'hoaz ober gaou ouz Doue hag e zent. »

« Aon ! eme egile. O ! tamm ebed ! N'on ket bet seizdaletoh evid liamma e zaouarn d'ar hloher a-dreñv e gein, hag evid e vounta en eur gador-goves e leh em-eus prenet an nor war e horre. O ! me n'eo ket aonig an tamm ahanon ! Me ne spontfen nemed rag an diaoul, mez peogwir n'eus diaoul ebed !... »

⁹ chalopenn : ?

Ken buan Yann a deuas eur zoñj en e benn : sponta al laeron. En eun taol e savas, hag e lammas e-kreiz ar pevar lakepod, krohenn ar vuoh en-dro dezañ atao ha kerniel Moumoutig savet pik war e benn !... Ar gurun, o koueza war ar wezenn n'he-defe ket greet ker braz aon d'al laeron.

« An diaoul ! », eme laer ar zent.

« An diaoul ! Kerniel en-deus !, eme unan all.

« An diaoul ! Sell e lost hir o ruza an douar ! », a lavaras an trede.

Paotred paour ! Int a drohas kuit diouz ar wezenn gleuz ! Ar pevare a oa eun tammig kamm d'an tu kleiz ! ma Doue ! Eñ a choue e vuhez, hag a houlenne sikour, hag a lavare d'ar re all gortoz anezañ. Siwaz ! den n'her selaoue, ha me 'gred e torras e benn o skei ouz eur wezenn bennag. Ar pezh a zo sur, hini ebed euz al laeron ne zistroas d'ar wezenn gleuz hag evel-se o laeroñsiou a jomas gand Yann.

Tri pe pevar devez a lakaas Yann da gas sahadou al laeron d'ar gêr, mez gand amzer ha pasianted e reer meur a dra, hag evel-se eo e teuas Yann a-benn euz e daol ha da gas zoken da Gatellig eun tañva euz kig soubenn al laeron.

*

Mez n'edo ket peadra kaoud arhant kemend-all, red e oa c'hoaz muzula an teñzor. Setu ma tiwanas eur zoñj e penn Yann ; hag eñ, antronoz vintin, lavared d'e vaouez : « Bremañ, Katellig, kerz da vaner ar Hastell C'hwitell da gaoud an aotrou Furzod ha goulenn digantañ eur gastell¹⁰ da vuzula an aour am-eus bet evid krohenn Moumoutig. »

Hag ar wreg en hent diohtu. Mez er maner an aotrou a respontas d'he goulenn penaoz Yann n'edo ket fur a-walh pa lavare traou er hiz-se.

« Eo avad, eme Gatellig, ema e benn gand va hini koz, ha bez' ez eus du-mañ, e toull ar geuneudeg, eur berniad mad a draou. A bep sort peziou a zo eno, lod brasoh, lod bihannoh ; unan a zo melen, brao, lugernuz ; hemañ a zo gwenn, koñchet e gantenn ; egile a zo teñvalloh eun tammig, e-giz pa vefe bet mogedet e grohenn. Da genta, Yann 'oa e zoñj konta anezo, mez kement a zo diouto, m'eo red o muzula gand ar gastell. »

Setu ma roas an aotrou da Gatellig eur gastell, toaz ouz he hantennou, rag o kas toaz d'an ti-forn e oa hi bet. Ha Yann a hellas muzula e gavadenn. Tud paour, nao gastellad hanter a oa diouti ! Hag ar gastell a oe kaset en-dro d'ar gêr, peziou melen, peziou gwenn chomet stag ouz an toaz, er strad hag e kostez ; ne oa ket red selled ken piz hiviziken.

Koulskoude an aotrou Furzod a oa souezet braz, ha setu-eñ da gaoud Yann :

« Arsa, Yann, emezañ, penaoz an diaoul az-peus bet kemend-all euz krohenn da vuoh ? »

« Penaoz ? eme Yann, ar re all o-deus bet ivez hag o-deus gwerzet keit ha me, rag eur souez e oa gweled pegen ker ez ee ar hrehen e Pont 'n Abad. »

« Pegement 'ta ? »

« Kant skoed ar vlevenn, na muioh na nebeutoh. Kenavo, aotrou ! »

« Mad, a zoñjas an aotrou Furzod en eur vond kuit, mad. Yann, te 'zo deut pinvidig gand krohenn da vuoh ; mez pinvidikoh e vin-me c'hoaz. Me 'm-eus eiz buoh ha daou-ugent, ha warhoaz genta e kasin kelou da oll gigerien ar hostez-mañ da zond d'o laza ; ar hig a vo dezo, ar hrehen din-me. »

Hag, evid gwir, antronoz vintin e oe lezet¹¹ gwad da zaout ar maner. Nag a gigerien a oa laouen an tamm anezo ! Hag an aotrou Furzod da Bont 'n Abad gand eur harrad krehen, beh daou loen-kezeg. Pa zegouezas er marhad :

« Pegement an tamm euz ar hrehen ? » a houlennas eur marhadour digantañ.

« Kant skoed ar vlevenn adarre, e-giz an devez all », eme an aotrou.

Ar marhadour a reas eun hej d'e ziouskoaz, a droas e gein en eur lavared :

« Hemañ 'zo sod ! »

An aotrou a glevas hag a respontas kerkent :

« Fazia 'rit ! Me n'on ket sod, Furzod an hini ez on. »

Med kaer e-noa gortoz, ne gave ket gwerz d'e varhadourez.

¹⁰ eur gastell : ?

¹¹ lezet : ?

A-barz fin, e tegouezas gantañ Nonn, gouzoud a rit, Nonn Pibenn, marhadour saout ar Pont.
« Pegement ar hrohenn ? » eme Nonn, e gorn-butun berr o vogedi e fri dezañ.
« Kant skoed ar vlevenn adarre, e-giz an devez all ! », a respontas an aotrou.
« A ! paour-kêz aotrou Furzod, fazia ho-peus greet ! Kant skoed ! Pe, petra ? Boulhurun !... Ar zod a rez ahanon, va faotr ? » eme Nonn. « Dal ! pak ha kerz da gousked d'an heol ! »

Ha Pibenn, disvanta eur vodennad¹² gand an aotrou ken ma'z eas da gornigellad seiz kammed ahano. An aotrou paour ne houlennas ket e rest, hag a zistroas d'ra gêr gand e grehen, mezeg ha trist e glipenn, m'hen asur deoh ! »

Pa zegouezas er Hastell C'hwitell, an aotrou Furzod a lavaras d'e itron :

« Che ! plah paour, Yann en-deus rivinet ahanom. Ar hrehen a yee hepken daou skoed pe seiz lur an tamm anezo, ha n'eo ket kant skoed ar vlevenn an hini eo ! »

An itron a yeas droug enni. Koulskoude, n'ouzon ket penaoz, n'eo ket war heh aotrou, mez war Yann e tiskargas he hovad maliz Ha setu ma oe kaset kelou da Yann, dindan boan da veza krouget, da zond d'ar maner, en doare-mañ : nag en noaz na gand dillad, na divoutou na gand e voutou, na dre er-mêz an hent na penn-da-benn gand an hent, na war droad na war varh.

Pa glevas kement-se, Katellig a oe darbet dezi simpla. Mez Yann ne reas ket kalz a van :

« Ma n'eus nemed an dra-ze da ober, emezañ, n'eo ket c'hoaz en dro-mañ e vezin krouget. »

Ha setu-eñ d'en em gempenn evid mond d'ar maner.

« Nag en noaz na gand dillad, emezañ. Mad, aze ez eus eur roued, me 'ya da droi anezañ en-dro din ! Na divoutou na gand boutou ; n'eo ket tenn, me 'lezo eur voutez er gêr hag a gaso eben ganin ; na war droad na war varh ?... » Just d'ar houlz-se azen an aotrou 'oa o pasturi e park ar melchon, tost d'al lochenn ; Katellig a yeas d'e gerhad, ha Yann a lammas warnañ ; ha yao etrezeg ar maner war ar bleveg diousskouarn hir..., penn-da benn gand ar foz, ha setu evel-se ne oa nag en hent nag er-mêz an hent.

An aotrou Furzod, pa deuas Yann an Hinkin dirazañ en doare merket, a welas en-doa kavet finnoh egetañ.

« Ha foei ! Yann, emezañ, me a oa o soñjal laza ahanout, rag, gouzoud a rez, gaou braz ah-eus greet ouzin oh ober din diskrohenna va zaout ; ha krouget e vijes bet diohtu zoken ; mez peogwir out deuet d'am haoud e-giz em-oa c'hoant, e lezan ganit beteg warhoaz, mar gellez a-raog neuze klask din 'kreiz ar bed. »

« Kreiz ar bed, aotrou ? Amañ emañ. Ha ma n'am hredit ket, klaskit eur gordenn hir a-walh evid-se. Me a jomo amañ da zerhel eur penn, ha c'hwi a yelo gand ar penn all da ober tro ar bed, hag evel-se c'hwi 'welo ha n'eo ket amañ emañ ar hreiz. »

An aotrou ne ouie ket penaoz respont.

« A ! emezañ, e-leh an dra-ze, poueza an douar eo e vezo red dit ober. »

« N'eo ket tennoh, eme Yann, mez da genta e vo red deoh diveina an douar, rag an douar hepken, n'eo ket ar vein, eo a lavarit din poueza. »

An aotrou paour a oe stanket e veg dezañ adarre.

« Kerz d'ar gêr, emezañ neuze da Yann ; a-benn warhoaz me yelo di d'az laza. »

Ha Yann a zistroas d'e lochenn, difoutre kaer evel diagent.

*

Antronoz, war-dro ar hreisteiz, Yann a zo o hortoz an aotrou Furzod, hag en-doa reñket peadra da zoueza anezañ. Dirag e lochenn, e oa o farda e zoubenn ; tan a oa gantañ dindan e bod-houarn, mez kuzet en eun toull en douar, eun tammig tan glaou koad heb an disterra moged. Pa welas an aotrou o tond, Yann a bakas peg en eur hoz skourjez hag a grogas da zistaga taoliou gantañ war e bod-houarn, ker buan ha ker pounner ma kinnige beb gwech diskar anezañ hag e zoubenn.

« Arsa, Yann deut on da ober evidout, eme an aotrou ; mez petra ? War a welan eo kollet da dammig skiant-vad ganit, peogwir e skourjezez da bod-houarn en doare-ze ? »

¹² disvanta eur vodennad : banta eur vaz

« O ! Tra ! Tra ! eme Yann, va fenn a zo mad ; mez gouzoud a rit n'am-eus ket kement a geuneud ha c'hwi ; hag ez eo eüruz din kaoud, da boaza pe da domma va zamm boued, eur skourjez e-giz hemañ. Gand eur hant taolig bennag gantañ, e lakaan an dour da vervi ; gwelit kentoh, aotrou. »

Ha Yann, dirag an aotrou Furzod souezet, a ziholoas ar pod-houarn, e leh m'edo ar zoubenn, tiz warni, o redeg hag o kantrea.

« Ma ! Kalz koll az-peus plantet warnon, te 'oar mad, Yann, eme an aotrou. Koulskoude m'am-eus lavaret dit e oan deut amañ d'az laza, me n'on ket da veza tamallet ; va itron an hini a zo troet war an tu-ze. N'eus forz, gwerz din da skourjez hag e lezin da vuhez ganit. »

« Tomm on d'am skourjez, a respontas Yann ; koulskoude, tommoh on c'hoaz d'am buhez ; ha setu gwerza a-walh a rafen va skourjez burzuduz. »

« Ha pegementad eo ? »

« Kant skoed, ar ger diweza, na muioh na nebeutoh. »

Hag evel-se Yann an Hinkin a bakas tri-hant lur evid e skourjez, eur hoz tamm skourjez-porh, mad da netra.

Hag an aotrou Furzod ? Mond a reas d'ar gêr, laouen.

War-dro an abardaez e teuas da zoñj dezañ e oa tud gantañ o terri tirien. E-barz ar gegin, plahezed a oa ganto ar podou braz war an oaled, dour, kig, legumachou e-barz ; ne oa mui da ober nemed enaoui an tan dindan ;

An aotrou a gasas ar merhed kuit diwar e dro :

« Gand va skourjez, emezañ, me respont da domma soubenn d'an zud. »

Hag eñ, war gorr e roched, an dour warnañ, da vazata e bod-houarnou gand e skourjez porh, eur brao gweled anezañ, me 'gav din.

Deut e oa c'hweh eur, hag ar zoubenn ne oa ket c'hoaz soñj bervi ganti ; mond a reas an heol da gousked, ar hig n'edo ket c'hoaz digrizet, kennebeud nag an dour klouaret. Ha foei ! an aotrou, deuet hir e deod war e roched, a zavas beh war e chupenn, a-dreist-oll, pa deuas ar plahezed hag ar baotred yaouank da ober goap outañ dindan e fri... Ma oe red enaoui an tan neuze. Koan diwezad a oe, med ne oe eet netra da goll.

Mez ennañ ken ma flêrie, an aotrou a damalle e skourjez :

« N'ouzon ket petra 'hoarvez gantañ, emezañ ; med n'emañ ket mad ganti sur a-walh... »

Meur a hini a zoñjas e oa kollet e benn gand aotrou maner ar Hastell-C'hwitell.

*

E-pad an nozvez-se, an aotrou Furzod a glevas e *bater* gand e itron. A bep seurt e klevas diganti = Diod ! Leue-geot ! Beg magn ! », ha me 'oar-me petra ne oa ket lavaret d'ar paour-kêz aotrou.

Setu, antronoz vintin, ma reas hemañ e zoñj adarre da vond da gas Yann an Hinkin d'ar bed all. Med Yann ivez a oa o hortoz an aotrou da vond war e dro : karget en-doa gwin ruz leun eur zorohell gras ha lakaet anezi goude-ze e krubuill Katellig.

Pa zegouezas en ti, an aotrou a lavaras :

« Yann, diwar an taol-mañ, ne vezi ket kosoh ; mond a ran da ober da stal dit ! »

« Gwir ! eme Yann. Red eo din neuze laza va gwreg da genta, rag ne dalvez ket kalz ar boan din lezel Katellig paour war va lerh da zizeha war he zreid gand an dienez. N'em-befe ket ar galon-ze ! »

Hag eñ, ker buan, mond ha sanko e gontell e-barz krubuill Katellig. Houmañ en em lezas da goueza ; ar zorohell a oa toullet, ar gwin a rede a bep tu.

An aotrou a spontas.

« Petra az-peus greet, Yann ?, emezañ. Sell da wreg aze astennet war al leurzi, ha beuzet en he gwad. Gwell a ze n'eo ken evidon, rag ar "Justis" a deuio d'az kerhad hebdales. Marteze, lazet az-peus da vaouez, mez da dro a deuio ha te a vo dibennet dihouget... »

« Teut, teut, teut ! C'hwi 'gav deoh an dra-ze ? eme Yann. Katellig, gwir eo, he-deus kollet he gwad, mez me 'm-eus aze e kornig va arbel eur hwitell daou wenneg bet d'am moereb, hag a zo gouest da lakaad buhez da zond en-dro em gwreg. »

Hag eñ ker buan ober teir c'hwitelladenn gand c'hwitell ar voereb koz, ha ker buan ivez Katellig 'oa en he sav.

An aotrou Furzod a jomas sebezet, souezet-marzo.

« Yann, emezañ, gwerz din honnez, ar hwitell-ze, ha dizonñjom ar pezh 'zo bet etrezom. »

Ne oent ket pell evid beza mignoned adarre hag evid ober ar marhad : ar hwitell, evel-se, 'oe gwerzet kant skoed.

An dro-ze, an aotrou Furzod a zistroas d'ar gêr laouen-braz.

« Sell aze ! emezañ outañ e-unan, peseurt taol am-eus-me greet ! Beteg hizio, pa vouze va itronig ouzin, e veze red-mad din selaou anezi ha klevoud diganti eur randonennad hir a draou, pe mond kuit dioustu. Hiviziken, mar fell dezi c'hoaz lakaad trabas ouzin-me, e sankin va hontell en he hreiz, hag e lezin anezi evel maro ; ha pa blijjo din, e rin teir c'hwitelladenn, ha buhez adarre e-barz va itronig. Honnez he-deus ezomm da veza kelennet, dreset, ar vaouezig-se. Ni welo ! »

Degouezoud a reas er maner, ha setu an itron dioustu o tond d'e gaoud.

« Ahanta, emezi, krouget eo Yann ganit, emichañs ? »

« N'eo ket », a respontas an aotrou.

« Petra, lorgnez ? N'ah-eus ket krouget anezañ, amprevan ? »

« A ! evel-se emañ ganin, pikez, eme an aotrou ; gortoz eun tammig ahanon, gortoz ! »

Hag eñ mond ha tenna e gontell, ha skoi eun taolig pe zaou gand e itron.

« Va buhez ! va buhez ! », a grias an itron o koueza a-stok-korv d'an douar.

Ouz he hleved, diou blah ha tri pe bevar mevel a zeredas war-dro o mestrez :

« Lezit honnez, eme an aotrou dezo, me he savo alese pa blijjo ganin. »

« Ha penaoz ? », emezo, sabatoet.

« Gand ar hwitell-mañ », e respontas an aotrou, hag eñ distaga eur hwitelladenn gand e hwitell daou wenneg ; mez netra, an itron ne flache ket an disterra. Ober a reas c'hoaz eun taol c'hwitell, daou daol, tri daol... netra, ha netra morse ; an itron a oa maro-mad !

An aotrou a jomas mantret, ha seul-vui ma ouie ne oa ket ar *justis* tener ouz ar vuntrerien, zoken evid ar vuntrerien furzod.

Ha klask kuzad ne dalveze ket : re a dud o-doa gwelet, hag abred pe ziwezad, hini pe hini a ziskuillfe.

Setu 'ta ma teuas archerien da chadenna an aotrou kêz, hag eiz deiz da houde e oe krouget, evel ma oa ar hiz en amzer-ze.

Eun niz dezañ a deuas neuze da vestr d'ar Hastell-C'hwitell (entent a rit bremañ perag e oe roet an ano-mañ d'ar maner). Diohtu e poanias da walhi e ano euz ar vrud fall en-doa sachet warnañ e yontr ; ha ne oe ket diêz dezañ, o veza ma oa ker madelezuz ha m'edo egile droug ha diboell.

*

Euz e du, Yann an Hinkin ne akounac'haas morse e tle ar gwir binvidig beza aluzennner an Aotrou Doue ; beva 'reas koz-koz gand Katellig e-touez eun tiad bugale, karet gand an oll dre ar Hap.

Ha d'e eur diweza, sant Per a zigoras, sur a-walh, frank dor ar Baradoz d'e ene.

Ra'z im oll d'e gaoud du-ze, pep hini d'e dro !

Euz an izel d'an uhel

Pa zimezjont an eil d'egile, paour e oant ken ma oant paour a-walh. Eur zon a lavaras ar wirionez diwar o fenn :

Kenta ma oant dimezet
Alo ! va mignon ! Alo ! Gê !
Kenta ma oant dimezet
En eur stad trist oent laket.

Mez eüruz e oent eveltao, rag n'eo ket ar binvidigez hag an arhant eo ar re a lak al levenez hag an eurvad en eun tiegez. Oll eh ouzom ar pezh a lavar Furnez ar Geiz a Vro-Vreiz :

Gwelloh karantez 'leiz an dorn
Eged n'eo arhant 'leiz ar forn.

Neuze 'ta e oant eüruz, Yann ha Katellig, daoust d'o faourentez. Evid ti, eul lochenn toet gand drez ha raden, ha bleñchou gwez diskouret, mez

Gwell eo eun ti bouedeg
Eged eun ti braz aveleg.

Evid arrebeuri, eur gwele, eur podhouarn, eur skudell ; o-daou e vezent o tebri e-barz e-giz daou labousig en o haoued a zebr boued en eun heveleb krogenn.

Yann a houneze pevar gwenneg bemdez ; abaoe ez eus pell ! Mez o veza m'edo eur gwaz fur ha tamm ebed dispignour na boesonier, an daou bried a deuas buan a-walh da espern peadra da brena eun daol, ha beb a skaoñ mar plij. A-benn pevar pe bemp bloaz dimezi, o-doa gellet prena e foar Boulldahud eun dañvad, tudou, ya, eun dañvad ! Mez ar pezh na brenjont ket eo ar pezh en-dije dalhet ar muia ar garantez etrezo, da lavared eo evid ar re na ententont ket, eur mab pe eur verh, pe zoken an eil hag egile, pe c'hoaz meur a hini anezo. Nann, siwaz, disher e oant, rag Katellig, red eo lavared ar wirionez e leh hag e-giz m'emañ hi, Katellig n'oa nemed eur haonahenn anezi !!!

Eun nozvez war an diskar-amzer, pa oa hi eet en he gwele, Katellig a lavaras d'he gwaz :

« A ! Yann baour, me 'oar petra n'am-eus ket greet, me... »

« O ! me 'oar ivez, me, petra n'out ket gouest da ober ! », eme Yann a oa o tiwiska e lavreg.

« Nann, Yann baour, n'ouzout ket ! Soñj 'ta, chomet eo er-mêz ! »

« Piou 'ta ? »

« On dañvad, Yann baour ! Ha ma vefe eet e kov Gwillou ar Bleiz ? »

Setu Yann, didrouz, d'en em adwiska, ha dao kuit da glask an dañvad. Sklêr e oa al loar en he hann. Mez, daoust da ze, Yann ne gave na roud na tres ebed euz an dianket. Oanig paour ! Ar bleiz digoustiañs a-dra-zur en-doa sammet anezañ ha koaniet gantañ ! Ha setu or paour-kêz Yann, diberhennet diouz e zañvad, eur zon drist o sevel d'en eñvor :

Kañv d'am dañvad penngornig !
Me 'm-eus keuz d'am dañvad !
Kañv d'am dañvad penngornig !
Kañv d'am dañvadig mad !

Emichañs, goude eñvori e zon, en-doa he hanet ivez, rag pa oa o tostaad ouz Park an Tri Ferson, e klevas eur vouez a-dreñv e gein o houlenñ outañ :

« A ! va den paour, dit-te eo e oa an dañvad ? »

Yann, en eur zistroi, a responte :

« Ya, din-me ; ankounac'haet er-mêz en abardaez-mañ gand va hini goz. »

Hag e welas eo eun aotrou a gomze outañ, ya, eun aotrou, hag unan a-feson c'hoaz ! ha d'e heul daou gi-bleiz, o bleo garo savet pik warno, hag int dielhet, o zeod eun hanter gourhed er-mêz euz o beg, daoulagad en o fennou e-giz da gef-tan war enaou. Sentuz koulskoude e choment unan a bep tu d'o mestr.

« Basta ! neuze n'eo ket didamall da *hini goz* ; rag bremaig p'edom o tremen dre amañ, on-deus gwelet eur bleiz o taga eun dañvad. Buan va chas war e lerh ha me ivez ; eun hanter eur goude e oa lazet Gwillaouig ganeom a-hont en tu all d'ar stankenn. »

« Mad eo ho chas neuze, aotrou », eme Yann, glaharet oll.

« Mad-dreist int, va den : ha mar karez o hemered, e vezint dit, rag em maner em-eus c'hoaz n'ouzon ket kaer ped anezo. »

« Marhad greet ; ho trugarekaad a ran. »

Goude kenavo, setu-int pep hini da zacha diouz e du : an aotrou e-unan etrezeg e vaner ; ha Yann war-zu e lochenn, krog en e chas. Degouezoud a reas er gêr pa zegouezas ivez Katellig, savet ha bet diouz he zu o klask ar paour-kêz dañvad.

« Debret eo gand eur bleiz lontreg ! »

« Ha da biou ar chas-se ? »

« Din-me bremañ ; digand an aotrou em-eus o bet¹³ ; int eo o-deus kaset d'ar bed all tager on dañvad. Chas dispar int, a lavare o mestr ».

Hag int en-dro da gousked heb muioh a drouz nag a gomzou.

Siwaz ! N'ouzer ket pe gand an anoued he-doa paket o haloupad en noz er-mêz, pe gand keuz d'he dañvad penngornig, marteze an eil hag egile. Katellig ne zavas ken diwar an taol-ze ; ha tri pe bevar devez goude e oe intañvezet ar paour-kêz Yann !

« Feiz ! emezañ ; goull e kavan amañ an ti bremañ ; kenkoulz tra din mond ahalenn ! »

Hag eñ en hent, bepred eeun dirazañ, beh gouzoud kaer beteg peleh ez aje, e zaou gi d'e heul, Krogmad ha Pegstard. Gand penaoz kaoud boued n'edo ket nehet an disterra ; rag pa veze naon o tond dezañ, gand e chas e helle beza dizoursi : eur houlin, eur had bennag a golle kerkent o buhez, hag hep kaoud anezi zoken en-dro, ar pez a oa ar gwas evito, pe ar gwella marteze.

Eun devez, en eur dremen dre ar gêr-benn euz ar vro, e klevas inkanti e oa kouezet merh ar roue dindan galloud eun êrouant a zeiz penn, en eur palez e-kreiz eur hoad don ; an hini he zennfe ahano, en-defe anezi da zimezi, pe, mar kavfe gweloh, he fouez en aour.

« Setu aze hag a rafe brao a-walh va stal, a zoñjas Yann ; n'eo ket ankounac'haad Katellig eo a ran, ar baourez-kêz ; koulskoude, peogwir on intañv, ha mar gallfen, ne vefe ket eur pehed braz evidon dimezi gand merh ar roue. »

Ha diwar ar zoñj treud-se, eñ war-zu ar hoad da glask ar plah yaouank, e zaou gi d'e heul. A-boan er hoad, setu Krogmad oh harzal, ha Pegstard o hrognal, ha Yann o weled dirazañ, en eun taol, dorborz eur palez kaer... Hag eñ difoutre-kaer o pounta war an nor, hag e-barz, e gon¹⁴ d'e heul. Diohtu e paras sellou Yann war eur plah yaouank, eur gened dispar dezi, strafuillet gand an aon ; hag e penn pella ar porz, e welas an êrouant. Kerkent al loen spontuz a laoskas seiz blejadenn euzuz dre e zeiz penn. Charinkad a ree e zent en e vuanegez, hag ouz mein al leur e lemme e skilfou kamm, eur vogedenn flêriuz o strinka diouz e zeiz gourlañchenn ; ar skant glaz a strake war e gein torgeneg e-giz bili war an aod pa vez treh braz, hag e lost forheg a hwibane en êr.

Gand eur vouez rohelluz e houlennas ouz Yann :

« Petra ? Preñvig douar, pe debret pe evet e vi ?

Mez Yann n'en-doa ket c'hoaz c'hoant da veza na debret, nag evet, na lonket ; evid pep respont e flouras o hein d'e gon.

« Skis ! skis ! », emezañ.

Ha Pegstard da zailla war ar flêriuz seiz-penneg, ha Krogmad da lammed war ar hein skanteneg, ha da daga an eil penn war-lerh egile, ha Yann ivez da zikour e chas euz e wella hag o lopa a drochouk war an êrouant.

Ne badas ket pell ar hrogad. Yann ne oe ket debret nag evet, mez an êrouant divalo a dremenas dezañ ar c'hoant lonka diwar an taol-ze. Gand e gontell-laz, Yann a drohas prim ar seiz penn, a zamm anezo en e vizah, ha kuit ganti, e zaou gi-bleiz d'e heul, en eur gimidi a-benn diouz ar plah yaouank a rede war e lerh, en eur hervel anezañ he salver, he mirour, he fried. Mez Yann a rede a-raozi hag a zoñje :

¹³ em-eus o bet : em-eus bet anezo.

¹⁴ e gon : e chas.

« Aon ho-peus c'hoaz, merh ar roue ; diwezatoh m'ho-peus c'hoant, e gwirionez, d'am haoud da bried, c'hwi am hlasko ; ha neuze on-daou-ni a welo. »

Koulskoude, dre ma rede dre ar hoad e kave ar seiz penn ponnerroh-ponner. Hag e tanfoeltras anezo ouz eur sklosenn goz, goude beza trohet ar seiz teod diouto. Ha skañvaet dezañ ; e kerzas d'ar gêrbenn da weled petra 'hoarvezfe.

Ha petra 'hoarvezas ?

Setu amañ. Merh ar roue, goude he salvidigez vurzuduz, ne oa ket pell evid degouezoud er gêr, e lez he zad. Hemañ, evel m'en-doa roet e her, a lakaas klask war ar salver, evid dimezi dezañ e verh.

Hogen, e-pad ar heid-amzer-ze, eur glaouer beg du o tremen gand e garrad glaou dre gichenn ar sklosenn goz, a gavas ar seiz penn hag a zammas anezo en e garr. Pa zegouezas er gêrbenn, ne oa ken meneg e oa salvet merh ar roue, ha ne deued ket a-benn da gaoud he salver. Ar glaouer neuze ne oe ket pell evid mond d'al lez, greet e zoñj gantañ :

« Aotrou, emezañ d'ar roue, me an hini en-deus savetaet he buhez d'ho merh muia-garet ; goulenn a ran he fouez en aour ; rag evel n'on nemed eur glaouer ha ma'z on du-pod va hrohenn, ne hellan ket dimezi d'ho merh ; paneve se... »

« Penaoz, te, beg louz ? », eme ar roue, diskredig an tamm anezañ.

« Me, aotrou ; ha mar karit o gweled, seiz penn an êrouant a zo aze em harr. »

Goude beza greet eur zell ouz ar pennou euzuz c'haoz o tiwada :

« Mad ! mez n'eo ket a-walh ! », eme ar roue deut ar fiziañs ennañ. « Nann, n'eo ket gand aour e heller paea servijou evel-se ; kent se, me 'lavar, me, e timezi ma merh a-benn warhoaz vintin, he me eo ar mestr ! »

Hag an tad-kaer, evid ma vije ar glaouer dereatoh da vond dirag e verh, a halvas pevar soudard d'e walhi ; nao lur saovon du ha seiz broust koad a oe uzet war e dro evid e gempenn. Antronoz vintin e oe lazet al leueou bihan, an deñved, hag an ohen lard ; daro ar zoubenn, ha poaz ar sklipou¹⁵. Taoliou hir a oa savet n'ouzon ket ped warn-ugent. Hag er porz a enor, merh ar roue a dlee bremaig lavared ya dirag he zad. Hogen pa welas-hi da biou e felled he dimezi, e lavaras eun nann dicheg ha distag !

« Nann, nann, n'eo ket hemañ a zo bet o tiframma ahanon diouz etre skilfou an êrouant. »

« Penaoz n'eo ket me ? » a houlenne ar glaouer. « Ha n'ho-peus ket gwelet ar pennou aze ganin ? »

Dres ! d'an ampoent daou gi Yann a ziskordas da chalpad, ha merh ar roue a baras he daoulagad war re he salver gwirion ; ha Yann, dre douez an engroez a dud a oa eno, a respontas :

« Ar pennou, ya ; mez maro edont, pa az-teus o havet ; e leh an teodou a zo ganin amañ, ne welez ket, glaouer ? »

Ha Yann o diskoueze, ar seiz teod forheg. Ar glaouer, me 'lavar deoh, ne oa ket du-ze er friko. Eun tantad a oe savet ker buan e korn ar porz ; ha gand ar pennou, hag eskern ar glaouer, e oe greet glao !

Ha Yann ! Merh ar roue, dirag an oll, a deuas da bokad dezañ, ha d'her briata gand eur garantez divuzul. Ha Yann, intañv ar paour kêz Katellig, a deuas da veza mab-kaer ar roue.

*

An hini a gontas ar goñchenn a oa bet ivez er friko e-pad eiz deiz. Pa deuas d'ar gêr, eo bet pell gand ar boan en e zivesker, kement e tañsas jabadao ha gavotennou en enor da Yann savet “Euz an izel d'an uhel !”.

¹⁵ ar sklipou : ar stripou.

Truillennig ha Gargarenez

Pont-e-Kroaz a oa d'an amzer-ze brudet e Kerne-Izel ha pelloh tro-war-dro, abalamour d'e skolaj koz ha d'e varhajou darempredet beb yaou gand ar Gaperien. Hizio, siwaz d'ar Pont, Kaperien ha Kapenned a zered nebeutoh d'ar marhajou, rag ar skolaj koz a zo serret.

Neuze 'ta, abaoe zo pell, e oa daou vignon o klask prena deskadurez e skolaj ar Pont ; anvet e oant Truillennig ha Gargarenez hag o anoïou a gaver c'hoaz moulllet ha garanet gand beg o hontell war garr ar gwez koz bodenneg a zisheolie al leur hoari. Truillennig a oa mab d'eur marhadour kezeg koz euz Poulldahud ; ha tad Gargarenez a oa pesketour o chom e Treboull-Goz. Kerent Truillennig o-doa dastumet eur pennad brao a leve en eur werza koz kezeg treud, eskerne, da baotred ar hign ; e-leh Gargarenez, pa veze deut ar bloaz da benn, goude bouetet ha gwisket eun dousennig bugale, eur wech prenet eur penn roued bennag, lien, kerden, ha paeet ar gwiriou, an trujou d'ar gouarnamant, nezue ne veze na teo, na stank, na ponner ar gwenneien a chome en e di. Rag n'eo ket heb abeg o-deus dibabet an besketerien sant Per Baour evid o zant paeron !

N'eus forz, daou vignon braz e oant, evid dezo beza unan paour, egile pinvidig ; hag o harantez, emezo, a dlee padoud kenetrezo beteg... beteg atao, keid ma vije anezo. Hogen ne reas ket, ha setu amañ penaoz.

Eur zulvez, kemener braz ar Pont, Visant Mezer e ano (eul laer touet, hervez teodou merhed dilabour ar vro), a deuas da glask Truillennig evid kemered muzul dioutañ ; hag antronoz e tegasas d'ar paotr eun dillad kaer euz ar haerra, kaeroh eged an oll dillajou a oa bet beteg neuze oh uza war ar skiñvier gand skolaerien yaouank ar Pont. An darnvuia e-touez e gendeski bien a gemeras peb a govad avi ouz dillad kaer Truillennig. Gargarenez a gave brao anezañ ivez, ya, koant zoken, mez hep kaoud avi outañ, na poan-gov, pell ahano.

Adaleg neuze, Truillennig ne zeskas netra, netra ; ha penaoz en-defe gellet ober, peogwir e oll amzer a yee gantañ da zelled ouz e gaerder en e velezour, da hlebia e vleo gand dour c'hwez-vad, da ranna anezo dre greiz e benn, ken na vijent lugernuz, ken lugernuz ha bleo ar vuoh war he hrohenn goude eul lipadenn deod.

Teir zizun bennag a oa eet en o zro, pa deuas eul lizer d'an aotrou Beskont a Gerdruillenn. N'ouzoh ket da biou 'oa al lizer-ze ? Evid Truillennig, tudou kêz ! Ya, Truillennig n'edo mui Truillennig ! E dad, eur pennad a oa, en-doa greet taoliou kaer gand e goz stal kezeg koz ; ha, danvez braz dezañ, skuizet e Poulldahud, ha broudet (hervez lod) gand e wreg, eur vaouez beg figuz, rog an tamm anezi, e werzas pep tra, ti ha marchosi, evid mond du-hont da... Bariz, respet deoh. Bretoned !... Hag evid ober petra, mar plij, e Pariz ? Piou 'oar ? Ar wreg a lavare e ranker mond beteg eno a-barz kaoud tud a-feson. Me 'gred he-dije greet gweloh o lavared diohtu eo du-hont e kaver ar stanka an dud a-feson... fall, er gêr-ze ma skrive anezi eur barz gwirion :

O Pariz brein ! Poull-ar-Hlogor !
Kovad ! Kernez ! Bosenn ! Dihlan !
Kêr-Iz 'zo bet beuzet er mor :
Pariz, te 'vo beuzet en tan !

Mar demañ an diougan-ze war-nes dond da wir, ar Gêr Veur eo tremenet mall dezi dond da furraad, ha kalz c'hoaz !

Eiz deiz goude degouezoud e Pariz, ar marhadour kezeg treud-gagn ne oa ket mui evid padoud gand rebechou ha teodadou e wreg. Soñjit 'ta ! Homañ 'oa deut mez dezi da veza gwreg da eun den e ano Truillennig.

« Mez ar chas eo, emezi ; mervel a rankin diwar an taol-mañ. Neuze ne dalv ket ar boan beza pinvidig ma ranker dougen eun ano ken divalo, eun ano pillaouer ! Perag kaoud arhant ma n'out ket evid kaoud eun ano all hag eñ eun tammig dereatoh ? »

En eur ger, bouzara 'reas kement he gwaz gand ker braz cholori ha jabadao, ma reas Truillennig e vennoz da cheñch ano. Mond a reas d'an ti-kêr, hag eno, mar plij ganeoh, e oe badezet a-nevez Kont a Gerdruillenn !!! Nemed ma rankas roi eur yalhavig vrao a arhant evid beza badezet en dro-mañ,

muioh eged pevar real evel ma roas e dad d'an dro genta da aotrou person koz Poulladahud. Hag, adaleg neuze, e wreg, kalz muioh egetañ c'hoaz, a veze lorh enni pa zoñje e oa hi degemeret e-barz an noblañs. Ker buan hag all, ma vije distroet da Boulladahud, he-dije lavaret d'he anaoudegez :

« Alo, cheulkejenn¹⁶, war ho taoulin dirazon, ha tennit ho tok, hag izel ar penn, pe me welo. Ha buan ! »

Pa lavaran deoh, kollet e oa o fennou gand an itron Kontez a Gerdrullenn hag he zammig aotrou !

Êz eo deoh kredi, an aotrounez nevez ne oant ket evid lezel pelloh o faotr fri-mehieg e skolaj ar Pont. Buan e kasjont lizer dezañ, hag eur vintinvez, ar marmouz Truillennig, da lavared eo ar Beskont yaouank a Gerdrullenn, a lavaras kenavo d'ar skolaj koz, ha da iliz Itron Varia Rozkudon. Kemend a vall a oa gantañ mond en hent, ar paour-kêz marh-ourgouill pinvidig, ma kemeras a-boan eun nebeudig amzer evid kimiada diouz Gargarenez, ar mignon a vage evitañ eur garantez ker birvidig, ker gwirion ! Gargarenez a oa glaharet diwar an taol-ze, rag eur galonig tomm a lamme en e greiz, e-leh egile, an Truillennig, ne ree ket foultre-kaer evid pellaad dioutañ. Ha perag en-defe greet zoken ? Daoust ha n'edo ket eñ o vond da Bariz, eur genaoueg o vond da vro ar henaoueien ? ? ?

Dizale goude, Gargarenez a oe red dezañ ivez dilezel e studi er skolaj, ha mond da zeski pesketa da Dreboull-Goz, rag e dud ne binvidikaent tamm ebed gand an amzer.

Pa zegouezas Kerdrullenn bihan du-hont e Pariz gand ar Gerdrullenned koz, va Doue 'ta ! Klevet ho-peus danevellou penaoz pa zistroas ar Mab Prodig d'ar gêr, e lazas e dad al leue lard hag e reas friko d'an dianket 'oa nevez-kavet. Ma ! d'al leupez¹⁷ aotrou yaouank e oe greet ivez, allazig da genta, ha, d'an eil, fest ha prejou kaer, traou fonnuz ha lipouz. Mez an eil a blijje d'ar golladenn kalz muioh eged ar henta, n'eo ket red lavared. Eo, koulskoude, red eo, ha ne vefe nemed evid ma klevoh ar wirionez penn-da-benn, ha ma teskoh e chomas ar beskontig beurleg pemzeg deiz ha diou zizun klañv war e wele goude re govad, respet deoh. Kristenien ! Mez ne varvas ket, lartaad an hini eo a reas, ken ma teue kov dezañ, kov reud ha frank, evel eur zahad truillou. Paour-kêz Beskontig Kerdrullenn ! N'en-doa nemed kovata da ober !

Koulskoude an daou Gerdrullenn koz a oa o vond d'en em jala gantañ, o klask gouzoud petra ober dioutañ, pa deuas da leina d'o zi unan euz ar rummad tud-ze ker stank e Pariz ha n'o-deus ken micher nemed beva e tiez ar re all, diwar goust ar re a ro bod ha boued dezo. Laboused treud eo ar re-ze !

A-greiz ar pred, an daou Gedruillenn a houlennas digand ar mignon petra da ober euz o fennher :

« Hum ! eme egile, en eur skarza e hourlañchenn, red e vije deski dezañ meur a dra. ha, da genta penn, petra 'oar beteg-henn ? »

« Gouzoud a ra lenn difazi a-walh, skriva deread tost da vad, niveri pelloh eged kant, heb dezañ koilskoude beza ken gouizieg hag eun "doktor", pell ahano ! »

« A zo mad, eme egile, goude eul lonkadenn gwin, a zo peadra a zeskadurez war gement-se. Mez n'eo ket a-walh ; daoust ha gouzoud a ra kana, dañsal, butuna eur "sigar" hep tarlonka gand ar moked, tenna e dok da zaludi, roi eun taol lagadig lemm d'ar merhed koant ?... Nann ? ne oar ket ? Aze 'mañ an dalh. N'eus ket da dorta, red ha red-braz eo dezañ deski. »

Goude greet ha dihreet, an hini a brezege kerkoulz a oe karget gand ar gerent d'en em emelloud da gas da benn deskadurez al labous yaouank. Ha, goude eur pevar pe bemp bloaveziad skol, an aotrou Beskont a Gerdrullenn n'en-doa ket e bar nag evid rodal, nag evid kana (nemed e vouez a oa deut da raoulia eun disterra), nag evid teurel moked butun dre gorn e veg, nag evid banna eur zell dre gorn e lagad war an dimezelled yaouank.

Koulskoude n'eo ket war-lerh eun dimezell e hlaoure ; war-lerh eun intañvez ne lavaran ket. Homañ 'oa anavezet mad dre he noblañs, nemed ivez leve ha pinvidigez n'he-doa ket mui, kement he-doa dispignet. Ha setu ma taolas-hi he sellou hag he c'hoant war danvez an aotrou beskont ; hebdale ar paour-kêz Truillennig a gouezas en he rouejou !

Ma oa red diohtu kas an embannou, e leh chom da lichuenna. An traou a gerze mad en-dro, pa deuas gwasoh eged eun darvoud da gas ar stal d'an dour. Oll arhant ar Herdrullenned a oa lakaet ganto e ti eun noter ; hogen hemañ ne gavas ket gweloh eged mond kuit e-mêz ar vro, en eur lezel an

¹⁶ cheulkejenn : cheulk.

¹⁷ leupez : ?

alhwez dindan e zor. Ha diwar an taol-ze, Kerduillenned ne jome ket eul liard ganto, ha setu-int paourroh eged biskoaz.

Truillennig en em jale : C'hoaz, emezañ, eüruz eo din emañ war-bouez dimezi, rag anez, petra 'm-bije greet heb gweneg ebed ? »

« Ya, o vond da zimezi, me 'lavar ! Kerz da hwitellad, paotr paour, mar soñj dit. » An intañvez yaouank he-doa c'hoant da zimezi d'an arhant, ha n'eo ket d'eur gwaz ; pa n'oa ken a arhant, hi a lavaras kenavo, ha kuit !

Diwar neuze ar marhadour kezeg koz a oa skoet gand eun taolad gwad en e benn, hag a varvas hep kaoud e anaoudegez vad. Hag e wreg a gollas ivez ar pezig a jome c'hoaz ganti a skiant-vad ; red e oe he has da di an diskianted e leh ma termenas a-benn eun daou pe dri devez !

Kañvou ! Setu Truillennig e-unan-kaer e Pariz. Petra da ober, heb danvez na micher ? Ar paotr paour, en eur ober soñjou leiz e spered, a lavare aliez outañ e-unan :

« Perag ivez n'eo ket bet chomet va zad da werza koz kezeg e Poulladahud ? »

Mez naon a deue dezañ, hag evid kaoud boued, e rankas gwerza lod euz e zillad. Kement-mañ 'zo lavared e oa eet izelig a-walh an dour gantañ, pa deuas ar zilvidigez dezañ :

Eun abardaez, skuizet o veza klasket labour en aner, Truillennig, en eur dremen dre gohu ar gêr vraz, a jomas a-zav dirag eur stal e leh e oa eur gwaz ha diou vaouez o werza pesked. Ar merhed a oa gwisket e-giz merhed Treboull, hag ar gwaz a oa gantañ dillad ar besketerien... Hag ar pesketer ha Truillennig e teuas daoualagd an eil da bara war egile.

« Truillennig ! », eme an eil.

« Gargarenez ! », eem egile.

Ya, daou vignon skolaj koz ar Pont-e-Kroaz a deue d'en em anaoud e Pariz ! Rag Gargarenez an hini 'oa deut d'ar Gêr Veur, gand e wreg hag e hoar, evid gwerza eun toullad *meilled*, pesked a dalvoudegez, en-doa bet an eurvad da gelha en eun taol roued dindan ar Gerdraon.

Petra da lavared c'hoaz?... An daou vignon 'oa eüruz d'en em gaoud ; ha Gargarenez a alias Truillennig da zistroi gantañ da Dreboull-Goaz, da zeski ar vicher a besketer ; ar pez a oe greet.

Truillennig a deuas prim d'en em voaza ouz ar mor, hag a reas e berr amzer eur martolod kaloneg ha kreñv. Hag e dechou fall, emezoh ?

« Netra mui ! » Beuzet e oant bet pell du-hont en tu all d'an Enez Sun !

Bloaz goude, Truillennig, dizonet mad diouz Pariz ar Hagn, a zimezas da Nolaig, c'hoar Gargarenez. D'an heveleb devez, hemañ a vadezas eur vag nevez-flamm, prenet gand arhant ar *meilled*, hag ar vag a oe anvet, na petra 'ta : "Truillennig ha Gargarenez".

Mab-kaer d'ar roue

I

An devez ma krogas gand e ugent vloaz, Youenn, priñs yaouank Poulldahud, lesanvet c'hoaz Markiz ar Hastellpour, Beskont Tisoul a Gernetra, pe Aotrou an Dienez, a oe kaset da haloupad bro pell-pell diwar e dro gand e dad, roue Bro ar Gaperien, eun niz bihan bennag d'ar roue Grallon (Doue d'e bardono !), an hini a zo uhel-bignet, du-ze war gein e varh-mein, etre daou dour Kemper Kaorantin.

Ya, ha bloaz a oa, deiz evid deiz, abaoe ma oa pellaet Youenn diouz palez e dad, evid mond da vinihi da brena furnez, pe da glask skiant-prenet o veaji, pa zegouezas, eun abardaevez hañv, war zouarou e baeron, ar roue Pentudi, a astenne e halloud war oll Vro ar Vigoudenned, zoken war Bont-'n-Abad.

An heol, o vond da gousked, a lede eur vantell ruz war vogeriou Kerbutun, pa dremenas dre borz ar hastell ar priñs yaouank hag e dud.

Youenn, ma ne oa ket ponner samm ar bloaveziou war e chouk, na ponner beh ar rebechou war e goustiañs, ne oa ket kennebeud kalz ponnerroh pouez an aour en e yalh louedet. An tad, a-raog ar himiad, en-doa tallet ar herh, hag heuliet dister a-awalh e oa priñs Poulldahud.

Selaouit kentoh...

Er penn a-raog, kichenn-ha-kichenn, eun hanter dousenn ourouleriou, mar plij, a-istribill o tintal ouz gouzoug pep hini, e kerze daou goz azen bleveg, fall a-walh evid beza gwerzet d'ar hign, hag a gerze netra ken nemed abalamour m'edont boazet. War gein an ezen divalo-ze, eun tabouliner hag eun trompiller. Nag int a zone ! Nag int a gorne ! Ken gwaz, da vihanna, ha ma raio an êlez, evid on dihun diouz on housk maro, a-benn fin ar bed !

Goude-ze, daou varheg treud-gagn o hezeg, ha peb a bikol kleze hir ganto o ruza beteg an douar, tokou-houarn war o fennou, gouest a-walh da lakaad ar Gristenien da sponta a-raozo.

War o lersh e teue eur pezh kañval, hag unan uhel ha kreñv, deut, n'em-eus ket soñj peur na penaoz, euz gouelehiou ar Vorianed. Kredit 'ta, ar hañval, heb diskouez an disterra tamm skuizder, a zouge ar priñs Youenn war greiz e vell kein etre e ziou dorgenn ; war dost d'e houzoug, an aotrou manah, kelenner Leunafurnez, ha, war e dalier, ar mevel braz teo Gwinardant. Paour-kêz kañval, sell...

Hag, evid kloza ar strollad, war droad, pakajou ganto ouz o chouk, eur medesin, eur barver, eur heginer, hag eul lakez evid ober n'em-eus dalhet mui soñj petra. Arabad din kennebeud ankounac'haad ar pevar hi-bleiz a fringe, a harze amañ hag a-hont, gwech a-raog, gwech a-dreñv.

Del ! Setu aze penaoz Youenn, priñs yaouank Poulldahud, lesanvet c'hoaz Markiz ar Hastellpour, Beskont Tisoul a Gernetra, pe Aotrou an Dienez, a zegouezas e-barz maner Kerbutun, e ti e baeron Pentudi, roue ar Vigoudenned.

Oll hekleviou ar porz braz a zihunas gand trouz ar chas-bleiz o chalpad, gand trouz an ourouleriou o tiridignad, gand trouz ar hlezeier hir o tastoni war ar vein, kement ma teuas da zelled d'o frenest diou verh ar roue, Braventez ha Gwennig, yaouank o-diou ha merhed koant, nemed Gwennig a ranke dalhmad plega d'he c'hoar hena Braventez, bet moumounet gand he zad, abaoe ma oa anezi, ha boazet da ober e peb leh he mestrez.

An diou briñsez a welas ar hañval o soubla war e zaoulin disvlevet, hag ar priñs yaouank o lammed prim d'an traoñ, hag o rei an dorn da zikour da ziskenn e vevel teo Gwinardant, eur paotr reud e jiletenn ha ne vije morse hanter-vezo nemed seiz devez bep sizun ; a-hend-all eur servijer euz ar gwella.

« Kalon vad en-deus », eme an hini yaouank.

« Kalon vad, foei ya... evid e vevel ! N'eo ket dezañ eo da zikour. Ne oar ket derhel e reñk, em-eus aon ! », eme an hini gosa, en eur rodal.. « Ha neuze, emezi c'hoaz, sell ouz e azenned divalo ! »

« O ! eme ar hoar all, divalo a-walh, med beo int, hag eun azen beo a zo talvoudusoh eged daou varh maro. »

An aotrou manah Leunafurnez a zistagas eur zarmon kaer evid saludi paeron e ziskibl, ken kaer ma tithenaoue ar chas-bleiz puchet war deleziou an nor-dal, ha ma heje ar hañval trist e benn moal !

Ar roue koz Pentudi, n'eo ket red hel lavared, a zegemeras mad e fillor, ken laouen an tamm anezañ ma paeas eur picherad euz e wella jistr degaset war-eeun gand eur merour diouz Kergoadig e Fouenn. Beteg Gwinardant e-unan a ganas meuleudiou d'ar jistr melen.

« Piou 'oar ? », a zoñje ar roue ; setu aze eur fillor hag a vefe ennañ danvez mad a-walh evid beza va mab-kaer amañ e Kerbutun, rag, n'eus ket da dorta, emañ eur pennad brao a zo o koza, ha, peogwir digand va rouanez (pell 'zo e tremenet ha Doue d'he fardono !), peogwir n'em-eus nemed merhed, mall eo din bazvalanad evito hag a-raog pell c'hoaz, m'am-eus c'hoant da weled ar roueed vihan o tideñvi... Ya, fillor ha mab-kaer, ni a welo bremaug. »

II

Hogen eur hiz a-oll-viskoaz a oa neuze e rouantelez ar Vigoudenned. Hervez lezennou ar vro, ar roue koz, pa ne veze ket a baotred, a veze red dezañ ober tri goulenn ouz e zanvez mab-kaer, ha gweled dre eno hag a-walh a furnez, a nerz-kalon, a spered, a ijin, a helle kaoud an den yaouank a dlee beza fiziet etre e zaouarn eur verh karet ha stur ponner ar gournamant.

Evid mond penn-da-benn gand roudou ar wironez, eo red lavared e oa krog ar c'hoant dimezi e-barz ar briñsez Braventez. Med, dre ma ouie edo he lignez a ouenn goz hag uhel daoust d'he nebeud a binvidigez, ar plah figuz ne gavas ket kalz diouz he doare Youenn, priñs yaouank Poulladahud, lesanvet c'hoaz Markiz ar Hastellpour, Beskont Tisoul a Gernetra, pe Aotrou an Dienez, abalamour marteze d'ar hañval, pe d'an azenned, pe ... ha me 'oar-me ?

« Fillor, eme eur mintinvez ar roue Pentudi, kredi a ran ez eus ahanout eur paotr a boell hag a furnez ; goulenn a ran diganit evelato ma hen diskouezi frêz hag anad deom ? »

« Petra eo ar stal ? », eme ar priñs Youenn.

« O ! dister a-walh ! Eur hoz tamm soñj hag a zo nevez deut din. »

Ha Youenn a zoublas izel :

« Ne garan nemed senti ouzoh. »

« Ma, setu amañ. Deh diweza, e-pad ma oan o redeg eur bouh gouez dre aze, e welis e oa eur wezenn a re e-touez gwez va hoajou. Kerz 'ta da glask ar wezenn-ze, va faotr, ha, pa vezo kavet, degas anezi din amañ. »

« Salokras, aotrou roue, re zister tra a houlennit diganin. Lavarit pehini eo ar wezenn a faot deoh, ha kredit e vezo amañ dizale. Pehini eo ? »

« Dit da glask, eme Bentudi. Sell, klask en-dro dit, ha dibab hervez ma kari. Da vihanna, gand ma tibabi ar wezenn a houlennan ! Evid al labour, e helli kas ganit eun toullad glaouerien begou du. Med dalh mad soñj da gemer kuzul diouzit da-unan ha diouz ar c'hoant az-teus da gas da vennoz da benn evid plijoud din. »

« Siwaz Doue ! paeron paour, kenkoulz tra eo deoh diohtu goulenn diganin mond daved eur steredenn euz an neñv benniget. Ma plijfe c'hoaz gand ho polontez rei din da anaoud gouenn ar wezenn-ze. »

« Gortoz, fillor, hag e klevi. Eur priñs a zo eur mesaer tud, hag a zo e vicher klevoud ar pez a daver dirazañ, gweled kement a guzer ; hag ivez tremen heb gweled, a-wechou, an traou a lakaer dirag e zaoulagad. Gouzoud en em ober, en em drei, setu aze ar vicher ! Desk anezi, va faotr, ha roust¹⁸, en em denn ahalenn da glask va gwezenn. »

Or paour-kêz den yaouank, daoust dezañ da veza priñs, markiz, beskont, aotrou (soñj ho-peus dalhet marteze euz e anoiou) a oa neheto eged e gañval o tiskuiza, en e varchosi, dirag eur baillad brenn hag eun hordennad foenn... C'hoaz e lavar meur a hini ez eo brao beza a lignez uhel. Ha ya 'vad ! Foei, sell !...

Med ar roue Pentudi en-doa gourhemennet, ha red e oa senti. Hogen penaoz ?

Aze e oa an dalh, ha Youenn a zebre e dammig spered o klask gouzoud dre e benn diluzia ar gudenn rouestlet-se, ha kaer en-doa, netra ne gave.

E-kreiz ar hoad, en-dro da Gerbutun, eun hanter-dousenn glaouerien vogedet a hortoze priñs Poulladahud, prest da bilad ar wezenn, kerkent ma vije dibabet.

¹⁸ roust : ? (marteze ar galleg "oust").

« Gortozit c'hoaz eur pennadig, paotred ; med ne hedoh mui gwall-bell ; c'hoaz amzer din hepken da ober eur zoñj hag eun dro ziweza. Bremaig ema-hi deom. »

Ha Youenn donnoh-donna e-barz ar hoad.

Ha ya, deiz ! Hag e oa gwelloc'h ? Tamm ebed ! Gwez amañ, gwez aze, gwez a bep tu, gwez du-hont, a-zehou, a-gleiz, a-raog, a-dreñv, ha nemed gwez hepken ! A-wechou ar brankou en em skoulme ken stank euz an eil gwezenn d'eben ma reent a-zioh ar penn evel eur vaot teñval, eur ganevedenn vodenneg, beh da sklêrijenn an deiz en em zila drezo. Ha fresk dindanno, yen zoken. Ha sioul evel e-barz eun iliz : trouz all ebed nemed klemmadennou an deliou hejet gand an avel, ha skrijadennoù ar hizier-koad o c'hoari en em dapoud. Dizaon zur edo an aotrou Youenn ; me 'gred, koulskoude, e vije bet ken laouen, o klevet kanaouennoù eul labous pe c'hwitelladennoù eur mesaer.

Ha perag ivez 'ta, evid kavoud eun ali mad bennag, n'en-doa ket degaset gantañ an aotrou manah kelenner Leunafurnez, pe zoken ar hoveg teo Gwinardant ?

« Ahalen, eme Youenn outañ e-unan, n'eo ket eur wezenn a vije ezomm da bilad, na deg, na kant ! med mil, deg mil, evid rouesaad ar paour-kêz koad teñval-mañ. Hag ar roue en-deus lavaret unan hepken. Mad ! Med pehini eo ar wezenn-ze ? Dero bodenneg, pe bezo kizidig, pe fao uhel, pe evleh ruskeneg, pe pin gand o spillou glaz ? Ha, va roue paeron, setu aze eur zoñj treud maegt en ho faltazi !

Ha priñs Poulldahud da zistrei daved ar hlaouerien chomet du-hont azezet da varvaillad, dindan eun dervenn divleñchet ha dirusket don gand ar gurun.

« Evid homañ, an dervenn-mañ, divalo a-walh er stad-ze, a dle beza skuiz en he sav. Fest ar vouhal a rafe vad marteze d'he zreujenn. Ya, med nebeud a dra eo evid va faeron roue. »

Setu-eñ nehetoh eged biskoaz, pa glevas eur vouez fresk o tiskorda kreñv da hoarzin en e gichenn. Braventez eo a oa oh ober he baleadenn, eun toullad dimezelled kaer hag aotrounez yaouank ouz he heul.

« Penaoz, emezi, n'oh ket evid ober ho mennoz ? Choant ho-peus marteze da chom aze da ober gwrizioù. Da eo deoh neuze hel lavared, evid ma vezo degaset ho koan deoh amañ ! »

« Ya, priñs Poulldahud, grit eun dibab ha buan ! », eme deg mouez all.

Hag int ahano, o c'hoarzin goap leun o begou, ken ma tregerne ar hoad gand o mouezioù.

Ha Youenn a chomas e-unan, heb gouzoud kalz war be droad poueza, na war be du koueza, pa glevas eun eostig o c'hwitellad drant e ganaouenn.

« Ha setu-te du-hont, va labousig koant, kludet uhel war vleñchenn ar vrava euz gwez ar hoad-mañ ! Ya, eostig, entent mad a ran ahanout. Gouzoud a ran, da gan a lavar din ez eo ar wezenn-ze a rankan kas d'am faeron roue. Evel-se e vezo greet ; heuil a rin da ali. Ha mil bennoz da Grouer dit, evnig koant, da veva koz ha da gana kaerroh bemdez ! Kenavo ! »

Hag or Youenn, evid tapoud an amzer gollet, da redeg da glask e hlaouerien begou-du. Hag an oll war gorr o roched ha beh d'al labour ! Ne badas ket pell an traou. Ar wezenn gaer ne oe na trohet nag heskennet, hogen displantet en he fez, gwrizioù hag all, heb droug ebed, rag ar fillor a felle dezañ ober e gefridi euz ar haerra.

III

An heol a guz du-hont e benn ruz a-dreñv an torgennou, pa zegouez priñs yaouank Poulldahud e Kerbutun, hag, evid rei da anaoud e zistro da dud ar hasetll, eur gward a zon e gorn-boud.

Setu an oll o tiskenn buanna ma hellont, ar roue Pentudi, Braventez, Gwennig, an aotrou manah kelenner Leunafurnez, ar mevel braz Gwinardant, gantañ eur picherad jistr, hag an dimezelled hag ar fleh, hag an dudjentil, beteg zoken ar vevelien.

« Va faeron roue, eme Youenn o tostaad, mar plij, pourchasit beb a vanne jistr evid va glaouerien. Emañ gleb o chupenn war o roched ha dizehet o gourlañchenn, rag, va hredit, tomm eo bet an abadenn. Med deut eo an traou da vad, ha bremaig e vezo degouezet dirazoh ar wezenn am-eus dibabet, unan hag a vezo diouz ho toare. »

Setu ma klevet trouz gand treid ar hezeg, gand gwigour ar rojou-karr, gand galv ar chalboterien ha strakadennoù ar skourjezou.

« Aotrou Doue !, eme an oll zellerien, petra eo honnez, ar wezenn-ze ? »

Deg karr braz a oa bet staget lost-ouz-lost,ha kezeg, forz pegement, sterniet da zacha. Ha setu penaoz e teue beteg porz ar maner eur mell gwezenn gourvezet penn-da-benn war ar hirri.

Ar roue koz, hag a wele c'hoaz mad euz a-bell, ne zaleas ket d'anaoud ar wezenn.

« Seiz kant luhadenn gamm ! emezañ gand e vouez hroz. Kalz gwelloc'h e vije bet din beza bet paeron da vab an truillaoueka pillaouer euz bro ar Vigouenned, eged beza eet da zerhel war mên-font ar Vadiziant, eur bitouz ken diempenn, eur marmouz ken diboeil ha ma'z out-te, priñsig Poulladahud ! N'ouez-te ket eo honnez, ar wezenn az-teus displantet, diskolpet hag hanter-lazet, n'ouez-te ket e teu ar wezenn-ze war-eeun euz Kêr-Iz, kêr-veur on tadou-koz ? Amziod paour ! Ar zant braz Gwenole eo a zegasas e-unan amañ ar wezenn-ze, pa n'edo c'hoaz nemed eur blantennig dister. Mond d'en em gemer evel-se ouz eur wezenn ken kaer, ken sakr, ken... ken..., nebeud a rafe din da ziskolpa ivez, ha diwrizienna da ene diouz da gorv ! »

« Re bell ez it ivez, tad », eme Gwennig, he halon o piltrotad d'an daoulamm ruz en he hreiz ; « lezet ho-poa an dijentil yaouank da ober e zibab. »

Priñs Poulladahud a oa mantret, pladet ; poent e oa dezañ zoken¹⁹ !

Meur a hini, koulskoude, a glaskas teurel dour war dan buanegez Pentudi koz.

« Aotrou roue, laza eur wezenn n'eo ket laza eun den eo, ha pa deufe ar wezenn lazet war-eeun diouz Baradoz an Douar, pe, mar karit, diouz Baradoz an Neñv. »

Setu an digarez a gavas ar mevel braz Gwinardant, hag eñ ken dispourbellet-braz e zaoulagad ha re eun azen pa vezer o skrivellad anezañ.

En eur brezegenn distaget mad, ar manah kelenner Leunafurnez a glaskas tenna ar zamm a-ziwar diousoaz e ziskibl.

« Grit rebechou c'hwero, aotrou roue, hag ho taoliou ne daint ket donnoh er galon eged n'ez a taoliou morzol a gov en e anneo. Ha neuze, daoust hag an oberiou n'int ket da veza muzuliet hervez bolontez vad an oberour ? »

« Eo, kelenner fur, med n'eo ket a-walh kaoud c'hoant da ober vad, red eo ouspenn gouzoud hen ober. Êz a-walh, emichañs, e oa d'am fillor entent peseurt gwezenn e oa va hoant warni. Ha pehini ken nemed ar goz dervenn goz-se, hanter bulluhet gand ar hurunou, gwechall mestrez ha rouanez ar hoajou, med hizio, siwaz ! o hortoz koueza ; an dervenn-ze hag a leunie va halon a enkrez ha va ene a spouron, abalamour ma seblant he zrojenn dam-varo c'hoarzin goap ha lavared din : « Me a zo bet gwechall uhel ha sonn ha, mar brallan hizio, me 'glev da dro o tond ivez da vralla... » Setu aze ar wezenn, ar hoz tamm gwezenn hag a oa da droha. »

IV

« Hag ho fillor, tad ? », eme Gwennig.

« Va fillor, feiz d'am Doue ! Petra 'zervij ? Chom a raio va fillor. Gweled a fell din beteg peleh e kerzo gand e ziotachou, ha diou gefridi all en-deus c'hoaz da ober. Marteze ar gentel a hizio a zougo he zammig frouez... »

« Klev 'ta, fillor, adaleg warhoaz genta, e vo red din mond aze dre ar mêziou en-dro da balez Kerbutun, evid dibab evidon eur boked, med unan hepken, klevoud a rez ? Hag en-dro-mañ gra gwelloc'h an traou, te 'oar. »

« Evel-se beza greet ! », eme Youenn yaouank.

Hag an oll kuit, pep hini diouz e du.

Ar roue koz Pentudi, eñ, evid terri d'e imor fall, a gerzas gand e vinistred da ober eur pennad c'hoari boulou.

Eun oabl digatar a zav e vantell hlaz ledet uhel a-dreist an douar ; gwrez an heol benniget, o para war ar bed, en em zil da domma ar mêziou, hag ar gwaziou-dour a hiboud sklêr en eur redeg dre parkou ha foenneier. E-barz al liorzou ar bokedou a zav o horzennou kizidig, hag a zigor o halon da hoarzin : o deliennou briz-livet en em led, hag ar c'hwez-vad a red tro-war-dro war askell an êzennig klouar. Bokedou koant, a beb liou, a beb ment ! Nag a vokedou !

¹⁹ poent e oa dezañ zoken : mankoud a ra eun dra bennag.

« Va faour-kêz Youenn, ma vefe red dit c’hvesa kement hini euz ar bokedou-ze, neuze, paotr, n’emaout ket c’hoaz war-nes ober da choaz !... Sell aze ar spern-gwenn war ar harz o c’hoarzin, e-kichennig al lireu glaz ha gwenn ; sell a-hont ar rouanez, tost d’ar gwezvoud o kildroi ; sell c’hoaz ar varlenn, al lili gwerh, hag ar rozenn ken koant war he zrojenn zreineg, prest da flemma ar gwaller. »

« Eur boked, unan hepken ? Ya, med pehini eo ? »

Ar beh a zo aze o hortoz ar priñs yaouank nehet. En e gichenn e sav eur rozenn ken tener, ken flour ha seiz ha voulouz, ken ruz ha muzellou eur werhez yaouank, beradennou ar gliz pizennet c’hoaz en he hreiz ; hag hi a zeblant kinnig he haerder hag he c’hwez-vad.

« Ma vije bet hizio deh, eme priñsig Poulladahud outañ e-unan, ne vijen ket bet seizdaletoh evid dibab ar rozenn ; med hizio, goude kentel ar wezenn, ez eus em fenn muioh a bouez hag a boell ; greet eo ganen va henta prenadenn a furnez. »

Hag eñ kerkent da deurel e hoant war eun askol, ya eun askol braz dteineg.

« Ar blantenn zivalo-ze, emezañ, a oa aze oh ober dizenor ha dismegañs d’al liorz. An askol a zere beza e-touez bokedou ar jardin, tost evel ma tere ouz eur pillaouer truillenneg azeza e-touez an dujantil gaer ouz taol ar roue, pe c’hoaz e giz m’emañ reñk al losteg Paolig e-touez êlez sentuz Baradoz Doue. Deus ‘ta, askol, ma kasin ahanout d’am faeron. Marteze te a blijo dezañ, rag deh e falveze dezañ eur wezenn divalo, ha te, evid eur boked, a zo divalo a-walh. »

V

Ar wech-mañ, Pentudi koz ne reas nemed diskorda da hoarzin, o veza dihunet war e du mad, emichañs.

« Va fillor, emezañ, pa ve mad ar raz, e rank beza koulz pe welloh ar haz. Kaoud a re dit beza c’hoariet eun taol fin d’az tad-koz, bugelig ; hag e-teus soñjet, evid terri d’am froudenn, penaoz, warlerh eur wezenn hanter-varo, e felle din kaoud eur boked heb braventez na c’hwez-vad. Bugaleaj, va fillor ! Hag e-teus tremenet e-biou d’ar goanta rozenn, eur rozenn hag am-boa kuzet en he hreiz eur mên prisiuz a dalvoudegez vraz ; hag ez out eet da zibab eun askol garo, mad hepken da zikour koania da azened, azen korneg ma’z out ! Poent eo dit divorfila, ma ‘teus c’hoant da zond gwelloh a-benn euz da drede kefridi. »

« Ha petra adarre eo ar gefridi-ze ? », eme Youenn.

« O ! nebeud a dra a-walh, eur hoariadenn. »

« Med neuze, petra a houlennit diganen ? »

« Eur vi ! »

« Petra ? Eur vi ? Emaoh da vad, va faeron, oh ober goap ouz ho fillor. »

« Penaoz ‘ta, satordistah²⁰ ! Me ‘gred, eur vi, eur vi n’eo ket tenn da gaoud, ha, koulskoude, e chomez aze dirazon e-giz eur hi fustet. Evidon-me, selaou, me ‘gav ez eo êsoh klask eur vi eged n’eo tapoud al loar da zebri. Viou a-walh a gaver, aliez trizeg evid dousenn, ha c’hoaz e varhatez, fillor ? »

« Marhata ne ran ket, med c’hoant gouzoud am-befe peseurt vi da glask. »

« Eur vi dozvet, fillor. »

« Dozvet gand peseurt labous ? »

« Dit eo da glask ha da zibab adarre. Gand aon na hellfes ket dond a-benn da-unan euz ar gavadenn, e helli kemer ali digand furnez ar re all, ha zoken seiz devez ha seiz nozvez leun a lezan ganit evid ober ar pez a gavi ar gwella, hag an dereata. »

« Rousta²¹, va fillor ; kerz da glask eur vi d’az paeron roue. »

Youenn, priñs Poulladahud, n’oa ket eul leñver.

« Ne dalv ket din ar boan, emezañ, chom evel-se da zebri va zammig spered en nehamant. Klasket am-eus bet c’hoari va faotrig fin, ha padal va faeron a oa c’hoaz finnoh louarn egedon... Ha perag chom da zalea da glask pemp troad d’ar maout, pa ouzon mad n’en-deus nemed pevar ? N’eus ket da dorta. Mond a ran d’ar red beteg ar verouri, da gerhad eur vi yar, unan fresk o tond diouz an neiz. »

Ha setu-eñ prim en hent. Hag, e-barz ti ar yer, n’emañ ket pell evid choul eur yar zu vraz diwar he neiz, ha lakaad he vi e-barz eur voestig en e hodell, pa zegouez gantañ e vevel braz Gwnardant.

²⁰ satordistah : ?

²¹ Rousta : ?

« Eh ! emezañ. N'emaoh ket mad, va friñs ? Eur vez e vefe, war va meno-me da vihanna, eur vez e vefe kinnig eur vi yar d'eur roue ken gallouduz hag hini ar Vigoudenned ! Eur yar a zo eul labous dister a-walh ; ne oar nemed klochal ha diskabad ar berniou teil, heb beza zoken gouest da nijal ! Nann, red eo deom mond beteg Menez Hom. Du-hont, war gribennou uhella ar reier gouez e kaver neiziou ered. An ered ! A ! setu aze laboused a-daill, hag a oar nijal beteg an heol ! Ivinou krabaneg dezo, hag eur beg kamm skilfeg, ha daoulagad divergont ! Viou ered eo a zere ouz ar rouaned. »

« Ar wirionez a zo brao ez kenou, Gwinardant. Eur mell drên a dennez diouz va zroad. Ya, a-benn goude warhoaz vintin, e kemerim penn an hent evid mond da neiziata da Venez Hom. »

Hogen antronoz, ar mevel braz Gwinardant, o veza evet piou 'oar ped chopinad a re euz jistr ar maner, eñ ivez a zozvas ar helou, hag an oll, e Kerbutun, a anaveze mad an dro e oad o zoñj ober beteg Menez Hom ? Hag an oll, na ! petra 'ta, a zeredas da guzuliata ar paour-kêz priñs yaouank.

« Na rit ket mui a zotoniou, eme unan, rag eur zotoni eo honnez emaoth o vond da ober. »

« Daoust hag an ered n'int ket laboused diviz (divergont), ha re zigalon ? Mar am hredit, klaskit 'ta kentoh eur vi eostig-noz, al labousig bihan brao-ze hag a gan gand kement a galon hag a veulodi. Evel-se e plijfeh sur d'ar roue. »

« Gwelloh, eme eun trede, e vefe dineiza eur vi paun. Ar paun, gwir eo, n'eo ket gwall-gaer e vouez ; med, a-hend-all, na pebez rod dudiuz a ra gand e lost plu marellet ! Ma vijen c'hwi, me 'oar e kemerfen eur vi paun. »

« Eur vi alarh gwenn-kann a blijfe kentoh », eme eun all.

Unan bennag zoken, eun hanter-furzod, emichañs, a zigoras braz a-walh e veg evid lavared e vije mad klask eur vi... killog !

Ar priñs en-doa peadra da zelaou.

« Ober a rin va zoñj dizale, p'am-bo bet amzer da boueza ha da ziboueza hoh aliou. Kant gwech ho trugarekaad a ran. Kredit n'hoh ankounac'hain ket. »

An amzer, koulskoude, a dremen. A-benn warhoaz vintin e tegouez an termen da ginnig ar vi d'ar paeron ; hag ar fillor a chom nehetoh eged biskoaz, pa deu d'e gaoud an aotrou manah Leunafurnez.

« Emaout aze oh en em jala gwasoh eged Gwillou ar Bleiz paket gantañ e lost e-barz ar griped. Dizaon 'ta, diskibl ! Deut on da denna ahanout er-mêz euz ar vouillenn, ha setu amañ penaoz. Deut on da zoñjal emañ ar roue koz o klask ober goap adarre, pa houlenn eur vi diganit. C'hoariom finnoh egetañ, ha klaskom dezañ eur vi ha ne vo ket dozvet gand labous ebed. »

« Hump ! Dozvet gand petra neuze ? Viou pesked, pe viou naer-wiber ? »

« Nann, n'eo ket war an tu-ze eo. Roet em-eus urz d'ar heginer da lakaad e gaoteriou war an tan, ha da boazad fonnuz eur gouign-amann, unan ront evel eur vi, ha da lakaad enni a bep seurt lipouserez, gand eur wiskad sukr warni. C'hoarzin a raim. Ar roue Pentudi, me 'gred, a zo eul liper koz, hag, a-ziwar-lerh debri ar vi braz-se, eur vi a hiz nevez dozvet er gegin, e tenno hir er-mêz e lañchenn da lipad e vourrou. »

« Aotrou manah Leunafurnez, eme Youenn, priñs Poulladahud, biskoaz kelenner ne zougas gwelloh e ano eged na rit c'hwi. Bennoz Doue deoh, rag bremañ em-eus kavet ar peoh hag an eürusted. Deom da weled or heginer. »

VI

Antronoz, a-raog ar hreisteiz, e-barz sal vraz Kerbutun, e-kreiz e dujantil hag e itronezed, Braventez ha Gwennig koant azezet en e gichenn, Pentudi, roue koz bro ar Vigoudenned, a hortoz e vi.

An nor a zigor, an drompilli a dregern, ha Youenn, priñs yaouank Poulladahud, lesanvet c'hoaz Markiz ar Hastellpour, Beskont Tisoul a Gernetra pe Aotrou an Dienez, a deu, laouen e-giz an heol, da zoubla e hlin dirag e baeron galloudeg. War e lerh, Gwinardant teo, ar mevel braz, a zoug, war eur mell plad, eur vi evel na weler ken anezañ, eur vi hag a daol c'hwez-vad en-dro dezañ.

A-raog ma na hell Youenn baour tintal ger ebed, Pentudi koz a roufenn e dal hag a ra gwall-zellou du.

« Eur bitouz n'out ken ! Eo, eun diod a zo c'hoaz ahanout ! Evid piou ha petra e kemerez ahanon ? Daoust ha n'eo ket eur vi am-eus goulennet ? Ha perag neuze ez out eet da ober dispignou evel-se ? Eur roue fur, va faotrig, ne dle ket beza eur dispignour. »

« Selaouet em-eus aliou. »

An aotrou kelenner, en e gorn-tro, ne zizerr ket e henou.

« Ya, ha gwaz eo se evidout ! Te 'oar, peb mintinvez eh evan eur vi kriz. Ha perag n'eo ket va vi eo az-teus degaset din ?... eur vi fresk, klouar ? »

« A !, paeron ker ! n'em-eus ket ankounac'haet ahanoh. Kerhet em-eus ar vi, setu eñ amañ ! »

Dres ! dond a ree da zoñj d'ar priñsig paour euz vi ar yar zu en-doa lakaet en e hodell, en deveziou a-raog.

« Evid klouar ne vo ket », emezañ outañ e-unan, en eur zigeri e voest, med, « evid eur wech, gwaz a ze evid kov ar paeron ! »

« Ma ! N'eus nemed hanter-zroug », eme ar roue o kemer e vi.

An oll a chom sioul... Emañ ar mestr o vond da gluka e vi... Klak, klak, tok ! Emañ rannet ar glochenn, ha gand e loa, Pentudi a zibenn ar vi.

« Eh ! eh ! eh ! tudou, pebez c'hwez ! », eme an oll en eur stanka o froniou.

Ya, c'hwez ar viou brein eo, rag an devez all Youenn yaouank en-doa degaset gantañ an azdo diouz neiz ar yar zu...

« Eun azdo brein ! eme ar roue. Eun azdo hag a zo du-ze o sikour ar yer da zozvi, abaoe bloaz pe zaou marteze ! »

« Ya, eme ar priñs glaharet. Emañ greet an taol ! Meur a vi a oa dindan ar yar, ha n'am-eus ket gouezet dibab. »

Eur pennad brao e padas sarmon ar paeron d'e fillor.

« Arabad dit selaou kement kloh a zon ; red eo disfizioud ouz teodadou ar guzulieren. Selaou hepken mouez da goustiañs, hag, ouz he selaou, bale eeun gand da hent. Gra evel ma kredi mad, ha lez an teodou dilabour da drei, ha da zistrei. »

« Ar wirionez a deu dalhmad ganeoh, paeron heb e bar ! »

Pa oe tremenet ar barrad, Braventez faro a lavaras, gand eur minhoarz treñk, d'he c'hoar Gwennig :

« N'en-deus ket kalz a benn, ar priñsig ker-ze, med an disterra fallagriez ne vefe ket kavet en e spered. Na pegen brao e vo e gas hag e zegas dre benn e fri ! Na pegen dudiu e vo d'eur vaouez kaoud eur pried euz an heveleb danvez ! Ha ya ! Me 'ouezo, me !... »

VII

Abaoe abadenn ar vi brein, tri devez all a oa eet da ruilla bern war vern e puñs distradet an amzer dremenet.

Youenn, priñs yaouank Poulladahud, a gave dezañ, hanter-wir e oa kement-se, en-doa greet e baeron goap outañ dre deir gwech, ha mall a oa gantañ pellaad diouz Kerbutun.

War ar vali vraz bodenneg, sklêrijennet gand an heol mintin, an aotrou manah Leunafurnez a oa da vad o sarmona Gwinardant teo diwar-benn chabistr ar vezventi.

« Teut ! teut ! eme ar hoveg. Evid jistr n'eo ket pehed eva, peogwir e vez lavaret ez eo mad ar jistr da barea droug sant Urlou. »

O mestr yaouank a zeredas d'o haoud.

« Te, mevel braz, kerz da glask va zud, ha lavar dezo ober ar pezh a zo red war-dro ar hañval, an ezen hag ar chas. Boued dezo e-tail hag eur pennadig kempenn !... Ha c'hwi, kelenner, na zaleit ket da ober evidon eun tammig prezegenn a gimiad, evid lavared kenavo da balez ar Vogoudenned. Poent eo, me 'gred, ha, raktal goude lein, e kemerim penn an hent da vond ahalenn da redeg bro. »

« Evel-se e vezo greet ! », eme an daou all.

« Penaoz, va fillorig Youenn, penaoz 'ra, va mabig bihan ?... Petar 'lavar mouez ar bobl ? », eme ar roue koz Pentudi, pa azezas ouz taol evid leina. « Petra eo ar vrud a red dre amañ ? D'ar mare ma felle d'am gradvad goulenn diganit eur gefridi ziweza, ha rei tu dit da gaoud gwelloc'h chañs, d'ar mare-ze e fell dit en em zacha ahalenn ? Petra 'fell dit c'hoaz kaoud ouspenn em rouantelez ? Alo, bitouzig, lavar deom dillo he dizaon ! »

« Re zister eo en em gavan, va faeron, evid chom da hortoz eun diweza gefridi ? Gwelet a-walh em-eus beteh-henn n'on ket greet evid plijoud deoh. »

« Beza re izel a galon », a drohas berr ar roue, « ne dalvez netra evid pennou braz ar bed-mañ, ha mad e rafes o lezel ar goz vertuz-se gand an dud a reñk izel, da vihana, mar 'teus c'hoant da zond a-benn euz ar bederved kefridi. »

« Pehini eo, aotrou roue ? »

« Youenn, priñs Poulladahud, kerz da zibab... eur vaouez. »

« Eur vaouez !... »

« Ha degas din ar plah eüruz a zibabi. »

« Eur vaouez !... », eme c'hoaz Youenn.

« Ya da ! Hag en hent, va dijentil !... Red va rouantelez ! Klask, sell, barn ! E hellez furchal ar hêriadennou a-ziwar ar mêz, tremen dre lochenn koulz ha dre gastell ha maner, chom em falez ha dibab em zi, mar karez ! »

« Zoken beteg en ho ti ? »

« Beteg-henn, eme ar roue, laouen e lagad. N'eus ket a forz, pe ano, pe reñk, pe binvidigez ! Me 'ouezo reñka an traou. Klask e-touez ar re velen, ar re zu, ar re deñval, ar re zreo (lirzin), ar re gintuz, ar re hir, ar re verr, ar re voan, ar re deo, ar re gamm, ar re eeun, ar re vrao, ar re zivalo, ar re goz, ar re yaouank, ar plahez, ar priñsez, hag ... ar re all. »

Ar roue a deue mall dezañ da sklêrijenna e letern ha da ziskouez e hoant.

« E helles dizaon kemered ar binvidika, ar vrava. Setu am-eus eur mouchouer-godell da ginnig d'an hini a gari, ha, mar plij din da choaz, ni a welo da vond larkoh. En dro-mañ c'hoaz, evid dibab da zanvez-pried, e helles, mar karez, kemered kuzuiliou. Me 'gred e vezint gweloh ar wech-mañ. »

Hag ar roue, en eur c'hoarzin d'e verh Braventez, a lavaras d'an aotrou manah :

« Ha c'hwi, kelenner Leunafurnez, ho-pezo dizale eun eured kaer da lida ! »

Me 'gred, sklêr a-walh e oa e letern evel-se.

VIII

Priñs Poulladahud, petra bennag m'edo yaouank, ne lavaras ket e oa an dimezi mad hepken evid ar re all. Plijadur a gemeras o weled oll verhed Kerbutun o c'hoarzin dezañ, o selled outañ a-gorn. Da hini ebed, koulskoude, ne oe roet, en deiz-se, ar mouchouer.

« Amzer eur pennadig c'hoaz ! », emezañ.

En aner Braventez a houlennas ha dibabet e vije ar pried a-raog an abardaez.

« Amzer 'zo, warhoaz e vo deiz ! »

Hi a vouzas, eñ a hoarzas.

En aner ivez Gwinardant teo hag ar helenner Leunafurnez, a-raog lavared nozvez vad d'o mestr, a reas meuleudi Braventez.

« Gwell a ze eviti ! », a zistagas Youenn dezo ; « med va fenn a zo skuiz ha mond a ran da gousked. »

Antronoz e oa ar priñsig, dihun ken abred hag ar sklêrijenn.

« Petra 'rafen ? emezañ. Mond beteg ar hoad da ober eun dro evid aveli va fenn. Prim ma wiskin va jiletenn voan ! Klouar eo an amzer. Den ne ouezo, rag, er paleziou, an oll a ra kousk mintin. »

Hag eñ er-mêz en eur c'hwitellad, laouen ouz en em gavoud e-unan, dichal.

Al laboused a zone o fedennou d'o hrouer. Eur wennilienn bruched-wenn a dremenas a-denn-askell dindan fri ar baleer, emichañs evid gweled piou e oa, rag kerkent eun toullad brini, ken du hag eur billig krapouez, a ziskordas da goagal, evid lavared n'o-doa gwelet biskoaz, a-oll o buhez hir, priñs ebed o redeg ken mintin, hag e ranke hennez beza unan a zoare.

Pellohig c'hoaz, Youenn a zelaouas mesaer merouri Kerbutun o kana, en eur vesa e loened ;

*Setu ma sav an heol gand e gelh alaouret ;
E vannou dre an oabl e-bazr ar bed a red ;
Lonka 'ra, dre ma kerz, gliz mintin ar hlazenn ;
E vannou a zizeh perlez dour ar wezenn,
Ha didrouz e pign skañv, war rojou e garr kreñv,
Beteg mond da blañva dre uhelder an neñv.*

*Ha dindan flemm e wrez, heñvel ouz gwagennou,
An ed, er glazennou, a zirouill e bennou.
Hag er hoajou, ar gwez, gwisket o dillad hañv,
A hej, en eur zourral, o oll izili skañv.*

Ha priñs Poulladahud a chomas da vale ha da glevoud, da weled an deiz o kreski, beteg ma paras dirazañ eul luhedenn gamm, ha ma strakas kruz ar gurun, e-pad ma koueze glao evel d'an Dour-beuz.

« Emañ poent din sacha, rag ar palez a zo eur pennadig ahalenn. »

Hogen kaer deredeg en-devoe, Youenn a zegouezas treuzet e chupenn voan, ken gleb hag ar zaill o tond er-mêz euz ar puñs.

Meur a hini, dihunet gand kruz ar barr-arne, a oa souezet o weled anezañ er stad truezuz-se, ar vogedenn o sevel dioutañ, ken tomm ma oa dezañ. Unan bennag zoken a hanter-lezas da gredi e oa bet marteze an dijentil yaouank a-hed an noz o haloupad, ken ma savas droug e Braventez o klevet gevier ker braz troadet.

Ar pezh a zo gwir eo e rankas Youenn mond da hourvez, ha, war-lerh tomm ha yen, an derzienn greneraz a lammas, direspert, war gein ar priñs paour. Perag ivez mond da halvagnad ker mintin?... Aotrou Doue ! e-pad seiz devez leun e chomas a-istribill a-uz buhez ha maro.

Ha, d'an eizved devez, medisin braz Kerbutun a zisklêrias e oa war an hini klañv eur hleñved euz ar stagusa, ker gwaz pe wasoh eged ar vosenn, Doue d'or miro !... Skrijuz !

Meur a hini a zoñjas en o eur diweza ; hini ebed, koulskoude, ne gredas lavared en-doa aon. Nann, ne lavarer morse an dra-ze...

Braventez a gavas brao he zu d'en em denna kuit, hag ar re all, Penstudi, zoken Gwinardant, zoken Leunafurnez, a oa a-du ganti.

« Selaouit oll, emezi, eur rannalon a vefe beza intañvezet a-raog eureujet. Setu 'ta, ma'z afem kerkent da abati Sant Diboan, da bardona evid ar hlañvour kêz ! »

Ne oe nemed eur vouez evid lavared e oa poent mond en hent.

Hag, en eur gerzed, ar helenner Leunafurnez, eñ 'oa aonig ivez ; soñjit 'ta, eur hleñved kalz stagusoh eged ar vosenn, oey !, a zarmone d'ar bardonien :

*Buhez an den
'Vel an êzenn
A dremen da viken.
Ar vouhal lemm d'ar gwez,
An Ankou d'ar vuhez :
Ar vouhal 'droh pep koad,
An Ankou 'falh peb oad.*

IX

Er heid-amzer-ze, e tivorfilas ar hlañvour, broudet gand ar zehed... hag eur plah yaouank a dostaas da ginnig dezañ da eva.

« Penaoz, n'eus nemedoh amañ, Gwennig koant?... Intent mad a ran bremañ : an oll grenerien all a zo tehet kuit. A ! Gwennig vihan, perag ez oh-c'hwi chomet war va zro ? »

« Abalamour ivez 'ta !... », a vousec'hoarzas Gwennig. « Red eo deoh para alese, ma helloh buan ober ho kefridi ziweza, unan êz a gefridi, c'hwi 'oar. »

« A gav deoh?... Piou da zibab da bried?... Ha mar karfeh-c'hwi, Gwennig ? »

« Petra 'ta ? »

« Ya, mar karfeh va zikour da zirouestla ar gudenn. »

« Emichañs, Youenn, ho-peus gwelet pehini eo c'hoant ar roue ? Va zad a zo en e zoñj kaoud e filllor da vab-kaer, ha, ma en-deus goulennet peder gefridi diganeoh, evid plega d'ar hiz koz n'eo ken. »

« Penaoz, Gwennig ? Me, mab-kaer d'ar roue ? Sell 'ta, sell, a hellje dond da veza... Petra 'lavarit, koantig ? »

« O ! ya, Braventez a garfe... »

« Hump ! n'eo ket gand Braventez emañ ; Gwennig a zo tommoh ar garantez en he halon. »
Gwennig vihan a bigne an dour en he daoulagad, ha priñs Poulladahud o zehas gand moucheouer ar roue.

Eun devez bennag goude, pa oa an oll en distro, ar roue a lavaras d'e fillor :

« Ma ! paour-kêz, peogwir n'out ket eet gand an Ankou, eo kenkoulz dit ober da zoñj da zimezi. »

« Ya da, kenkoulz eo. »

Braventez a dostaas, ruz he fenn lorhuz.

« Aotreet ho-peus din, aotrou roue, dibab etre an oll verhed », eme Youenn, lentig ; « n'em-eus goulennet ken ali neemd hini va halon, hag e teuan, va faeron, da houlen diganeoh ho merh da bried ! »

« Ahanta ! fillor, kermer anezi. »

« Bennoz Doue deoh ! »

Ha Youenn a gasas Gwennig, dre he hazell, beteg Pentudi.

Braventez a vennas koueza, hag ar roue a grene e vouez, pa lavaras :

« Laouen e kinnigan va merh dit. Med perag e fell dit ar yaouanka ? »

« Abaamour eo hi a garan, aotrou roue, va faeron. Chomet on berr gand va feder gefridi hag, evel-se, ho-peus gallet gweled n'ez eus ket ennon danvez eur roue. N'em-eus ket a lorh a-walh ; ne garan ket ar brezel ; ne vefen ket gouest a-walh da lakaad va fobl da zuja din ; ar re zizent ne garfen ket o zerri evid o flega ; hag, ar pezh gwasa, eun torfetour bennag marteze, ne grenfe ket evid skei va buhez. Ar gouarnamant ne blij ket din, hag, a galon vad, e roan va dilez, roue Pentudi. Gwelloh e karan va frankiz ha gwelloh, tud ker, e karan va Gwennig ! »

An oll a chome sioul ; an daou zen yaouank hepken a lugerne ar garantez en o daoulagad,

*'Vel bleun laouen
O vouse'hoarzin,
Leun a hlizenn
Diouz ar mintin.*

Ar roue koz a rankas ober e zoñj :

« Marteze ivez, va mab, emañ ar wirionez ganit. Ar vicher a roue a zo war-nez mond da fall : ar poblou ne houzañvont mui na kabestr na kentrou, ha felloud a ra dezo en em vleina o-unan. Gwaz a ze evid ar rouanez da zond : Evidon-me a zo koz hag a-walh am-eus evel-se !... Ahanta ! tujentil, va merh Braventez a zo da zimezi. Piou a fell dezañ beza va mab-kaer ha kaoud stur ar rouantelez war va lerh ? »

« Me ! me ! », a respontas meur a hini.

« Bremañ, aotrou roue Pentudi, lezit ho fillor ha mab-kaer da lavared deoh ivez : Grit dizale ho tibab, evid ma vo gallet, war an heveleb tro, lida an diou eured ! »

« Evel-se 'vo greet ! », eme roue koz Bro ar Vigoudenned.

Eul labous

N'ouzoh ket e peleh ema maner Kerdiern ? Nann ? Ma ! neuze e rankan da genta hel lavared deoh.

Maner Kerdiern a zo eur hastell hanter-razet e parrez Kleden, e bro Kaperien Beg-ar-Raz. Bremañ ez eus Bretoned kaloneg o chom ennañ, med n'eus ket ken pell all c'hoaz e veve eno, a-dreñv e vogerious uhel hag o foziou don, eun tanfoeltr aotrou. Anvet e oa Fistoulig hag, ho pedi a ran d'am hredi, eun diaoul a zen e oa, pe da vihanna eur gwall hini e oa bet, rag, d'ar mare ma komzan deoh, e oa goeñvet ha ridet ar paotr koz, hag e veve didrouzig a-walh en e vaner, gand e borzier hag e blah kegin.

Pa lavaran didrouz, e fell din rei da entent ne ree mui kemend a reuz dre ar vro ha diagent. Med lakaad a ree komz atao diwar e benn, ha setu amañ perag : an aotrou Fistoulig en-doa, a lavare ar Gaperien, eur mell baro hir-hir, spontuz : ken bleveg edo hag ar brohed a rede dre e goajou. Hogen, ar paotr koz a deuas da gaoud e-giz mez o tougen eun heveleb berniad reun, hag a embannas da oll varverien ar Hap dond d'e douza : an hini a deuje a-benn euz an taol a hounezfe pemp kant skoed : med an hini a gignfe krehenn an aotrou, a dapfe kerkent pemp tenn pistolenn en e empenn.

War am-eus klevet, tri pe bevar barver a yeas d'ar maner, med hini anezo ne deuas en-dro. Red eo kredi o-doa kignet beg an Aotrou.

*

Hogen d'an ampoent e chome e bourh Kleden eur barver, eul labous a varver, Mazoig e ano. Med, siwaz ! evid dezañ beza labous endra ma heller, daoust da gement-se, an dour a oa izel gantañ. Gouel Mikael a dostae d'ar red, ha Mazoig n'en-doa ket c'hoaz arboellet gwennegig ebed... ha piou 'oar ? marteze e vije taolet er-mêz, gwreg ha bugale war e lerh.

Kement-se a lakae diêz e dammig boulienn, pa ziwanas eur zoñj en e benn :

« Na Petra 'ta ?, emezañ, perag n'ez afen-me ket da douza broh koz maner Kerdiern ? Mar gellan dond a-benn, setu pemzeg kant lur em yalh... Mar choman berr koulskoude, e-giz ar re all, neuze, e vo ar gwasas... Med bastig ! lemm eo va aotenn, ha skañv va dorn. Deom ! »

Hag eñ en hent, heb lavared grig da zen, e stalikerez barver gantañ dindan e gazell.

Pa skoas war dor Kerdiern :

« Piou 'zo aze ?, eme ar porzier. Buan ahalenn, boulhurun ! Amañ ne roer ket d'ar beorien ! »

« O ! a drohas berr Mazoig, me n'on ket eur hlasker-boued : me 'zo eur barver, hag e teuan a-bell da droha e varo d'an aotrou Fistoulig. »

« Paour-kêz amziod ! », eme egile, da glask polos e teuez... Gwelloh paotred egedout a zo bet o klask tapoud ar pemp kant skoed ; ha, siwaz dezo, emaint o vreina e-barz dour ar foziou aze ! »

« Me ne rin ket evelto », eme Vazoig.

« A gav dit ? Te 'zo eul labous neuze !... Da vihanna, lavar din da ano, ma talhin soñj. »

Hag e tigoras dor ar porz.

« Foei ! ne ran ket avad, eme Vazoig, rag fentuz, farsuz eo va ano ; gwir eo ivez ma n'on ket euz ar vro. »

« N'eus forz pegen farsuz e ve, lavar atao. »

« Ma ! *Mevaunan* e vezan anvet gand an dud. »

« Petra ? *Mevaunan* ? E peleh out bet o pesketa an ano-ze ? »

Hag ar porzier a hoarze e walh, ken na ziridigne e stropad alhweziou war e gorv dour-lêz.

Mazoig n'edo ket eun hanter re-zispont an tamm anezañ ; n'eus forz, mond a reas en ti, pa gejas gand ar plah-kegin a oa dres o tond ivez e-barz dre an tu all, eur vrehad keuneud faoutet ganti da ober tan dindan lein. Boazet evel m'edo da veza he-unan war-dro an ti, al loudourenn a spontas hag a lezas he heuneud da goueza en eur weled Mazoig.

« Na spontit ket, plah paour », eme hemañ ; « me 'zo deut da ober e varo d'an aotrou Fistoulig. Peleh emañ ? »

« Va den mad, n'oh ket emichañs ?... Ar re a deu en ti-mañ ne hellont morse mond war o hiz. »

« Eo, eo. Me a droho kempenn e varo d'an aotrou, c'hwi 'welo. Peleh emañ ? »

« A gav deoh ? Neuze, pignit aze gand an diri war an dorn dehou. Med, da vihanha, lavarit din hoh ano, ma talhin soñj ouzoh, mestr-barver ? »

« Foei ! ne ran ket avad, eme Vazoig ; n'am-eus ket eun ano brao ; gwir eo ivez, me 'zo euz pell-bro, n'on ket ganet e-touez ar Gaperien. »

« N'eus forz, n'ho-pezit ket aon, gagnit an ognon ! ha lezit hoh ano da zond er-mêz ! »

« Ma ! badezet on bet *Bouchadin*. »

« Petar ? *Bouchadin* ? o ! o ! Lost ar spanell ! *Bouchadin* ? Biskoaz, nann, biskoaz kemend-all... »

« ... Nann, loen bihan gand eur marh dall ! « a echuas Mazoig, o pignad gand an diri, e-pad ma tiskorde ar plah da hoarzin, kement ha ken kreñv ma kinnige koll he broz !... »

Degouezet war ar pondalez, Mazoig a gavas an aotrou Fistoulig eno. Tud paour ! Setu aze eur bleveg ! Hirroh ha rustoh 'oa e varo eged na vez lost ar zaout e-pad gwrez an hañv. Na pebez penn ! Ar barver paour a lammas an aon war e gein, hag eun eston n'eo ket.

« Daoust, eme mestr ar reun hir, daoust ha te a deu da grenna va baro din ? »

Petra bennag ma krene war e dreid dindan sellou du an aotrou Fistoulig, sellou ken lemm hag e aotenn, Mazoig ne gollas ket e benn ; kaoud a reas nerz a-walh evid stoui dre an hanter, ha gand e vouez ar flourra e respontas :

« Ya, aotrou, rag barver on dre vicher. »

« Ma ! eme egile en eur vond en e gador, Mazoig war e lerh, arabad koll amzer neuze ; ne varhatan ket : mar kempennez mad ahanon, setu aze war an daol ar pemp kant skoed, med a-hend-all, mar kignez ahanon eun disterra, sell e-kichenn ar yalh eur bistolenn, pemp tenn e-barz, hag a gavo an hent da vond ez penn ! »

Mazoig a zoñjas :

« Amañ, kigna a zo mervel ; amañ, dindan boan da veuzi, eo red neu pe eva an dour. »

An aotrou Fistoulig ne oe ket pell evid azeza, ha Mazoig kennebeud ne zaleas ket d'ober eun taol lemm d'e aotenn. Ar soavon a oe fardet ker buan, ha setu eur berniad kloz a livas e gwenn baro an aotrou.

Edo ar barver o vond da skei an taol kenta, pa zavas an aotrou e benn :

« A ! emezañ, lavar din, va den, da ano da genta penn, rag, em-eus aon, te 'zo eul labous a varver... »

« Va ano, aotrou, a ra d'an dud c'hoarzin ; farsuz eo, n'eo ket anavezet dre ar Hap. »

« Lavar atao, pa houlennan diganit, seiz luhed kamm ! N'eo ket me ar mestr, kant boullhurun ruz ? »

« O ! na grozit ket, aotrou ; va faeron eo am anvas *Eveldon*. Lavaret em-oa deoh e c'hoarzfeg. »

Hag, evid gwir, Fistoulig a ziskordas da hoarzin a-strak.

Pa ehanas, Mazoig a grogas gand e damm labour. Brao ez oa ganti : an aotenn a drohe gwelloh eged biskoaz, hag a-barz pell eun hanter euz ar reun a oa touzet diwar beg o ferhenn, heb na veras takenn gwad ebed.

Med siwaz ! teir gwech siwaz ! pa oa red dezañ boulha gand an tu all, ar barver paour a welas e aotenn o krena etre e vizied. Eñ a grenas ivez war e zivesker, e-pad ma soñje petra d'ober. Ne zaleas ket gand e zoñjou. Lezel a reas e aotenn a-gostez, evid saovona ar baro hir, ha saovona e-taill, ha saovona c'hoaz.

An aotrou a gave êz ha ne dinte ger ebed, med fin a zo, ha Mazoig a skuize e vreh outañ. Ha setu-eñ o kemered eur hlotennad saon, hag o stouva daoulagad ar Fistoulig. Hemañ a ginnigas sodi :

« Va fistolenn, emezañ, va fistolenn. »

Ya, med e-pad m'edo o klask digeri e zaoulagad, Mazoig a guzas en e vruched yalh ar pemp kant skoed ; hag e klemme ;

« Aotrou, aotrou, me ho ped, faziet am-eus, ha n'em-eus ket kignet. Ouspenn, n'on ket da veza tamallet, rag ma oufeh... O ! va hov, va hov !... »

Hag e plege etre daou, hag e ree an ezvan da gaoud poan vouzellou, eun druez e weled. Dres ! ar gwel anezañ a denerraas an aotrou.

« Pona gov, emezañ, netra n'eo. Diskenn buan d'ar porz, hag en tu kleiz e kavi... eul leh distro d'az tiboania. Med prim ha prim, avad ; eun hanter kard-eur a lezan gand da dro, e-pad ma vin o tiskuiza va daoulagad. »

Mazoig ne hortozas ket pelloh :

« Treugarez ! », emezañ.

Hag en traoñ gand an diri, e-giz eur marj spontet.

*

En eur dremen a-biou d'ar gegin, al loudourenn a deuas war doull an nor :

« O ! *Bouchadin*, c'hwi 'zo eul labous a varver ! Penaoz ? pod an dienn ? echu eo ganeoh ? O ! sur a-walh hoh ano a zo moulllet war ar hazetennou. »

Med Mazoig a oa re a veh warnañ evid chom da zelaou anezi o randona, hag e tiskenne, hag e tiskenne !

Edo degouezet e-tal an nor vraz, pa zeuas ar porzier dezañ :

« Pep ! pep ! ahalenn n'ez a kuit den ebed, nemed ar mestr a vefe d'e heul. Tut ! tut ! tut ! Amañ e chomi, *Mevaunan*, n'eus forz pegen labous e vefes, nemed diouaskell a vefe stag ouz da gostennou da nijal a-dreist an nor-dal. »

« Gortoz kentoh, paotr koz, ma rin dit diskana "Sut ! sut ! sut !" »

Hag e sacahs war paotr an nor, n'ouzoh ket peleh ? Beteg al leh distro... a flêrie er horn all, hag e stlapas anezañ e-barz. Ha goude Mazoig a zigoras an nor, rag kemeret en-doa alhweziou ar porzier, ha setu al labous er-mêz diouz e gaoued !...

*

Koulskoude, Fistoulig, goude beza dizaonet e zaoulagad, a gave hir e amzer.

« Petra, emezañ, paotr ar bleo ema an dreuz warnañ evid mad, em-eus aon. Deom da weled peleh eo chomet. »

Hag eñ d'an traoñ, tiz warnañ.

Kaoud a reas maouez ar spanell grampouez.

« Penaoz, a houlennas-eñ digand ar plah, ha gwelet ho-peus *Evelton* ? »

Ar plah a zellas ouz he mestr, hag o weled e varo hanter-drohet, soavon ouz e veg, ne oa hi evdi mired da hoarzin.

« O ! nann, aotrou biskoaz n'am-eus gwelet eveltoh, biskoaz em buhez ! »

« Hag homañ a ra ar zod ganin-me ? Me 'houlenn ha gwelet ho-peus *Evelton* ? »

« Nann, aotrou, nann, morse. »

« Dre beleh neuze eo diskennet *Evelton*, pe kousket edoh, peogwir n'ho-peus ket gwelet liou euz ar barver ! »

« A ! entent a ran bremañ, eme ar plah, c'hwi a zo o klask *Bouchadin*. »

« Petra, eme an aotrou, me o klask boucha d'am flah hag e kredit, lichuenn, va zamalloud er hiz-se ! Me a lavar deoh ne uzoh ken kalz a vouteier em maner diwar gement-mañ. »

Hag eñ er-mêz da glask penn euz *Evelton*.

*

Degouezet er porz, ar Fistoulig a glevas eur vouez o krial « Forz va buhez ! », hag ar vouez a zeblante dond diouz al.. leh-distro. Ha setu an aotrou da weled, hag o kaoud e borzier hanter-veuzet el lorgnez.

« Flêriuz ! piou en-deus da daolet aze e-barz ? »

« *Mevaunan* », eme egile.

« Te da-unan ? Ma ! chom aze », a respontas ar mestr, « mar kavez brao neuvi e-barz. »

Neuze Fistoulig, o weled an nor-dal digor-kaer, a intentas edo nijet kuit ar barver. Hep chom da varhata, ez eas d'e varchosi hag e lammas war gein e varh du-diaoul, hag en hent de redeg war-lerh Mazoig.

Mazoig ivez a rede euz e wella, pa glevas trouz marh an aotrou o tostaad. Degouezet edo dirag eun ti nevez hanter-echu, ha Mazoig e-barz ! Diwiska 'reas e chupenn, latousa 'reas e veg hag e zaouarn gand pri ha raz, hag eñ da bignad gand ar skeul war an doenn, rag an doerien, boulhet mad o labour ganto, a oa eet d'an ampoent da glask mern.

Hebdale e tegouezas an aotrou, skuiz ha dielhet o veza daoulammet eur pennadig.

« Hep ! toer, emezañ, n'ho-peus ket gwelet eul laer o tremen ? »

« Eo, avad ; med pell e tle beza, rag tiz 'oa warnañ. »

« A ! setu aze eul labous hag e karfen krenna e ziuaskell dezañ, med re skuiz on ; mar karit mond war e lerh, del deg skoed ha va marh. Degasit din va den, hag ho-peus gwerz-butun da gaoud. »

« Ya, mond a-walh a rafen », eme Vazoig, en eur ziskenn ; « med me am-eus greet marhad da zistoi an ti-mañ ; neuze pignit war-laez, ha labourit, e-keid ma vin gand va zro, da zidacha ar vein-glaz a-daoliou morzol. »

« Hag e rin ! », eme Fistoulig en eur bignad war an doenn, e-pad ma lamme Mazoig a-haoliad war ar marh du, paket gantañ deg skoed all...

*

Koulskoude e-pad ma rede Mazoig war-zu ar gêr, peadra dezañ bremañ da baea e Houel-Mikêl, an aotrou a skoe e-taill hag a vreve didruez ar vein-glaz, pa zegouezas an doerien, debret mern ganto.

« Pop !, eme ar re-mañ ; petra 'reom aze ? Alo ! en traoñ ha buan ! Pe fur pe zod ez oh ? »

« Me 'zo gand va labour », eme ar Fistoulig, en eru chouka ken didruez ha diagent.

Neuze, an doerien a glaskas pignad war an ti, med bleo ! egile a stlapas mein-skjent a-vernadou warno, ken e kinnige o dalla.

Dres ! archerien ar Pont, o pourmen dre ar vro, a zegouezas war al leh, hag o weled ar bleveg Fistoulig, trohet eun hanter hepken euz e varo, oh ober kemend a jolori, e kemerjont prim anezañ evid eur penn goull ha divouedet. Dond a rejont a-benn da deuler o hrabanou warnañ, goude beza paket o lod mein-glaz.

Hogen, evel ne oant ket evid entent rezon-vad ebed gantañ, e kasjont anezañ da di an Diskianted da Gemper, e leh ma teuas a-benn da dremen eun toulladig bloaveziou en disheol, da hortoz ken na deuas e varo keit-ha-keit war an daou du euz e veg !...

Lezet da zistrei d'e vaner, e furraas en eur vervel !

*

Paour-kêz Fistoulig, aotrou bleveg, setu-te bet klenket brao er gaoued, o klask krenna e ziuaskell d'eul labous e-giz Mazoig, barver Kleden, e bro Kaperien Beg-ar-Raz !!

Mizerig

Eur wech e oa, pe ne oa ket, kredit, lennerien, pe na rit ket : me 'gonto deoh an tarou hervez m'am-eus o hlevet, hag e oa eun den e ano Mizerig. Eur hoz denig eo a fell din lavared, eun netraig, rag, evitañ da veza deut d'an oad a bemp vloaz warn-ugent, e vije bet kemeret êz evid eur hrennbaotr a boan echuet e baskou gantañ ; ne oa na braz, na teo, nemed ar hrohenn war an eskern, ha c'hoaz askornet munut e oa. E vizaj drouglivet, heb eur vlevenn didenvet war e vuzell uhella, e toull druz ar merhi, ne oa warni nemed liou krampouez Kemper. Evid echui, gounezet e oa e ano gantañ ; en eur ger, anvet mad e oa bet Mizerig.

Nerz n'en-devoa ket, evid gwir ; med, evid e lod, e oa ijinuz ha speredet-braz-meurbed ! Arabad e vije deoh c'hoarzin goap warnañ dindan e fri, rag atao e kave an tu d'ho paea, o veza ma lavare ne oa ket mad dezañ chom, re bell da vihanha, dleour da zen ebed.

Dizoñjal a reen da lavared deoh e oa Mizerig chalboter, pe charretour, mar kavit gwelloh, hag o chom tostig da Bont'-n-Abad. D'an amzer-ze, ne oa deut c'hoaz ar hiz gand ar merhed da vond, beb mintin, e kêr da gas lêz hag amann, er "char à bancs", mar plij !... Neuze e vije gwelet ar Bigoudenned o vond e kêr war droad, eur podad lêz, sonn war o bigoudenn-penn-tach, eur paner a-istribill ouz peb dorn, beh ganto o ruza o divesker, skuiz-marzo o tougen eun hanter-dousenn broziou.

An dra-mañ a zo evid lavared deoh e ree goap ar Bigoudenned ouz Mizerig, pa dremenent en e gichenn, ha Mizerig diouz e du, a skoe didruez gand e skourjez dre an divesker ; med peurlies a broziou mezer fetiz o diwalle, hag ar Bigoudenned a gendalhe da hoapaad.

*

Eur mintinvez, e-kreiz miz gouere, e tremenas diou Vigoudenn dirag or chalboter, hag ar jabadao o kas diohtu.

« Sell ar paotrig !... Mizerig, deuit amañ, Mizerig, me ho lakay em zavañjer, pe em faner, e-giz ma keroh ! »

D'an taol-ze, Mizerig a yeas droug ennañ, droug evid mad, hag eñ ruz-glaou gand e bennad imor, o vond d'an diou Vigoudenn : taoliou skourjez a-gleiz hag a-zehou, ha dao, ha dao, dao dalhmad ha dao c'hoaz !... D'ar fin, eur podad lêz a oe skuillet war ar bouldrenn hag ar hlazenn e kostez an hent braz ; ouspenn-ze, daouzeg vi, eun dousenn viou, war-bouez eur vi, a oe bruzunet ha greet koz-podig ganto, e-giz d'ar Hazimodo.

Ar Bigoudenned a drohas kuit ahano etrezeg Pont'-n-Abad, en eur hoarzin en eur giz all !...

*

Mizerig a oa laouennoh eged biskoaz ; ha, goude beza disterniet e gezeg, ha debret e dammig mern, e c'hoarvezas e kostez an hent evid kousked eur pennadig da ziazeza, da hismori²² e govad bara, en disheol a-zindan eur reñkad gwez dero.

D'ar mare-mañ, an diou Vigoudenn a zistro diouz kêr, hag a wel o enebour touet koukset er foz ouz ar hleun.

« Ha petra 'roim dezañ ? Red-mad eo en em veñji ! »

Tomm eo an amzer, an heol a boaz. Goude beza klasket piz ha diglasket ker piz all, n'ez eus kavet netra gwelloh eged liva bizaj ar housker gand eur restad dienn, chomet e strad eur pod.

Greet eo an taol, hag ar Bigoudenned kuit !...

Koulskoude eur stropad kelien a zo en em vodennet war ar bizaj diennet ; ha, mezvet gand he hovad dienn, pep kelienenn a beg, gwasoh an eil eged eben. Hogen kousket eo Mizerig, n'eo ket maro, hag eñ, en eur zihuna, a dremen e zaouarn war ar helien. Pebez distruj ! Nag a loened ! Daou-hant korv maro, nemed daou, a oa kavet astennet war an dachenn, heb unan muioh, heb unan nebeutoh.

²² hismori : ? Diskenn ar boued.

Ha Mizerig o sevel en e benn da skriva d'ar Roue kement-mañ :

« Me, Mizerig, eur gwaz ma zo unan, am-eus lazet daou-hant neemed daou, gand daou daol dorn !

Mizerig
chalboter e-kichenn Pont-'n-Abad
Bro ar Vigoudenned. »

Dizoñjet e oan bet da lavared deoh e oa neuze, war an tron, ar roue Grallon, mestr war an dud, e Kemper, dre hras Doue hag ar Werhez.

D'ar mareou-ze, Grallon a oa o klask sevel mogeriou en-dro da Gemper, evid diwall e gêrbenn. Hogen ar pezh a veze savet en deiz a veze diskaret en noz ; ha, gwasoh c'hoaz pe ker gwaz, ar gwardou ne veze mui klevet ger diwar o fenn.

A-barz pell e tegouezas lizer Mizerig gand ar Roue.

« Sell ! sell 'ta ! eme hemañ. Ha koulskoude, daou-hant nemed daou, gand daou daol dorn, an dra-ze a rafe kant war-bouez unan, gand eun taol-dorn !... O ! Mizerig eo ar gwella paotr e-touez va zujidi. Ha, pa zeu soñj din, hennez a ziwallo emichañs va mogeriou nevez. Mad ez a ar bed !

Hag ar Roue, hep koll amzer o varhata, kas kelou da Vizerig da zond d'ar palez, ar buanna ar gwella.

Diohtu, Mizerig a werzas karr ha roñsed, ha setu or paotr war an hent braz a gas da Gemper.

Abaradez noz a oa, pe oa degemeret gand ar Roue.

« Te eo Mizerig ? »

« Ya, me va-unan, ha n'eo ket den all. »

« Gand daou daol dorn e lazez daou-hant war-bouez unan ? »

« A zo gwir kement-se. »

« Mad ! neuze e vi kaset en noz-mañ da ziwall ar mogeriou nevez : eur garg tenn-meurbed. Kent se, ped den a vo kaset ganit d'az sikour ? Peseurt armou a gemeri, gwareier pe goafou hir, pe klezeier dir ? »

D'ar mareou-ze, ne oa c'hoaz ano ebed nag euz kanoliou na fuzuillou.

Tud paour ! Mizerig a grene e oll izili outañ, evel eur bern deliou seh hejet ha strillet gand an avel-dro, ar gorventenn !... Med ar paour fin a gav da respont d'ar Roue.

« Va divreh, Aotrou, a vo va oll armou. Roit din hepken eur sakotad mein bihan, bili gwenn dastumet war an tornaod, hag eur sakotad lêz pouladeg... Hag an hini a dremeno e-biou da hourhemenn ar Roue, hennez a lezo e grohenn etre va daouarn-me !... Gand nerz-kalon me 'raio va dever : bezit fizañs e Mizerig ! »

Ar Roue, gounezet oll gand ar geriou-ze, a roas d'ar chalboter eun toullad peziou melen ; kalon Mizerig a dridas gand al levenez.

Ha da houde :

« Em falez, eme Grallon-Meur, em-eus eun nizez yaouank. Te 'oar, dit e vo da bried, ma tistroez gand penn an torfetour ! »

Neuze, mignoned, bizaj Mizerig, an heol o para warnañ, ne vije ket bet skedusoh. Ne oa-eñ ket evid beza : soñjit 'ta, ar paour-kêz denig a oa bet red-mad dezañ, beteg neuze, chom dizemez, rag biskoaz plah ebed ne zellas outañ hep c'hoarzin leiz he beg, pe heb distrei he fenn gand truez !

Kennerzet gand ar zoñj euz e briñsez, Mizerig en-dije trehet, me 'gred, war an eur, n'eus forz peseurt enebour...

Degouezet an noz : Kemper a zo kousket abred.

Mizerig a zo e-unan war ar penn-moger a zo bet savet e-pad an deiz. Skuiz gand e hent, emañ ar housked en e zaoulagad, pa wel en eun taol, o tond diouz ar hoajou don a zo e-kichenn kêr, eur mell den, eiz troatad d'an nebeuta, teir gwech brasoh egetañ.

An ozah koz, eul loh houarn war e skoaz, degouezet e-harz ar voger, a zav e zaoualgad :

« Eur gward hepken, emezañ, treutoh e vo va zoubenn !.. ; Ha te, preñvig-douar, perag ez out pignet ken uhel ? Buan d'an traoñ, amprevan, pe... »

« War bouesoh, aotrou braz, na hoarzit ket re abred, mar plij !... Daoust ha c'hwi a zo gouest da ober ar pezh a rin-me ? »

« Me 'gav din, da vihan ! », eme an hini koz dichek. « Penaoz ? »

« Ma ! eme Vizerig. Gwelit, m'ho-peus sehed, evit ; gweled a rit an dour o tivera ? »

E-pad an amzer-ze, ar chalboter a wash eun dornad lêz pouladeg.

« Me 'ra dour euz eur vilienn ; grit kemend-all d'ho tro. »

Ha Mizerig mond d'e zakod all, ha stlepel eur vilienn d'ar ramz koz. Hemañ he frit, he mal, he has da vleud, med beradenn dour ebed ne gouez ; mala a ra daou pe dri mên all, med ar bleud mein a chom seh.

Diou wech all c'hoaz, Mizerig a ziver dour diouz e lêz pouladeg.

Ha neuze an ozah koz a zavar bravoh : aon en-deus, anad eo. Pedi a ra zoken Mizerig da vond da leina davetañ e-kreiz ar haod.

Hag int en hent o-daou, ken buan.

*

D'ar mintin war-lerh, ar Roue a wel ar voger en he sav, med, evel ne zistro ket Mizerig, eo red kredi ez eo bet lazet. Neuze ivez e tiskred n'oa ket gwir en-doa lazet kant den gand eun taol dorn. Ha koulskoude, ar voger a zo en he sav ! Penaoz kement-se ?

*

Merzig a zo degouezet e ti ar peulvan koz, ma heller rei an ano a di da beder reñkennad gwez, sanket en douar, an eil tost d'eben, ha goloet a vleñchou.

En amzer-ze, ez eus war an tan eur pod-houarn euz brazder eur baill-kouez, hag, e-tal an tan, eur wrañh koz, troñset he muzellou, hir he dent, savet he fri kamm, astennet he chink askornet : maouez an ozah koz eo.

« Tan ! eme an hini koz ; me am-eus naon. Lak er pod-houarn an tourz am-eus lazet deh. Me 'zo o vond da gerhad dour. »

Eur reñkad barrikennou goullou a zo e-tal an nor ; Mizerig, eñ, en-dije beh a-walh evid eur varrikenn houllou. Ha c'hoaz ar feunteun a zo eur hard leo alese.

« Penaoz 'ta, eme Vizerig, paotr fin dalhmad, penaoz mond keid all da gerhad dour bemdez ?... Ro din eur bal, eur varr, pe eur benveg bennag, ha me a ya dioustu da gerhad ar feunteun amañ ! »

Sebezet oll eo an daou goz, med ne falvez ket dezo diblas o feunteun, gand aon da louza he dour enni.

Setu an hini koz en hent, e varrikennou gantañ, e-pad ma'z a Mizerig d'ober eun dro-vale, en eur hortoz lein.

Keja a ra gand eur marhadour lien o vond da foar Gemper. Paotr Pont-'n-Abad a houlennas digantañ :

« Hervez an doare e veajit pell 'zo,

Ho tillad a ziskouez n'oh ket euz ar vro. »

« Nann avad, eme egile, n'on ket ahalenn : me a zo euz bro an Durked, e leh ma vez eostet ar hafe... Ha c'hwi, petra 'brenit em stal ? »

Ha Mizerig o prena digantañ eur zaro ; eur zaro hir d'eun all a zo re hir da Vizerig. An dra-ze ne ra ket. Hebdale ar zaro a zo gwriet ar penn d'an traoñ anezi ouz ar bragou, ma ra an dro d'on chalboter evel eur zah.

*

Pa zistro Mizerig, al lein a zo dare, ar zoubenn a zo war an daol o yena ; med, e-leh skudellou, n'eus nemed saillou ; al loaiou a zo kentoh heñvel ouz paliou, hag ar fourchetezou a zo kerent-tost d'ar ferhier houarn.

Beh d'al lein !... Buan ar zaillou a ziskouez o strad, lipet eo ar zoubenn. Ha dao d'ar hig-sall !... An daou goz a zebr, a lonk, atao eun tamm en o beg. Eun hanter dorz vara deg lur war-lerh eur mell tamm kig, ha beh dezi ha dihan ebed morse !...

Mizerig a zebr evel pep kristen, nebeutoh zoken eged tud varlonk a zo. Koulskoude, evid ober evel ar re all, rag mez a deu dezañ, setu-eñ o troha kig ha bara, o has war hent e veg, digeri e zaro, ha lezel an tammou da goueza en e zah.

Pa'z eo echu, eo beh da beb-unan teurel an eil troad a-raog egile.

Mizerig hag ar ramz koz a ya o-daou da ober eun droig beteg ar feunteun, evid diazeza o hovad, e-pad ma stag an hini goz da skaota he heusteurenn.

Tost d'ar feunteun ez eus eur fozad dour hanter dizehet, a bemp pe hweh pe zeiz troatad d'an hirra. Dioustu e sav kaoz da houzoud piou eo ar skañva, ha red eo gouzoud piou a lammo ar pella a-dreist ar foz.

Diou wech an daou lammer a gouez e-kreiz an dour ; med tomm eo an heol hag an dour klouar.

A-raog lammad d'an drede gwech koulskoude, Mizerig a denn e gontell hag a rog penn-da-benn e zaro hir, evid dezi beza nevez-flamm. Soubenn, kig ha bara a ruill hag a ziruill mesk-ha-mesk d'an dour, ha Mizerig, skañvaet a bemp lur warn-ugent da vihan, a lamm peurzouezet a-dreist ar fozad dour evel netra.

An hini koz a chom peurzouezet. Pa wel Mizerig en tu all, hag eñ c'hoaz e buhez, e houlen :

« Petra ? Te 'drioh da gov, evid diskarga da voued, ha ne rez van ebed ? »

« O ! nann..., eme Vizerig. Ne drohan ket va hov heb eun tammig poan pep tro, med basta ! pa vezer boazet ouz eun dra, c'hwi 'oar... »

« Dal ! sorser, taol din amañ da gontell vurzuduz, ma welin ha mond a rin a-dreist da houde. Koulskoude, n'eo ket gwall-gempenn d'eun den diskouez d'ar re all petra en-deus debret d'e lein ! »

En eur beurlavared ar geriou-ze, e sko gand e oll nerz, hag ar gontell a dreuz e galon.

Eur vlejadenn estlammuz a spontas an hekleviou, ken ma horjellas gwez ar hoajou ; ha gwad ar peulvan a ruill hag a ya da beurleunia ar fozad dour. Oei !...

*

Setu penaoz Mizerig a zo en distro, a-raog an abardaez, da balez ar Roue. Pep hini a zo souezet ouz e weled beo c'hoaz, ha souezetoh kalz o weled penn rukunuz an diskarer mogeriou en eur mouchouer skoulmet a-istribill ouz e zorn.

Hag evid kloza va hoñchenn wir, petra 'lavarin c'hoaz a haou ?

Mizerig, evel kustum, a oe eüruz a-dreist muzul. Teir zizun da houde, amzer hepken da gas an embannou, e oa eureujet gand ar briñsez Azenorig a Gerne, rag ar roue Grallon a zalhas d'e her.

Ar briñsez a oa koantig-koant, nemed eun tammig bihan berroh he garr dehou eged an hini all. Ne oa ket kalz a dra an dra-ze. Mizerig, eñ e-unan, ne oa ket paotr brao, paotr a daill. Med karantez virvidig ha gwirion a oa etre an daou bried yaouank.

Doue a roas dezo eun neizad bugale, merhed koulz ha paotred. Med ar baotred a oa oll brasoh eged o zad, ha divesker ar merhed a oa oll keit-ha-keit ; bugale goant evel o mamm. Ijinuz evel o zad.

Unan zoken euz bugale vihan Azenorig, priñsez a Gene, ha Mizerig, a deuas diwezatoh da azeza war dron Grallon Meur, evid d'e dad-koz, Mizerig, beza bet gwechall chalboter e-kichenn Pont-'n-Abad.

Yann ar yod

*Ar wreg en ti, ar gwaz er-mêz,
Hag an oll draou a droio êz
'Vid brasa mad an tiegez !*

Setu aze eur wirionez hag a zo oajet. Na c'hwi, na me, nag ho tadou-koz, na va re-me, hini ebed ahanom, a-dra-zur, na bihan na braz, na foll na fur, n'edo c'hoaz ganet, hag ar wirionez-se a oa beo ha gwir. Ya, da vihanna, mar deo red kredi ar goñchenn-mañ a zanevellas din, eun nozvez goañv, Gwill an Truillou, eur pillaouer a-ziwar gichenn kribenn Menez Are.

*Me 'gred ne gontas din a haou
Nemed eun hanter ger pe zaou !
En e zah 'oa muioh a laou. Eh !*

*

Neuze, eme Gwillou an Truillou, tudou, abaoe ez eus pell ; ez eus pell, da lavared eo n'eo ket pell, e-giz pell-kerh pe pell-gwiniz, med pell amzer... D'ar mareou-ze, war am-eus klevet, pep pillaouer a houneze war-dro kant skoed en eun devez pillaoua, hag heb en em skuiza c'hoaz !

Siwaz d'am zah ha d'am hein !... Perag n'on-me ket bet deut beo d'an amzer-ze ? Gand kant skoed d'e zvez me a anavez eur pillaouer ha na vije ket bet bloavez warn-ugent bed evid dastum eur yalhadig vrao. Med petra 'zervich lakaad servich pa ne varv den, hag, a-dreist-oll, pa n'eus ket arhant da baea ?... An amzer-ze n'emañ mui ha ne gavo ken an hent da zond en-dro war he hiz²³.

Neuze 'ta, em-oa eun eontr koz, lesanvet Yann ar Yod. N'am-eus ket gallet morse gouzoud da vad peseurt kerentiez a zo etrezom. Ha, pa'm-bije gouezet hag an oll, kement-se n'en-dije ket talvezet din da nemeur. Rag, ma vije bet pinvidig va eontr, e zanvez a vije bet ingalet pe dispignet gand e heritourien, a-barz na vije deut netra beteg ennon. Soñjit 'ta ! Keid all amzer a zo eo maro an eontr koz-se !... Ha neuze, hervez m'am-eus bet lennet em yaouankiz war eur hoz tamm paper koz krohennet, me 'gred a-walh, va eontr koz n'edo jet eur bern pinvidikoh eged e niz yaouank, rag n'edo ket pillaouer. Nann, turier-douar edo Yann ar Yod, na muioh na nebeutoh, ha, diwar labour e zivreh, temzet gand c'hwezenn e dal, dre zerr poania a-walh, eo e save, en e bemp parkig, peadra d'o maga, eñ hag e wreg. Rag dimezet edo va eontr koz, hag e wreg, me 'gred, a oa va moereb.

Ouspenn d'e wreg Margodig, e oa c'hoaz perhenn da eur haor kerniel hir, d'eur pennmoh du penn-da-benn, ha d'eun toullig ti dare da goueza en e vern, skoaziet er gwasked euz kein eun dorgenn, bepred, war e doenn soul hanter-vrein, o sevel geot glaz ha peuri druz, boued mad evid Bebekig, ar haor, a vez, peb an amzer, laket da beuri anezo.

Hag en tiegez an traou a yee didrouzig ha klok a-walh en o zro. N'edo nemeto o-daou evid sevel o lezennou ha suja dezo. An aotrou person koz, eun den hag a oa maout war al latin, a lavare, en eur gomz anezo : « Tota domus duo sunt, idem parentque... ». An daou bried, laouen euz o stad, en em gave pinvidig en o faourentez, peogwir, hervez ma lavare gwechall sant Gweltaz d'e vestr Kadok ar Fur : « Ar pinvidika den a zo er bed eo an neb na hoanta ket kaoud ar pezh a zo d'an nesa. »

Perag neuze, a gav deoh, e vije bet lesanvet va eontr koz (Doue d'e bardono !) Yann ar Yod ? Na lakit ket ho poan da glask. Seu amañ ar perag hag ar penaoz.

*

Petra 'fell deoh ? Dibaot eo deom kaoud tud didamall a bep si fall, zoken e-touez or herent.

²³ war he hiz : gwregel eo "amzer" evid Eostik Kerineg.

An dud, a lavare n'ouzon dare piou, a zo damdostig heñvel ouz ar steriou. Rag an oll steriou a red dour enno, gwir eo, med buannoh en eil eged en eben, med lousoh pe sklêrroh en homañ eged en honnez. Ar ster-mañ a zo e-giz klouar, ha dour unan all a zo hanter-skornet.

Evel-se an dud a zo daou rumm anezo.

Ma ! va eont ha va moereb n'edont ket euz an heveleb rumm ! Margodig, va moereb, hi, en eur gosaad, abalamour n'he-doa ket a vugale marteze, a deue da veza tuet, eun disterra, war ar vuanegez. A-walh e veze d'am eontr Yann degouezoud eur momedig re ziwezead, pe da lein pe da vern, pe da goan, da zebri pe avalou-douar en o hrohenn, pe zoken soubenn "an tri zraig, dour, holen ha baraig", setu kerkent peadra d'am moereb da zihourda he latenn ha da zistaga d'he Yann "an Diwarlerh" eur zarmon dispar gand litanou ha pedennou euz ar re na glever ket aliez en ilizou. Hag e hellit kredi, pa veze deut da benn, teod ar brezegerezh ne veze ket merglet en he genou. Ha, koulskoude, ar paour-kêz Yann, eun denig war e bouez, ne responte nepred nemed an heveleb geriou beb gwech.

« Dalh soñj, Margodig, ar parkeier a zo pellig ahalenn. Dalh soñj ivez euz an abardaez, daou vloaz 'zo, ma torrjont din ma garr gleiz gand taoliou baz-yod, abalamour ma oa yenet koan ouz va gortoz ; hag abaoe, gouzoud a rez, ne hellan ken bale ken buan ha kent. Dalh soñj, gwreg paour ! »

Hag evel ar barr-arne du a dremene a-dreist al lochenn, dre ma plade Yann dirag Margodig. Ha mad a ree, a gav din, petra bennag ma lavarar : "Ar gwaz a bleg gand e wreg n'eo na gwaz na maouez : eun netra n'eo ken, nebeutoh c'hoaz eged eur hemener".

*

Eun abardaez, koulskoude, o veza chomet re ziwezead da hada pour e park an *Tri Horn*, ha koan o veza eet yen, va eontr a glevas adarre e "*bater noster*" gand e berhennez.

Droug a yeas ennañ eur wech ivez.

« Petra, emezañ, goude ma ran evid ar gwella, e-teus c'hoaz ar gobari, ar goustiañs da derri va fenn din ? A ! bourdachou ! Mar kav dit eo ken brao-ze dond d'ar gêr, dres pa vez dare koan, nag a-raog na war-lerh, n'e-teus nemed mond da labourad d'ar park, te, hag e weli ! »

« Hag ez in warhoaz vintin », eme ar wreg.

« Pa gari », eme an ozah.

Hag, heb muioh a reuz, ez eont da gousked.

Antronoz, da gan ar hillog, set-int o-daou war zav. Hag e oe greet e-giz ma oa lavaret en deiz a-raog da noz.

Va moereb Margodig, didrouz, o veza dihunet war he zu mad, a wiskas chupenn he Yann, a gemeras eur rastell, eur varr, eur falz, en dalher a-ziadreñv an nor, hag, ar binviou war he skoaz, a ya da labourad da bark an *Tri Horn*, en eur vala eun tamm kreun bara segal.

A-ziwar dreujou an ti, hag heb distrei, e lavarar d'he Yann :

« Ha, mar kerez, te 'oar, na zizoñji ket da ober mern, ket 'ta ? »

« Na te, eme egile, da zond d'he hlask ha d'he haoud pa vezo dare, nag a-raog na war-lerh. »

*

Chomet e-unan, Yann a lakaas da genta tavañjer hanter-fank e wreg, ha dao d'al labour : kerhad dour, rei eun taolig skubellenn d'al leurzi, eun taolig diboultrenna d'an arrebbeuri.

Dre greiz m'edo gand skaota ar skudilli, war-dro nav eur, an aotrou "Reun du" a zihunas en e graou, ha, naon dezañ, a houlennas e lein. Ma oe red da Yann tomma gouelien dioustu, evid kaoud peoh ha pa ne vije ken. Hag, en eur vond er hraou, e welas edo dizoñjet ivez war Bebekig, hag ar haor baour n'he-doa ken labour da ober nemed lemma he herniel ouz ar voger, en eur zelled, a-uz dezi, ouz eur gevridenn o paka kelien war he gwiad stignet dindan an treust : labour inouüz a-walh evid eur haor, evel ma welit. Ar pezh a zoñje ivez Bebekig, hag he-dije bet brasoh plijadur o labourad da garga he hov. Yann a reas ar blijadur-ze dezi, hag he hasas da douza ar peuri a greske hir war e doenn blouz.

Eur pennad va eontr a chomas d'he diwall ; med, o weled an heol o pignad e toull unneg eur, e teuas soñj dezañ euz ar skudilli da beurskaota, hag euz mern poent da farda. Ha, koulskoude, ne oa

ket evid lezel Bebekig heh-unan war an doenn. Petra 'zoñjit-hu ? Ha mar kouezfe d'an traoñ ? Ha ma torrfe eur harr, pe ziou, pe deir, pe o-feder zoken ?... Ne glevit-hu ket ar jolori gaer a rafe Margodig. Honnez a vefe eur zoubenn neuze ! Ya, unan deo c'hoaz !

*

Setu beh war e spered.

Goude meur a zoñj, goude krafignad e glopenn, goude sacha war e vleo, e kavas ar penaoz. Hag eñ, ken laouen ha tra gand e gavadenn, da gerhad eur gordenn ha staga ar haor, ha da ziskenn penn ar gordenn dre doull ar maged. Ha prim da zond en traoñ !

Buan e lakaas yod mern war an trebez, ha tan dindan. Hag e stagas penn ar gordenn en-dro d'e zivesker, keit ha ma vefe o veska ar yod... med...

« O ! la ! ... O ! la ! !.. ; Petra 'rez, Bebekig ? Pe fur pe zod out ? »

Ar pez a reas al loen paour 'oe distaga eun taolig fringal war letonenn flour an doenn hlaz, emichañs evid diazeza he hovad peuri. Siwaz ! en eur fringal, e risklas hag e kouezas, ar paour-kêz loenig, hag e chomas a-istribill etre neñv ha douar !

N'eo ket red lavared e frapas-hi Yann d'he heul beteg hanter ar siminal, peogwir bremañ e oa stag ar gordenn en-dro d'e zivesker. Ha setu Yann, ar paour-kêz denig, a-istribill ivez e toull ar maged, e benn d'an traoñ, kant gwech darbet dezañ da goueza er jidhouarnad yod bero !

Hag e pep penn euz ar gordenn : Bebekig a vleñje gwasoh eged pa vije bet eun hanter dousenn kontilli kiger don en he gourlañchenn !... Ha Yann, o soñjal ne zalefe ket da goueza war e benn er yod, na da veza rostet ez-veo er jidhouarn, zoken a-raog an ivern, a houlenne digand ar Mestr Braz pardon d'e behejou.

« Dre va faot ! »

Hga e save e zorn da skei war e beultrin.

« Dre va faot, dre va brasa faot ! »

*

An Ankou ne oa ket er vro, red eo kredi, ha ne glevas netra. Paneve ze, buan e vije bet deredet.

Med nann ! an hini a zeredas eo Margodig, va moereb. Ha gand poan a-walh e teuas a-benn da ziskrouga divesker Yann, va eontr koz.

N'ouzon dare penaoz, med ne lavaras ket kalz a dra :

« Yann ar Yod du ! Sur a-walh dre da faot eo, dre da vrasa faot, peogwir e-teus c'hoantaet chom da labourad en ti, ha, koulskoude, e houzez mad :

*Ar wreg en ti, ar gwaz er-mêz,
Hag an oll draou a droio êz
'Vid brasa mad an tiegez !*

*

Ha diwar neuze, eme Gwillou an Truillou, va eontr a oe lesanvet "Yann ar Yod".

Al laer a zo laer

I

« N'ouzoh ket piou eo Kolaig Dorndu ? Nann ?... Mad peogwir n'ho-peus ket klevet c'hoaz ano anezañ, sealouit gand ho tiouskouarn hag e klevo e zoareou bremaig. Med peoh avad ! Peoh, pe ne lavarín ger !

*Ar re vouzar hag ar re zall
A gaso kelou d'ar re all !*

Emaoh o selaou ? Mad ! neuze e stagas da zibuna va hudenn.

Kolaig Dorndu a zo eur houëriad diwar ar mêz, o chom en eur horn bennag euz ar Hap, n'em-eus ket soñj mad a-walh mui pe e parrez Goulien pe e hini Beuzeg. An dra-ze kennebeud n'eo ket kalz a dra. Euz ano e gêr avad em-eus dalhet soñj gwelloh : Kernez Vihan ez eo anvet. Kolaig Dorndu eo e zouar hag e gêr dezañ.

Pa oa c'hoaz paotr yaouank, e labouré da zabatui beteg re emichañs. « Evid eur wech, em-eus klevet lavared, an hini a zistag re a daoliou marr, en eur staga gand e lodenn, pa vez devez braz terri-terien²⁴, hennez a gouez war e benn-a-dreñv, heb galloud dond a-benn euz e lodenn-varr. » Setu ar pez a zo deut da wir evid Kolaig, rag abaoe m'eo dimezet da Janig ar Gapenn, ne fell ket dezañ a-grenn kregi e benveg ebed, nemed en e skourjez.

Nemed en e skourjez, a lavarán, ha penaoz kemend-all ?

« Beteg-henn, eme Kolaig d'e wreg eur zulvez, beteg-henn n'on bet nemed eur genaoueg, nemed eul leue, med eüruz eo din ne chomer ket leue evid atao, dalhmad ; selaou ahanon. Ar mestr-skol, ar vistri-skol a vremañ, gouzoud a rez mad, a zo gwall-zesket ; n'eo ket azened eo ez int evel re wechall ha ne oant mad nemed da ober katekiz, en-deus lavaret din, hirio goude an overenn, pa'z on bet o paea eur banne dezañ, n'ez eus nemed koll o labourad an douar ; ha piou a dle gouzoud an dra-ze gwelloh eged ar mestr-skol ? Ober a rin hiviziken ar pez en-deus va aliet da ober : fizioud va douar en eur merour, ha mond da varhadour kezeg. »

« O ! diwall mad, mignon Kolaig, diouz aliou ar vistri-skol ! », eme Janig ar Gapenn d'he gwaz.

« Evid gand mestr-skol or parrez eo deut ar wirionez, p'en-deus lavaret din ne oa dre ar Hap, war ar mêz, den ebed a gament a gomzfe galleg koulz ha me, Kolaig Dorndu ! Ha perag neuze, peogwir eh ouzon ar galleg, ne vijen ket mad da varhadour kezeg ?.. Me a vo, klevoud a rez ahanon, Janig, me a rank beza marhadour kezeg !... »

Setu penaoz, peogwir en-doa c'hoant ar mestr-skol, ez eo bet feurmet Kernez-Vihan d'eur merour ; Kolaig evelkent a zalh gantañ erur pennti hag ar marchosi.

Da genta, an traou a droas mad a-walh gand Kolaig ; hemañ a oa deut da anaoud eun niver a droiou kamm, o tarempredi ar foariou hag ar marhajou. Bez' e veze dalhmad e Kemper, e Pont-'n-Abad, e kostez Plouneour, er Pont, e Douarnenez, e Poulldahud... he ma 'oar-me e peleh e veze c'hoaz ?

II

Eun devez, tri pe bevar miz a zo abaoe, Kolaig a yeas da foar Blouneour gand eur marh koz, kempennet gantañ, skrivellet a-zoare, houarnet mad a-barz mond euz ar gêr. Dres ! ar foar a yee mad-mad war ar hezeg, ha Kolaig a bakas kant skoed evid e varh koz.

« Mad ! eme ar Haper. Abred an deiz eo c'hoaz ; a-raog distrei d'ar gêr, deom d'ober eun droig da varhad ar zaout ! »

Ma'z ee ker ar hezeg, war ar zaout e oa eun distaol souezuz ; ne oa marhadour ebed, koulz lavared, war-dro al loened korn. Gouzoud a rit, pe ne rit ket, e Plouneour e vez kalz geored (gevr) er foar ; hogen war ar geored en oa ket eun disterra klask.

²⁴ terri-terien : ar re a dorr douar.

« Mad ar stal ganeom ! », eme Kolaig. « Mar karfen prena eur haor bennag amañ da werza a-benn foar Boulldahud, me 'rafe eun taolig brao ganto, a-dra-zur ! »

Ha Kolaig prena eur haor, marhad-mad vil, ha buan d'ar gêr gand e vida...

D'ar miz war-lerh, d'ar gwener kenta, Kolaig Dorndu a zav mintin, beure mad, diouz e wele, evid mond da foar Boulldahud. Gwiska a ra eun dillad nevez c'hoaz koulz lavared, rag e gredenn eo penaoz e werz kerroh eur gwerzer gwisket mad eged eur gwerzer all gwisket a druillou. Buan ha buan, e voutou ler-goad en e dreid, eun hanter dousenn krampouez amanennet en e hodell, ha Kolaig d'ar hraou, ha Janig ar Gapenn war e lerh... Setu ar haor kordennet kerkent ; ar gwas ma zo eviti, prestig eo he zermen, al loen paour ! hag he deve, kaled evel mên, a-istribill etre he gaol, a dle ober diêz dezi da vale.

« Sed aze, Janig, eme Kolaig en eur lakaad eur horniadig butun a-barz mond en hent, sed aze hag a dalv ugent skoed pe pemp lur ha tri-ugent d'an taol izella : eun dornadig mad a arhant ! »

« Diwall, eme Janig, aon am-eus ma vefes paket eun dro bennag ! »

Degouezet int o-daou e-tal dor ar marchosi, ar haor ganto. Hebdale eo kordennet ivez ar marh daou vloaz a dlee mond d'ar foar gand Kolaig.

« Sed aze, Janig, eme hemañ, talvoudegez kant hanter-kant skoed d'an nebeuta, pe war dro pemp-kant lur, ma'z a mad ar roñsed ! Kenavo, Janig !... En abardaez-mañ e weli ahanon o tistrei d'ar gêr, eur hodellad vad a skoejou ganin. Kenavo !... »

Ha Kolaig en hent o vutuna dre ma'z ee, e gorn-butun berr ha mogedet etre e zent, e skourjez en-dro d'e houzoug, e varh ouz e zorn dehou hag e haor ouz e zorn kleiz.

O weled he HOLAIG o pellaad, Janig, difiziuz evel ar Hapenned, rag emichañs e tiskred eun tammig ivez war he gwaz, a hop warnañ :

« Hep ! Hep ! Kolaig, arabad dit dond goull d'ar gêr ! Diwall mad diouz al laer, va den !... »

Hag o veza chomet eur pennadig, harpet e korn-tal ar marchosi o selled ouz he gwaz o pignad ar grehenn dosta gand e loened, ez a d'an ti d'en em emelloud euz he labour, eur berniad mad a draou o ruill hag o tiruill en he zamm penn.

III

Kolaig Dorndu, luduet e vutun gantañ, med e gorn dalhamd o chaokad etre e zent, a gendalh da vond gand an hent, e zaou loen d'ar paz war e lerh, hag e teu soñj dezañ euz aliou Janig.

« Petra an tanfoeltr, eme ar Haper outañ e-unan, petra he-deus c'hoant va hini goz da randonad din, er mintin-mañ ? Diwall diouz al laer ! Me, Kolaig ar marhadour kezeg ! A ! A ! me 'garfe gweled peseurt liou en-deus al laer a zo gouest a-walh da laerez eur spillenn diwarnon-me !... Piou 'zo gwaz, satordallig, ma n'on-me ket ? Ha n'eo ket me a oar ar muia galleg e bro Kaperien Beg-ar-Raz ?... Va mestr-skol e-unan en-deus lavaret an dra-ze din, eur zulvez pa'm-oa paeet eur banne dezañ.. Ya, gwaz on ! »

Ha fougennañ, e sko gand e bennad kordenn war e beultrin, ken ma'z a e tammou hag e bruzun, en e henou, pao pri e gorn-butun !

« Ma feiz ! eme or gwaz, pa zegouezin e bourh Poullan, e prenin eun all ; med evid laeret, ne vin ket ! »

En eur deuler eur zellig ouz e haor, e wel he-devez re garget, al lêz o tivera diouti beb ar mare !

« Setu aze koll evidon, eme Kolaig. Penaoz diall va bida da vera ?... Sell ! kantonier Beuzeg a zo amañ o tond d'e zevez, hennez a dle gouzoud penaoz ober evid-se. « Hep ! kantonier, va bida amañ a goll lêz, penaoz ne gollo ket ? »

Ar hantonier, paotr fin evel an oll gantonerien, a lugern gand ar blijadur e zaoulagad bliou en e benn :

« Ostaliri ar Hoad-Pin n'ema ket pell ; ma vez eur banneig, e lavarin a-walh da stal dit ! »

« Ya, ya, daou vanne zoken kentoh eged unan... »

Setu flipet beb a lommig ganto.

« Mad ! va den, eme neuze ar hantonier, setu amañ evidout ha da vida : pa zegouezi e Poullan, kerz da gaoud Herri, ar marichal, ha goulenn digantañ eur hlohig bihan da brena, ha stag anezañ ouz gouzoug da vida : ne gollo ken a lêz, pe n'eo ket me mab va zad ! Kenvo ! »

« Kenavo », eme Kolaig.
Hag or Haper en hent, laouen braz euz e gavadenn.
Hebdale, e tegouez e bourh Poullan, war-dro eiz eur, hag eñ dioustu da gaoud ar marichal.
« Selaou 'ta, marichal, hervez m'am-eus klevet, te a werz kleier bihan ? »
« Ya 'vad, a bep seurt : dibabit, mar plij. »
Ha Kolaig kemer ar brava, ha staga anezañ gand eur pennig kordenn en-dro da houzoug e haor.
« Pegmentad tra eo ar hloh, marichal ? »
« Ma feiz, n'eo nemed pevar real, Kaper, peogwir c'hwi eo, rag kredi a ran, eun tammig reiz, eun tammig anaoudegez am-eus ouzoh. »
« Pevar real, eun tamm kloh evel-se ! N'eo ket evid netra ! »
Med Kolaig a bae, koulskoude, hep kredi dizerra e rann. N'eus forz, soñjal a ra ennañ e-unan :
« Arabad din beza paket gand laer ebed ! N'emaon ket ganti, em-eus aon, o rei pevar real evid eun ourouler, eur hlohig. Ha c'hoaz, c'hoaz, ma teufe ar haor he bronnou da ehan bera ! »
Hag eñ distrei da zelled ouz e haor.
« Mad ! emezañ, gwir e rank beza ar pezh en-deus lavaret din kantonier Beuzeg ; va Bouchig ne goll mui berad lêz !... Deom bremañ da brena eun tamm butun hag eur horn nevez ! »
Greet e dro gantañ e ti ar butun, setu Kolaig adarre war hent Poulladahud, e zaou loen d'e heul. Pa dermen dirag ti-skol ar baotred, ar re-mañ, o c'hoari emaint c'hoaz, daoust d'an eur beza sonet pell 'zo, ar vugale 'ta a zav o fenn, o klevoud son skiltr ar hlohig.
« Sell 'ta ! Eur Haper o vond da foar Boulladahud, eur marh hag eur bida gantañ ! »
Kolaig n'ema ket an disterra war o zoñj, kement a bres a zo warnañ bremañ o klask debri krampouez ; n'eo ket hep poan avad, rag e zaou loen eo red dezañ ivez bleina. Pa n'eo ket evid ober gwelloc'h, e kemer peg en eur grampouezenn a-bez a-istribill ouz e henou, hag e sach warni beteg ar penn dilosta, ar pezh a lak ar baotred da hoarzin leun o beg.
« Petra 'zo, marmouzien ; hag o c'hoarzin din-me emao ? »
Unan euz ar baotred, an tosta da Golaig, a respont evid an oll :
« N'emaom ket 'ta ; med euz penn all-tre ar Hap e rankit beza genidig a-dra-zur, va zonton, tostig d'an Enez Sun, peogwir en eur vond d'ar foar gand ho marh, n'ouzoh ket ar furnez da bignad war gein ! »
Ar vandennad krennarded a hoarz o gwalh, ha Kolaig a anzav outañ e-unan n'eo ket brao deski furnez, dreist-oll digand bugale.
'Mar pignan war gein Laouig, emezañ, petra 'rin euz va bida ? »
Heb beza nehet an disterra :
« Petra ? eme ar paotrig, med staga ar bida ouz lost ar marh, hag e helloh da houde kaou ho taou zorn da zebri ho krampouez ! »
« Gwir a-walh eo ! », eme Kolaig Dorndu.
Hag e stag ar paour-kêz gaor ouz lost ar marh hag e pign war gein Laouig, hag ez a etrezeg Poulladahud, en eur zebri krampouez, e-pad ma c'hoarz muioh-mui paotred skol Boullan.

IV

Neuze 'ta, Kolaig a gendalh da vond a-raog war gein Laouig en eur chaokad gwasoh c'hoaz war e grampouez, malisiet evel ma'z eo ouz ar baotred vihan. Degouezoud a ra evel-se gand koajou Maner Stank. Amañ ez eus eur wall zoubenn da gaoud. A-dreñv ar hleun, skoachet e-mesk an trojennou lann hir, eun den, eul lampon bennag euz kêr, sur a-walh, a zo, evel pa lavarfed, o hortoz eun dra bennag ; tres paour a zo warnañ, eun tres ken divalo hag eul laer ma'z eo.

Skuizet o hedal en aner eur Haper droch bennag da vond da foar Boulladahud, al laer a zo o vond d'en em denna kuit, pa glev eur hlohig o son : *Bin, de ri din bin baon* !... Hag al laer da zevel e benn, ha gweled Kolaig o tiskoacha er horn-tro, eur gaor ouz lost e varh, rag klohig gaor Nikolaig eo a ziridign kemend-all !

Eur wech m'eo tremenet Kolaig e-biou gand e loened, setu al laer da lammad didrouzig war an hent ha da redeg war-lerh, divoutou, evid laerez ar haor, ha pa ne ve ken.

Med penaoz ober an taol heb rei netra da houzoud d'ar perhenn?... Al laer a droh, da genta, ar hlohig diouz gouzoug ar bida hag a stag anezañ a-nevez ouz lost ar marh ; ha goude, o veza trohet kordenn ar bida, e kas al loen paour gantañ er-mêz an hent, en eur waremm e leh ma kuz anezi e-touez eur stropad strouez.

« Mad ! eme al laer, kement-se deut eo atao : ar bida am-eus paket diwar ar Haper sod-ze ; an dra-ze a zesko dezañ eur wech all staga geored ouz lost e roñsed da vond d'ar foar. Med... med... eur marh mad a zo gantañ... ha peogwir e lavarer : “al laer a zo laer” ..., red eo din kaoud ar marh pe netra...

V

Hag al laer, a-dreuz ar parkeier, da blanta tiz ha da haloupad evid troha a-raog ar Haper. Er heid-amzer-mañ, Kolaig a zo ken dineh ha tra, dre ma klev atao ar hlohig bihan o tiridigna d'e heul, hag e oll zoñj a zo, me 'gred, gand ar bempved krampouezenn ema bremañ o chaokad warni. Petra 'fell deoh ? Eun tammig goust a zo deut dezañ oh ober hent, hag e lonk, hag e tebr a galon vad.

Setu Kolaig, degouezet e-keñver Lenn-Avoa, o weled, en eun taol, eun den o tond en eur hoarzin a-benn ennañ. Kolaig, en eur weled anezañ o c'hoarzin, a hoarz eveltañ hag a houlen digantañ :

« Plijadur ho-peus, va den, peogwir emaoñ ken laouen hag all ? »

« Ya sur, eme egile, pell 'zo n'em-eus ket bet kemend a houst da hoarzin. »

« Neuze 'ta ? N'eo ket goulen diganeoh a ran, med perag, mar plij, ho-peus goust hizio da hoarzin ? »

« Perag ?... C'hoarzin a rankan o weled e teu bemdez gizioù nevez e-barz ar vro. »

« Ya ?... N'em-eus ket klevet ger. »

« E-pad an hañv, ne weler mui na marh nag azen rouz ebed anez ma vefe war glipenn e benn, respet deoh, eun tok plouz pe eun tok broenn ! »

« N'eo ket divennet ; hag al loened, me 'gred, a blij dezo an disheol hag ar zehadurez, kement ha d'an dud. »

« Mad, evid beza a-du ganeoh, e lavarinn eh intentan eun draig bennag er hiz nevez. Med gizioù all a zo o tond, war ar pezh a welan, ha n'eh intentan netra enno. Lavarit din, mar plij, perag e stager bermañ kleier bihan ouz lost ar hezeg ? »

« Petra ? Ar hiz-se a zo o tond bremañ ? », eme Kolaig, sabatuet krenn.

« N'ema-hi ket mui da zond ; deut eo, peogwir ho marh-c'hwi zoken a zo o son e gloh aze gwasoh eged kloher Treboul. »

Hag evid gwir ar marh Laouig a strill e lost gand nerz, hag ar hloh a zon ; med or Haper ne ra van ebed o soñjal eo e haor an hini a ra trouz.

« Va marh deut da gloher ? », eme Kolaig o tistrei e benn da zelled...

Neuze ar paour-kêz Kaper a wel n'ema ket mui ar haor da heul.

« Daonet ! emezañ d'egile, va gaor a zo chomet dre an hent ; distaget eo diouz lost ar marh, nemed m'he-deus lezet he hlohig war he lerh... A ! tamm bida gorneg, red eo din mond war he lerh... Sell 'ta, va den, ma n'eus ket re a bres warnoh, e hellfeh marteze chom amañ eur pennadig amzer gand Laouig, e-pad ma'z in da weled ha kaoud a rin Bouchig ? »

« Gelloud a-walh a rafenn chom eur pennadig, e-giz ma lavarit. »

Ha setu Kolaig buan war e giz da glask e vida ; hag al laer, o veza chomet eno, evel m'en-doa roet e her, eur pennadig gand Laouig, a lamm war gein hemañ, ha pidadap ! ez a da guzad anezañ e-barz koajou Kerbeoh !...

VI

Koulskoude Kolaig, o veza baleet eur hard leo, eun hanter leo, ne glev na liou na c'hwez euz bida ebed.

« Mad ! emezañ, en eur grafignad e benn, red eo kredi ez eo eet al lorgnez-se d'ar gêr ; emichañs, pa zegouezo du-hont, en Kernez Vihan, va hini goz he-devo ar skiant da staga anezi. »

Hag eñ distrei adarre ; med ne gav mui na den na marh.

« Del ! sell aze avad eur stal all !... Da beleh an diaoul int eet o-daou ahalenn ?.. A ! petra a zoñjan-me 'ta ? Sur a-walh, va den, skuiz o hortoz ahanon amañ, a zo eet gand Laouig beteg ostaliri an *Toull-Drez* du-ze pelloh, da glask eur banne digand Mari Burel... Deom da weled ! »

Ha Kolaig d'an *Toull-Drez* !

Al laer, eñ, goude beza deut a-benn euz ar bida ha bremaig euz ar marh, en-deus lavaret outañ e-unan :

« N'ema ket re fall an traou evel-se, ar Haper-mañ a zo ken sod hag ar marh hag ar haor am-eus sammet diwar e goust... C'hoari-louarn am-eus greet ivez, red eo lavared !... Med n'eo ket a-walh kement-se. Va dillad war va gorre a zo enno n'ouzon mui ped kant toull warn-ugent, ha gand ar Haper a zo eur wiskamant nevez-flamm : bragou mezer mad, ha chupenn kerkoulz. A ! daoust ! peogwir e lavarer atao : “ *Al laer a zo laer* ”, red eo deom troka, evid kaoud peoh gand va houstiañs ha pa ne ve ken. Med... penaoz ober ?... Deom atao etrezeg an *Toull-Drez* ; mar deu ar Haper di, e welin petra d'ober ! »

Hag eñ etrezeg an ostaliri.

Eun ugent kammed bennag kent degouezoud gand an ostaliri ema ar puñs ; ar re a zo bet du-hont eur wech bennag o tañva ar jistr, a oar mad kement-se. Hag en eur zelled a-dreñv e gein, al laer a wel piou ? Ya, piou a gav deoh ? Ar Haper o tond, izel e benn hag e glipenn !... Petra d'ober ? Al laer n'ema ket pell nag o klask nag o kaoud ; mond a ra d'ar puñs, tenna e chupenn, frota eun tammig pri ouz e veg hag e vle, ha beh da denna dour buanna ma oar ober...

Ar Haper a zegouez :

« N'ho-peus ket gwelet eur marh hag eun den o tremen aze ? »

« Petar ? eun den hag eur marh ? A ! me 'zo chalet, sur, bremañ, gand tud ha kezeg, mar gouezfeh pegement ! A ! Aotrou Doue... »

« Petra, da vihana, a hoarvez ganeoh ? C'hwi a zeblant neheto egizdon-me, ha me kollet ganin eur marh hag eur bida. »

« Bida, te da-unan, Kaper droch ! eur stal gaer c'hoaz. Koll eur bida hag eur marh bleveneg koz bennag... E-skoaz din-me ! A ! ya, Aotrou Doue, Doue ! »

« Petra 'hoarvez 'ta ganeoh ? »

« Sellit ! ne welit ket aze eur maner en tu all, e-kichenn kroazhent Kerroue ? Ma ! Me 'zo o tond alese, bet o kerhad deg mil skoed d'am mestr. Pa'z on deut amañ, sehed din, ez on en em lakaet da denna eur zaillad dour. Ha, n'ouzon dare penaoz, red eo lavared em-befe stoket enni gand va dorn pe gand penn va ilin, ar voest, a oa va deg mil skoed enni, a zo ruillet e strad ar puñs ! »

« Deg mil skoed ! emeKoalig, med, va den, e-leh tenna sailladou dour, gwelloh e vefe mond er puñs ; ha marteze, eur wech diskennet er strad, dre forz tastoni gand an treid, e teufet a-benn da gaoud ar voest. »

« Ar wirionez a zo ganeoh, ha soñjet em-oa ivez kement-se ; med n'hellan ket diskenn e-barz, rag a-nevez beza bet klañv emañ ha diskenn aze a vefe diskenn er bez hebdale. Med c'hwi, va den mad... »

« O ! me n'on ket bet klañv abaoe va nao blaaz ! »

« A ! mar karfeh diskenn e-barz, ma teuit a-benn da gaoud ar voest hag an deg mil skoed, war va enor ha va houstiañs, e teuan rei deoh kant skoed. »

Hag ar marhad a zo buan greet ; ha Kolaig da denna chupenn ha bragou, boutou ha loerou, ha pididip ! da ziskenn er puñs diwar-bouez ar gordenn. A-boan m'eo degouezet er stard, al laer kerkent da lezel ar gordenn da goueza en dour, ha da vond kuit gand Dillad ar Haper, en eur lavared outañ e-unan :

« Hag a dri ! Petra 'faot deoh ? *Al laer a zo laer*. »

Hag eñ, goude beza cheñchet gwiskamant ha gwalhet ar pri diwar e veg, da glask e genta hag e eil laeradenn. Hag o soñj en e benn :

« Eun devez mad hirio ! Ne faot ken nemed ar foar beza mad war ar geored hag ar hezeg, hag em-bezo peadra da veva eur pennadig heb en em skuiza re, ha peadra ivez da eva eur werennadig “lagout” bennag. O ! Kaper droch ! lakaet en noaz-ran ganin : gwaz eo se evitañ ! »

Rag marteze ez on bet dizoñjet d'hel lavared deoh, an diaoul a laer-ze en-doa eun tech all a-dreist tech al laeroñsi : tech ar vezventi eo a fell din lavared ; ne gave ket fall ar gwin-ardant, pell ahano, ha ne daole ket an hini melen dindan e voutou, nag e-barz kennebeud !...

A-raog mond war-lerh al laer, gwelom, da genta penn, penaoz ema ar bed gand Kolaig e strad e buñs.

Kolaig Dornzu, o veza klasket mad ha piz ar hefig aour hag o veza ne gav netra nemed eun tok divalo hag eur goz chupenn druillenneg, a ra e zoñj da zond er-mêz.

« Sach war ar gordenn », emezañ.

Den ebed ! Netra ! Ar gordenn zoken, ne wel ket anezi !

« Frap ahanon el lez ! »

Boud ! Netra morse !

« Amañ eo yen ! »

Hag ar Haper a ziskenn neuze ennañ e-unan.

« Daoust, emezañ, ha me a ranko chom amañ ?... Me 'gred ez on bet devet gand an tres-laer-ze, heñvel-mik ouz an hini eo eet Laouig gantañ... N'eo ket heb gwir, me 'gred, e lavare din Jnaig diwall diouz al laer. An oll a hell beza flemmet ; c'hoarvezet a zo ganin evel gand an alvokad Alanig al Louarn ; « n'eus den fin n'en-deus e goulz ». Abaoe ar mintin-mañ, ped gwech n'on ket bet laeret ?... O ! ya, Janig, gwelloh e vije bet din diwall... Keuz am-eus ! »

Keuz war-lerh ?

Eun eur²⁵ pe ziou goude, Mari Burel, deut ezomm dezi azour, da lakaad en he gwin, su a-alh !, a zegouezas e-tal he fuñs :o klevoud trouz e-barz, e halvas oll dud an Toull-Drez...

*

Dizale Kolaig Dorndu, tennet er-mêz ganto, a lavar dezo petra 'zo c'hoarvezet gantañ ; eun tamm dillad koz bennag a zo klasket da lakaad en-dro dezañ.

« Ne dalv ket ar boan din, eme Kolaig, mond war-lerh an hini en-deus kaset gantañ Bouchig, Laouig ha va dillad ! Trugarez deoh, ha mil bennoz Doue, ha kenavo ! »

Hag or Haper, d'ar gêr ar e droad.

An abarvaevez-se, pa glevas an traou, Janig ar Gapenn a zemplas...

« Bremañ, Kolaig Dorndu a zo deut da labourer-douar en despet d'e vestr-skol !... Beza flemmet a ra vad a-wechou !

*

Hag al laer ? a houlennoh diganin. Setu amañ petra eo deut da veza. Gwerza a reas e Poulldahud gaor ha marh Kodaig, ha gwerza mad zoken, en heveleb doare m'en em gavas pinvidig en eun taol. E arhant ne chomas ket pell gantañ ; bleud an diaoul a dro e brenn, gouzoud a rit. Al laer, eur rouler e oa, soñj ho-peus, en em vezvas en eun ostaliri e leh ma oe sammet e yalh diouz e hodell, e-pad ma tistage eur gwall-bennad kousked... Da zerr-noz, an ostiz a zihunas ar mezhvier hag a blant asanezañ er-mêz euz e di.

« Bremañ eo red mond en eun tu bennag koulskoude ! », eme al laer hnter-gousket c'hoaz.

O veza baleet eur pennadig e tegouezas e Meill-Kerven.

« Amañ, emezañ, n'eo ket prenet morse dor ar marchosi ; deom e-barz ! »

Dres ! ar marchosi a oa eun disparti goullo, leun a blouz fresk ; ne oa nemed gourveza e-barz. N'oa ket tenn an dra-ze d'ober, hag al laer, ponner e benn, en em roas da gousked adarre !

War greiz an noz, e tihunas ; an tan a oa en e hourlañchenn, sehed en-doa, spontuz !... Eur bann loar, o skedi er marchosi, a roas dezañ da weled eur mell podez war ar prenest dirazañ, hag eñ mond da weled.

« Leun eo a lèz ! » emezañ.

Hag e stagas e benn da eva. Siwaz ! n'eo ket lèz e oa, med dour-raz evid gwenna ar marchosi !... Al laer a zihunas mad neuze ; mond a reas er-mêz, da ruilla er park tosta ; e vouzellou a zeve en e greiz,

²⁵ Eun eur : eun eurvez.

tarlonka, dislonka a ree... Koulskoude ne varvas ket, med ober a reas daou zoñj avad, ha, diwar an droze, e tilezas ar vicher a laer a-grenn.

Mond a reas d'ar Hap da glask labour, hag e ti piou, e kav deoh, e oa degemeret ?... E Kernez-Vihan, e ti Kolaig Dorndu !... Med evid digoll e vestr nevez, ar mevel a boanias stard e-pad daou vloaz²⁶, hep kemer eul liard koumanant.

Hirio Kolaig hag al laer a zo daou vignon braz hag o mignoniaj a bado.

Kenavo, lennerien, ha, ma tegouez deoh eur wech bennag mond d'ar foar da werza kezeg ha geored, disfiziit diouz an daouarn krap, rag, gwelet ho-peus dre skwer Kolaig Dorndu : "Al laer a zo laer !"

²⁶ daou vloaz : daou vloavez.

Ar pare d'ar re vouzar !

Tri bloaz a oa bet, d'an Nedeleg, abaoe ma oa deut bouzar Noun al Ludueg, boutaouer-koad e Sant Tei. Ya, tri bloavez diohtu, ha bouzar me 'lavar deoh, bouzar dre an daou du. Ha c'hoaz, heb dezañ gouzoud doare penaoz : nijet e oa ar hlevoud diouz e ziouskouarn heb lavared da beleh ez ee na netra, e-giz ma nij al labous diouz e gaoued pa gav an nor digor, pe c'hoaz evel ma teh al laer, eeun dirazañ, pa vez bet oh ober e dro en eun tiegez bennag. Bouzar, heb doueti na penaoz na perag, ma n'eo ket eun druez, Aotrou Doue ! Red eo lavared, emichañs : eur barrad avel fall en-doa kavet e du da vond en e ziouskouarn, ha ne helle ken dond a-benn da gaoud an hent da zond er-mêz diouto ; hag e chome, al loen fall anezañ, da hoari trei-distrei, da gantreal e-barz penn Noun al Ludueg, e-giz eul logodenn o firbouchad a-raog mervel en eun trap-logod.

Koulskoude an droug n'oa ket ken gwaz adaleg an deiz kenta, nann ! Med petra 'verne kement-se, peogwir en em astenne ar hleñved a vloaz da vloaz, siwaz d'ar paour-kêz Noun al Ludueg. Rag en em astenn a ree, ha Soaz Gamm a ouie mad ez ee diskouarn he gwaz war izellaad.

Er bloaz kenta, Noun a gleve c'hoaz trouz gand ar peziou deg gweneg a leze Soaz da goueza a-dreñv e gein ; e-pad an eil bloavez, ne gleve mui nemed trouz ar peziou eiz real ; hag abaoe dibenn an trede bloavez, pegen aliez bennag ma leze Soaz he fez ugent real da goueza a-dreñv e gein, Noun ne ree van ebed.

Marteze en-dije klevet trouz ar peziou aour, med tiegez boutaouer-koad Sant Tei ne anaveze ket ar boutouiou melen-ze, hep toull na gar ; a-boan ma oa deuet o brud beteg eno.

Petra d'ober ? Netra ! Ha setu greet e zoñj gand Noun :

« Arabad din klemm, emezañ d'e hini gamm ; an den a chom den, evid dezañ beza bouzar, n'eo ket gwir ? Hag e vefen gwelloh evid en em jala, me ? An Aotrou Doue, me 'oar mad, en-deus skrivet war e leor braz, e leh ma'z eus meneg ahanon-me : « Noun al Ludueg, gwaz Soaz Gall, boutaouer-koad e Sant Tei, a chomo bouzar beteg... klevoud ! »

*

Eur zulvez, dioh an abardaez, war-dro mare Gouel Yann, en eur dana e gorn-butun dre e liorz, Noun al Ludueg a welas e oa ruz ar herez e bleñchenn ar gwez. En eur zelled outo, an dour o tond en e henou gleb, Noun a chomas eur pennadig da zoñjal.

« Nag int a zo flour ha ruz, va herez ! E-giz muzellou gwerhezad o c'hoarzin da baotred yaouank. N'o hlevan ket, med kaoud a ra din e lavaront : « Ne boki ket deom ! Nann, ne ri ket ! Re goz out ! » « Re goz on, eme Noun ; tanfloetr ! gweled a raim ! »

Hag eñ tenna boutou, tok ha chupenn, hag o pignad da gaoud ar herez. E penn eur brankig kamm e welas eun toullad e-giz o c'hoarzin goap ; ha Noun dezo ! Paour-kêz ! Emichañs e droad a risklas, e zaouarn ne oant ket krog mad a-walh, ha... pouloudoufez²⁷ ! setu Noun al Ludueg o vond war e benn d'an traoñ, dre douez an deliou.

« Aotrou Sant Tei benniget ! » emezañ en e zoñj ; « ema greet evidon ! »

Soaz Gamm hag eun amezeg a glevas trouz al lamm ; kaoud a rejont Noun astennet dindan ar wezenn hag unan, krog er penn, egile en divesker, e kasjont anezañ d'e wele.

Koulskoude al Ludueg n'edo ket maro, med eun tammig badaouet, mezevennet ; dislonka a ree zoken, braz e zaoulagad en e benn, en eur houlen penaoz ne oa ket en em lazet.

« 'N en em jalez ket, Nounig, a responte Soaz Gamm ; en eun taol netra eo hemañ, te 'welo ! Ne varvi ket kentoh, te 'welo : Me a ya da lakaad ahanout da hwezi. »

Evid Soaz Gamm ne oa nemed al louzou-ze mad ouz pep kleñved. Klevit kentoh : pa oa bet Herri ar Marichal gand ar remm pe droug-sant-Urlou en e zargreiz, Soaz he-doa gwellaet anezañ en eur ober dezañ c'hwezi. Eun niz dezi, an dreuz warnañ gand an derzienn pep tri-pevar devez, en-doa ranket soucha ha chom war e wele ; ma ! Soaz a deuas a-benn da derri an derzienn warnañ, atao en eur ober dezañ c'hwezi.

²⁷ pouloudoufez : ?

Ha me 'oar, me, ped all a oe gwellaet c'hoaz ganti en doare-ze ! Beteg an aotrou person, pa dorras e harr ; Soaz a reas d'e harr para, atao en eur ober dezañ c'hwezi !

Setu 'ta ma oa kleñket Noun, penn hag all, etre diou holhedad pell, ken na weled ken anezañ na fri, na skouarn, na blevenn.

Eun eur²⁸ pe ziu e chomas moredet, ha, pa zivorfilas, eur hwezenn warnañ ken ma save ar moged dioutañ, o ! burzud ! Noun al Ludueg, boutaouer-koad e Sant Tei, a gleve koulz pe welloh eged biskoaz !

« Aotrou Sant Tei benniget, emezañ, eet eo ar bouzar diouzin ! »

« Da zorhennou da vihanna n'int ket eet kuit ! » eme Soaz Gamm, diskredig an tamm anezi.

Med gwir edo, hag an hini goz a rankas kredi, rag he Noun al Ludueg a gleve trouz o koueza gand ar peziou ugent real, eiz real, deg gweneg, ha daou liard toull zoken, rag d'an azmer-ze e oa c'hoaz peziou, e-leh or paperiou a-vremañ.

Hopal a ree gwasoh eged eun diskiant :

« Gwellaet on, Aotrou Sant Tei, gwellaet on ! Emaon pare, ha va gwezenn gerez eo he-deus greet ar burzud ! »

« A gav dit ? », eme Soaz Gamm.

« Ya, ya, va gwezenn gerez, ha piou ken nemeti, mar plij ? Pebez louzaouer am-eus aze !... A ! va dioukouarn, siwaz deoh ! pell 'zo e vijeh pareet, m'am-bije gouezet e oa a-walh kaoud eul lamm diouz va gwezenn gerez ! »

Ar vrud, ar wreg divalo-ze, kant genou dezi, a skignas buan ar helou tro-war-dro, hag hebdale eun engroez a dud a zeredas beteg Sant-Tei da weled gwezenn gerez ar boutaouer. Doareou ar burzud a oa zoken moulllet war ar hazetennou, ha tud a lavar e tennas ar mestr-skol poltred ar wezenn : me n'ouzon ket, me ! Ar pez a ouzon evid gwir eo e oa dre ar vro neuze eur Zaoz droch bennag hag a ginnigas mil lur euz ar wezenn. Noun a felle dezañ kaoud pemp kant skoed, med ar Zaoz ne fellas ket dezañ o rei : ne oa ket c'hoaz droch a-walh !

Neuze eur zoñj dispar a zideñvas e spered Noun al Ludueg :

« Soaz, emezañ d'e hini gamm, or gwezenn gerez a dalv eur binvidigez. Soñj nag a dud vouzar a zo amañ dre ar vro. Ma ! Evid para n'o-deus nemed koueza eveldon diwar or gwezenn gerez. Te 'welo, dastum a raim leve, ha, pa ne rofe pep bouzar deom nemed pevar real, ne gousto ket c'hoaz re ger dezañ para. »

D'ar zul war-lerh, Soaz Gamm a roas pemp gweneg da Ber ar Hloher evid embann diwar ar Groaz, goude an overennou, « e helle ar re vouzar, gand ma paefent pevar real, mond da barea diwar gwezenn gerez Noun al Ludueg, boutaouer-koad e Sant Tei. »

Ha goude ar gousperou, meur a hini a oa degouezet da glask ar pare digand ar wezenn vurzuduz. Bez' e oa eno Yann Dre Boul, unan teo ha koveg, etre braz ha bihan : e-giz kanolier war vor en-doa greet e amzer-zervij, ha trouz kurun an tennou kanol o krozal en-doa e vouzaret krak. Hag abaoe e oa deut da zerhel ostaliri an *Tri-Lonk*, tost d'an Ankou. Eñ ivez en-dije karet gwellaad, rag an hanter euz an amzer ne gleve ket petra 'felle d'e everien kaoud.

« Ahanta ! Yann Dre Boul, a houlennas Noun digantañ diou pe deir gwech, pignad a rez war ar wezenn ? »

« Re a boan am-befe, rag re a bouez a zo ennon ; arabad deoh koulskoude kredi em-befe aon da goueza en traoñ ; nann ! med a-raog klask netra, red eo din moannaad eun tammig ; ha goude-ze ni a welo. »

Unan bouzar all 'oa e ano Tin ar Hozdañvad, genidig euz ar Hap-Sizun, du-hont pell.

« Me 'zo o vond da bignad, emezañ da Nounig ; med êsoh e vefe din tenna va zaol, ma vije ledet eun dra bennag dindan evid souplaad va lamm. »

Soaz Gamm a redas da gerhad eur holhedad pell a-ziwar he gwele ; ha Tin ar Hozdañvad el laez gand ar wezenn, hag uhel c'hoaz ; med kerez a gave dre ma pigne, hag e tebras, hag e lonkas kement, ken, pa oa leun e gov, ne zoñjas mui, eñ, en e ziouskouarn, nag en e bare hag, e-leh ober eul lamm en

²⁸ Eun eur : eun eurvez.

traoñ, e tiskennas war e bouezig. Da vihanna pevar real a baeas e govad kerez : setu ar boutaouer n'endoa ket a goll dioutañ.

Eun trede perhenn da ziouskouarn bouzar a zegouezas : henez a oa Filip ar Stroalleg, diouz kostez Kerbleveg e Pouldregad, laer dre vicher, rag eur hemener brocher-laou edo ; hag eun amziod kaer a oa dioutañ, daoust dezañ da veza kemener. N'ouzon ket mad a-walh pe oad a helle kaoud ; etre ugent ha pevar-ugent koulskoude a gav din edo ; a-hend-all, divesker hir-hir en-doa, med ken treud ha ker moan hag eur spanell krampouez.

Ker skañv hag eur gwiber pe eur haz-koad e pignad gand ar wezenn gerez, goude beza roet e bevar real. E oa o vond da lammed en traoñ, pa houlennas Noun diganatñ :

« Ha lakaet e vo eur holhedad dindan ? »

« Petra ? » eme egile, ponner-glevoud.

« Lakaet e vo ar holhennad pell dindanout ? »

« Hag hi a oa dindanout-te ? »

« N'edo ket. »

« Ma ! kerzit oll diouz va hent ! »

Diou pe deir gwech e serras e zaoulagad ; krafignad a reas e benn diouz an daou du ; hag e tiskrogas e zaouarn diouz ar brank kamm, hag e kemeras an hent da zond en traoñ dre douez an deliou, buannoh eged m'edo pignet. War e benn e kouezas, dres, el leh m'edo kouezet Noun al Ludueg.

« Ahanta ! Filip, penaoz emaoz ganti ? Ahanta ! Stroalleg, klevoud a rez ? » a hopas Noun warnañ.

« E-gi zkent ! », emezañ, en eur zewel divahagn.

« Dond a raio ar pare, eme Soaz, med red e vo deoh mond d'ho kwele ha c'hwezi e-tail, kenta ma tegouezoh er gêr. »

*

Antronoz boutaouer-koad Sant-Tei hag e voutaouerez a yeas da varhad Douarnenez da werza yer ha viou. Edont o-daou er hohu, pa zegouezas gwreg Filip ar Stroalleg da ober reuz dezo.

« N'ho-peus ket mez ? eme homañ. Petra 'hoari ganeoh, chalopenned²⁹ ? Klask lakaad an dud da derri o izili ! Pe fur pe zod oh ?... Hag ober paea c'hoaz !... Da vihanna ma vije evid netra !... Neuze c'hoaz, c'hoaz !... Ha va Filip en-deus bet an derzienn evid an noz ; ha, siwaz ! ma teu da chom ganin pell war e wele, piou a vago ar Filiped vihan, n'eo ket c'hwi eo ? »

Kant tra all a lavaras c'hoaz. Nounig al Ludueg ne zizzerre ket e rann.

« Petra 'fell deoh, eme Soaz Gamm. Va Ludueg, plah paour, en eur goueza, en-doa lezet e zroug bouzar dindan or gwezenn gerez ; hag ho Stroalleg deoh-c'hwi en-deus sammet droug va gwaz war e hini. Setu aze ar stal !... »

Pa deuas da Zant-Tei, Noun al Ludueg, en despet da Zoaz Gamm hag a gare kalz ar herez, a drohas e wezenn vrudet, hag a reas bouteier-koad ganti, peogwir ne felle ken dezi rei ar pare d'ar re vouzar !

**

Nebeud a dra !...

Nebeud a dra a vez a-wechou kirieg d'ar grevusa traou ; hag evel-se, daoust hag eun ufenn³⁰-dan n'eo ket gouest da lakaad an tan-gwall da gregi en ho ti ? Ha koulskoude eun ufennig-tan a zo nebeud a dra, n'eo ket 'ta ?

Lakom c'hoaz ho-peus droug en ho piz bihan gand eun drên, pe eur gorig bennag. Ma ! kement-se a zo a-walh evid ober deoh klemm ; ha koulskoude eun drên, eur gorig a zo nebeud a dra, n'eo ket 'ta ?

Kement-mañ a zo evid lavared deoh ne vez peoh fonnuz, n'ez a klok an traou e tiez a zo, etre priejou a zo, nemed pa dro ar bed en doare ma fell dezo. Anez, nebeud a dra a laka da zewel etrezo ;

²⁹ chalopenned : ?

³⁰ ufenn : fulenn.

diwar eun netraig e tiwan beh etrezo, ha re aliez, siwaz ! kroz ha kurun, tan ha brezel. Ma ne gredit ket, selaouit.

*

Gwechall, hag abaoe n'eus ket ken pell-ze, rag pell emañ c'hoaz diouz va hant vloaz, gwechall e chome em farrez daou bried yaouank. Nevez dimezet e oant, ha ne oa deut c'hoaz netra beteg enno ; en eur gêriadennig distro e vevent " dizoursi braz ha dineh ", didrouzig hag eüruz.

Paskolig, an ozah, a veze bemdez o tevezia war ar mêz ha ne zegoueze er gêr nemed da glask e goan, e wele hag e wreg. Homañ, Soazig, a yee heh amzer ganti da zoursial euz he buoh, da gempenn he zammig tiegez, ha da beñselia, da dakona dillajou ha kreziou.

Pep hini anezo en em emelle euz e draou, hag evel-se ne veze ket reuz ganto. Eun draig o-doa divizet kenetrezo pa oant dimezet : penaoz pep hini d'e dro a rankje gwalhi ar skudellou goude koan. Kement-se a oa nebeud a dra, emezoh, rag n'edo nemed diou skudell da deurel eur banneig dour adreisto. N'eus forz, dond a reas an ampoent hag an nebeudig-se a dorras ar peoh a rene etre an daou bried. Rag, eur zadornvez da noz, Paskolig ha Soazig o-doa koaniet gand yod kerh silet, ha lêz-mesk fresk o tond diouz ar ribot. Ma ! goude koan, hag heb lavared grik, an ozah a lakaas eun tammig tan war e gorn-butun da vogedi toullou e fri, hag ar wreg a grogas en he labour da ober eur vrochennad stamm bennag. Hogen e-pad ar houlz-se, dilerh koan a chome war an daol : ar jidhouarn, eun tammig yod c'hoaz en he strad ha krestenn ouz he hantennou, ar skudilli, al loaiou. Med hebdale mouez Paskolig a zavas rustoh eged m'edo boazet.

« Poent eo dihuba an daol, tanfoultr ! », emezañ.

« Piou a zo o hortoz ? », a respontas Soazig.

« Da dro eo, me 'gred mad : dillo, kemer an torch-skaota, ha didrouz ! »

« N'eo ket va zro », eme eben ; « daoust ha n'eo ket deh 'oa bet da goan avalou-douar en o hrohen ? »

« Foei ! Me ne ran forz gand kement-se, na gand patatez, na gand o flusk ; med deh e oa ar gwener, ha me eo a walhas ar stalikerez, soñj am-eus re vad ! »

« N'eo ket gwir ! »

« A zo gwir ! »

« Nann ! »

« Eo ! »

Sellou du a rejont an eil ouz egile, med aze e chomjont, ha gwell e oa se. Ma vijent bet primmoh, an eil hag egile, e vijent bet eet pelloh, ha diwar nebeud a dra koulskoude.

Goude eur pennadig peoh, teod Soazig a yeas en-dro, rag kavet he-doa eun dra bennag.

« Ma ! emezi, peogwir n'om ket evid en em entent, Paskolig, setu amañ ar pezh gwella on-deus da ober : an hini ahanom a gomzo da genta, a lavaro ar ger kenta, hennez a walho ar skudilli hag a zihubo an daol, n'eo ket fenoz, n'eo ket eur wech na diou wech, med evid atao, ken aliez gwech ma vo red ober. »

« A zo gwir, a lavaras Paskolig. Emaout war ar pare ? Neuze emañ e-barz ! »

Ha diwar kement-se ne oa mui ger ebed etrezo. Soazig n'edo ket seizdaletoh evid lavared he zammig *Pater* ha pignad er gwele-kloz. Paskolig, eñ, a reas da genta-penn hanter-dro er-mêz da... weled an noz, a-raog mond da hourvez a-hed e *hini* goz. Med hini anezo ne grede tinta ger ebed, gand aon da gaoud bemnoz an traou da zihuba diwar an daol.

Antronoz e oa ar zul : an daou bried a chomas da ober o housk mintin. An heol a oa uhel hag e oant c'hoaz o voueta ar c'hwenn dindan o golhedou-pell... Koulskoude, tud bet en overenn vintin, en eur dremen e-biou da di ar gouskerien, a zouezas o weled c'hoaz prenest dor ha prenest.

Tin-Vraz, pe Mestr al Lantiked, n'em-eus ken soñj mad a-walh, rag divemor e teuan da veza a-raog an oad, a buntas da genta war an nor, hag e-giz ne responte mouez ebed a-ziabarz an ti :

« Divarhom an nor, eme Kolaig Muzelleg, ha deom e-barz da weled ! »

« Nann, nann, kant gwech nann », eme Gaidou ar Gapenn, « dre ar prenest eo klokoh mond e-barz ! »

Ouz he hleved, Jakez Tort, kemener laer an Ti-all, eur skrivellig, uhel war e zivesker, a zavas e harr gleiz hag a-daoliou boutez a vrevas gwer ar prenest. Kerkent Boun Lopez ha Yann Cheulk, daou viliner brenn, a bignas a-haoliad er prenest, a lammas en ti hag a zibrennas an nor a-ziabarz.

Ken buan al lochennig a oa leun-tenn a dud. En em gaoud a ree eno, ouspenn eged ar re am-eus anvet, Lan Gabouig ha Lommig C'hoarzato ; Maoutig Kernoc'h ; an aotrou C'hwezfall euz maner an Avaloudouar, gand e ziou verh, Che ha Moumoutig, kazell-ouz-kazell ; Gabriel ha Visant Pibenn, tomm an heol ganto ; ha me 'oar, me, piou a oa c'hoaz !

Ha petra 'gav deoh e weljont e-barz an ti ? An daou berhenn en o gwele : Soazig, troet ouz ar speurenn, ha Paskolig, e benn gantañ skoachet mad dindan al liñser.

« Petra, maro int ? », eme Lommig C'hoarzato.

Paskolig a ziskuzas e benn a-zindan an dillad, ha Soazig a zistroas he sellou du.

« Beo int c'hoaz, eme an oll, rag fiñval a reont. »

Jakez Tort, kemener-laer an Ti-all, a zavas e vouez :

« Ahanta ! melhoued krogenneg, daoust ha n'eo ket poent c'hoaz didoulla alese ? Respontit deom, n'ho-peus ket mez chom keid-all amzer da skuiza en ho kourvez ?... Satordallig ha pluskdero ! Lavarit deom eun hanter ger bennag, e-leh diskorbella ken spontuz ho taoulagad, e-giz pa vefeh o klask lonka kement hini 'zo ahanom, an eil war-lerh egile ! »

E-barz ar gwele-kloz, hini ebed ne zizerras e rann.

« Bi...bi... biskoaz ke... kemend-all ! », eme Lan Gbaouig a oa bestod hag a zaoznege eun disterra. Chi... chi... chaka kurun ! pe... petra 'hoarvez ganto ? »

Che, merh an aotrou C'hwezfall, a ziskordas da hoarzin, ken na dregernas ganti skudilli, loaïou ha jidhouarn war an daol.

An oll a hoarzas d'he heul, med Paskolig ne reas ezvan ebed evid se, na Soazig kennebeud, ha setu ma savas aon gand an oll.

« Ar re-mañ a zo mud, kollet ar homz ganto ; piou 'oar, marteze ez eus eun dra bennag dindan. Daoust ha ne vefe ket Paol gorneg, Paolig lost hir, o c'hoari e baotr war an daou-mañ ? Eo, sur a-walh, rag sellit pebez tres divalo 'zo gwisket warno !... »

Hag en eur zoñjal kement-se, ar wazed a chome nehet-braz ; hag ar merhed, strafuillet-oll, a lakee sin ar groaz en o herhenn buan-ha-buan.

« Ha ma redfe unan bennag ahanom da gerhad ar beleg deoh ? », a houlennas Moumoutig digand an daou vud.

Paskolig ha Soazig a zellas an eil ouz egile, med ger ebed ne gavas an hent da zond diwar o muzellou.

Hag an aon hag ar spont a greske e-kreiz ar wazed ; hag ar merhedou a grene e-giz eur bern deliou seh ; ha Jakez Tort, kemener-laer an Ti-all, ar skrifellig hir e zivesker, a dennas boutou ha loerou evid redeg da glask ar beleg.

Ne oe ket pell gand e dro.

« Peoh d'an ti-mañ ! », eme an aotrou person, en eur zegouezoud ; « bennoz Doue d'ar re veo, ha repoz vad d'ar re varo ! »

Hag e tostaas ouz ar gwele.

« Penaoz, va mignoned, ar fall a zo kouezet a-dreuz war ho korre ? »

Er gwele-kloz grig ebed morse ! Med Gaidou en em gargas da respont :

« Nann ! aotrou person ; ne gomzont mui... an diaoul 'zo warno !... »

An aotrou person a arvestas piz outo.

« Ya, emezañ. Eun diaoul en-deus greet en o hreiz e labour divalo... an diaoul mud. Ma ! evid kaoud o yehed en-dro, mad e vefe kinnig eun draig bennag d'ar zant ha d'on iliz : eul lur amann, pe gentoh diou, hag eur hrez dillad ! »

Diou verh an aotrou C'hwezfall euz maner an Avaloudouar a furchas a-zevri an arbellou. Paskolig a zelle outo gand poan, e-giz eur hlañvour tohor, c'hoant dezañ da gomz heb gelloud lavared an disterra

ger ; Soazig, en he hoaze, a groane³¹ he gwalh, hag he sellou du a bare war an diou furcherez divergont. Moumoutig he-doa pourmenet he hrabanou furch-difurch en arbell lêz.

« Setu aze, aotrou person, ne gavan ket eur begad amann en ti ; med eun dousennig viou am-eus dineizet, ha m'ho-pefe ar vadelez da ginnig anezo d'ar zant da houlenn digantañ evid an dud keiz-mañ beza pareet, pe beza da vihanna diboaniet abred. »

An aotrou person a gemeras viou ar zant !

Che a oa war he daoulin o turluta en arbell all hag o turia da vad an dillajou hag ar hreziou.

« Setu amañ, aotrou person, emezi, eur roched madig a-walh, ha, mar karit gwerza anezi "e profit ar zant", dalit, ema-hi aze ! »

Hag an aotrou person a gemeras roched ar zant.

E oa o trei da vond er-mêz gand viou ha roched, pa zilammas Soazig en he fatenn (he hiviz) war bank he gwele.

« Hep ! pep ! pep ! », emezi, « lezit an traou-ze amañ, mil gutez ! Restaolit deom roched-eured Paskolig, ha viou va yar velen ! »

Paskolig a dennas neuze e benn er-mêz hag, en eur hoarzin, e lavaras d'e *hini* goz :

« Ahanta ! Soazig, eur vaouez n'eo ket mestr d'he zeod, gwisk dillo da zillad ; ar jidhouarn 'zo aze war an daol ouz da hortoz, rag komzet eh-eus da genta, ha te an hini a ranko bemnoz skaota an traou ! »

Hag e tisplegas dirag an oll perag e oant bet mud o-daou eur pennadig.

Kement hini a oa en ti a zaillas da hoarzin a-walh, hag an aotrou person zoken ne chomas ket war-lerh ar re all.

Soazig a wiskas he broz, ha, mezeg an tamm anezi, en em lakaas da zihuba an daol. Da vihanna, mar he-doa kollet war an tu-ze, war an tu all he-doa gounezet, rag miret he-doa ouz viou he yar velen ha roched-eured Paskolig da vond gand ar zant.

*

Evel-se ema va hoñchenn, lennerien : kredit anezi ar pezh a garoh, med, lavarit din, daoust ha n'eus ket aze kalz a reuz diwar-benn "nebeud a dra" ?

**

O-diou

Evid c'hoaz n'eus ket a ugent vloaz, e oa o chom er maner Keraskorn, tost d'ar Pont, eur hoz tammig aotrou, hag eñ kouezet diouz lost ar harr pell a oa. Gwelet e veze o vond hag o tond, dalhmad war e gein eur chupenn rouz roudennet gand ar hartouz³², eur hoz tok paker-luhed war glipenn e benn moal, ha leun e gov a fougennañ, me 'gav din ! Kement-se ne blijje ket kaer d'al labourerien a-ziwar-dro, ha setu perag meur a deod lardet-druz a zougprezege diwar e benn, gwella ma hellent, teodou merhed dibres an darnvuia, red eo lavared !

Ma n'eo ket eur gaou ar pezh am-eus bet klevet, perhenn maner Keraskorn a oa anvet Tammkrohenn, ha gwir a-walh e hellfe beza, a gredan.

Kement-mañ, e gwirionez, a zo nebeud a dra evid ar fentigell am-eus da varvaillad deoh diwar e bouez.

Selaouit !...

*

³¹ a groane : ?

³² ar hartouz : ?

An aotrou Tammkrohenn, daoust dezañ da veza aotrou, a ranke labourad, evid kaoud peadra da veva ha da vaga e ziuo verh yaouank ; rag gand an diou-mañ eo e oa an dalh.

Kredi o-dije greet en em izellaad, en em zaotri, m' o-dije sikouret d' ober eun dra bennag war-dro an tiegez. Soñjit 'ta !... Gallegad a ouient, leun o begou, ha bouzara an dioukouarn en eur zon ar piano, mar plij. Ne reent netra krenn ! Eo, arabad fazia. Eun dra gaer a reent : moannaad ha dizeha yalh o mestr, pa zegoueze dezi beza reud eur wechig an amzer.

Pa veze kevnidet ar yalh, pa veze eet d' an hesk, ar paour-kêz aotrou, re lentig e-keñver e ziuo bikez vriz, a veze red-mad dezañ mond d' ar foar da werza tra pe dra, loen pe loen. Evuruz dezañ c'hoaz kaoud da werza !

Mad ! Eur wech ar yalh en em gavas adarre goullou, hag ar merhed en em jale, rag pardon Konforz a dostae, hag eun tok pillig bennag o-doa c'hoant da gaoud.

Setu ma oe red d' an aotrou o zad mond da foar ar Pont.

Mintin mad e kemeras hent ar Pont, e vevel Jakez gantañ, evid mond da werza daou oh lard.

Eun hanterig kard leo diouz maner Keraskorn, ar moh a gavas eul lagenn e-tal an hent. Redeg a reont hag, a-raog ma hellas mestr na mevel o diarbenn, setu int e-barz da durlutad !... Med penaoz o haoud ahano ? ne reent van nag ouz "dah, dahig !" kennebeud nag ouz "sik, sik !".

« Red eo dit, Jakez, diskenn el lagenn ha kas da skourjez ganit. »

Ha ya ! bleo, sell ; nann, reun eo ! Ar moh a dohe, a zorohe hag a ohe, hag a rede a-raog skourjez Jakez. Ma oe red d' an aotrou mond ivez el lagenn da zikour e vevel ! Neuze, koulskoude, e teujont a-benn da gas al loened er-mêz, ha d' o hordenna, n' eo ket hep poan avad ! Med, siwaz ! Jakez n' edo nemed pri diouz an traoñ beteg al laez, hag an aotrou, paour-kêz aotrou Tammkrohenn, na stlabezet e oa e voutou-ler e-barz ar vouillenn !

« Kant minell borhell ! emezañ, biken ne hellan ket mond d' ar foar gand va boutou er stad-se ! Gaou a rafen ouz va diou yaouank... Jakez, kerz buan da gerhad din eur re voutou all, e-pad ma chomin amañ da zivall an daou reuneg fall. »

Ha Jakez war e giz en-dro, drouglaouen, en eur hrozmolad.

E-pad an amzer-ze, an diou verh "ra netra" a oa war an uhel o solded, tost d' ar gêr, ouz ar pez a oa c'hoarvezet ; ha, pa weljont Jakez o tond gand e zaouarn hag e veg louz, gand e zillad saotret, eh en em rojont da hoarzin kement ha kement ma' z eas eur horvad malis e-barz ar mevel, ha n' o hare ket an hanter re.

« Petra ? emezañ outañ e-unan. Ober ar zod ahanon a glaskit ?... Gortozit, koz dimezelled, skuiz en o lostennou. M' ho tesko, me gwelom ! »

Ha Jakez d' o haoud.

« Ho tad, emezañ, en-deus lavaret din dond da bokad deoh ho-tiou ! »

Ar merhed a hoarzas muioh ha kreñvoh c'hoaz... Med ar mevel a zalhe stard, hag a dostae dalhmad.

« Ha red eo din mond buan ganti, rag n' em-eus ket a amzer da goll ! »

An diou yaouank ne hoarzent mui nemed dre hanter, en eur weled Jakez en o hichenn.

« N' eo ket gwir », emezo.

« Emichañs, me n' on ket eun troader gevier, me ! » a zistagas Jakez, en eur zistrei da hopal war-zu an hini koz... N' eo ket gwir, aotrou ? O-diou ? o-diou ?... »

E hellit kredi, an aotrou Tammkrohenn ne zoñje nemed en e voutou-ler, hag e krias d' e dro :

« Foei ! sur avad ! O-diou, ya ! Ha deus buan en-dro ! »

Hag ar merhed ne hoarzent tamm ebed ken.

« C' hwi a zo ho-taou oh ober goap ahanom-ni ! »

Jakez a houlennas evid an eil gwech :

« Aotrou, o-diou ho-peus lavaret ?... O-diou, n' eo ket 'ta ?... »

« Ped gwech warn-ugent e rankin lavared dit, amziod ?... Ya, o-diou, ha buan ! »

Ha Jakez mond d' ar merhed faro gand e veg louz-dilouz evel ma oa, hag eñ da bokad dezo, d' an eil tu war-lerh egile.

An dimezelled paour en em jale, med red e oa dezo chom *Doujuz ha krenedig evel daou oanig gwenn*, rag, ma lavare ar mevel dezo :

Tevel bremañ 'zo red heb ober re a vrud ;

N'ez eus ezomm ebed e ouife an oll dud.

Jakez, laouen an tamm anezañ, fougennañ zoken, a zoñje en eur vond da gerhad boutou an aotrou Tammkrohenn :

« Ahanta, koz dimezelled ! Eur wech all, c'hwi 'ouio peur hag ouz piou ober goap ! Bremañ, kerzit, pa garoh, da glask dour da walhi ar pri diwar ho peg. Me ho tesko ! »

An diou all a hanter-zodas. Soñjit !! Eur mevel o pokad dezo ! Eh !

*

N'eus forz, koulskoude, ar moh a oe gwerzet ker ; hag an diou "ra netra" en em zihollas en eur brena, a-benn pardon Konforz, peb a dok divalo, ken ledan hag eur billig krampouez.

An hader avel

Paotred Plougastell a oa krog dalhmad da hada o fiz bihan. War ar beg douar dispar-ze, diouz Sant-Yann beteg Laoberlah, nag a labourerien a boanie hag a hweze !

« War Doue or Halvar ! emezo, mar chom mad an amzer evel-se, e vo gwelet berniadou piz bihan o sevel ! »

Hag euz e du, kement pe vuioh eged n'eus forz piou, stard e labourer Fañch Kervella, brudetoh kalz dindan al lesano a "Dogn", abalamour ma touge, a-dreist e henou ha dindan e zaoulagad, eun tamm fri savet ha distroñset, hag a goueze dour e-barz, ken aliez ha ma vije e berhenn dindan ar glao !

N'eus forz, pep hini e fri, hag e fri da bep hini ! Ha neuze n'eo aze emañ an dalh.

E "park ar Hwiled", e-kichenn an hent braz, Togn a labourer 'ta ! Diboulouda an douar, digeri antchou bihan gand lagad e bigell ; linennou eeun penn-da-benn gand ar park. Hag eur wech roudennet an antig, Togn, daoubleget, a hade, a hade..., pe, da vihanna, ober an neuz da hada a ree !

« Hadom avel, a chaoke-eñ etre e zent ; rag petra bennag ma lavar an aotrou person, red-mad eo din bremañ hada avel, ma n'am-eus ket c'hoant da eosti stourm an avel fall ! »

Ha Togn, gwasoh-gwaz, a gerze gand e ant en eur "*hada avel*", rag avel hepken, ha n'eo ket piz bihan eo e kemere peb ar mare diouz ar bisah goulo staget en-dro d'e zargreiz. Ha Togn a holoe, gand evez, e antchou goulo, hag a rastaelle flour d'o hompeza.

*

War an hent braz, skoaset a-dreñv eur hleuniad lann en o bleun alaouret, heb beza gwelet, eul lakez aotrou a zelle ouz Togn o labaroud hag a zoñje :

« Mad, mad eo ! emañ Togn oh hada piz !... »

Hag an aotrou Sparfell, laouen e zaoulagad kaouenn e-dreñv e lunedou brankou aour, a hoarze sioul, ken na zave e vuzellou tano da ziskouez diou rastellad e zent hir, ken na hoantae e fri krog plega da boka d'e chink ; amprevan daoudroadeg, tri-hard ki uzulier touet !

« An Togn, emezañ, a dle din eur hant lur bennag, hag a gasin da hweh-ugent lur pe ouspenn. Pa vo deut ar piz bihan, me 'welo penaoz en em drei, hag an hucher, emichañs, n'eo ket greet evid ar chas ! »

War-dro ar peder eur heol, Togn, en eur zevel mell e gein, a welas Glaodina, e wreg, o tond da zegas dezañ e vern-vihan. Hag eñ d'ar hrinenn da azeza eur pennadig da zebri eun tamm bara kig-sall, ha da eva eul lomm jistr, en eur lavared d'e Hlaodina :

An tamm hag al lomm

A zalh an den en e blomm.

« Gwir, eme ar wreg, med dalh soñj petra 'hoarvez ganit d'ar zul aliesoh eged d'az tro, ha lavar din ha n'eo ket ken gwir all :

Al lomm heb an tamm

A ra d'an den kaoud e lamm. »

« Lakom, med ne zislavari ket ahanon :

An tamm heb al lomm

'Chom war ar galon 'vel plomm ! »

« Med a-walh evel-se. Sell du-hont 'ta, Glaodina, e-tal ar gloued, ha ne lavarfed ket an aotrou Sparfell ? »

« Eñ eo, rag tenna 'ra e dok da aveli e benn moal, kement a blu warnañ ha war eun irvinenn diblusket. »

An aotrou Sparfell, da neuze, o zaludas a-bell hag a hopas :

« Setu aze piz lakaet e doare, Togn ; gand na deuy ket nozveziou reo warno. »

« Ha pa rafe reo hag all, eme Togn ; va fiz n'eus ket aon da gaoud evito, an had 'zo mad. »

« Diwall a ze ! », eme Sparfell, o vond kuit.

Hebdale ivez Glaodina a drohas d'ar gêr. Hag e-unan adarre, Togn a reas e labour didalvoudeg, a durias douar, a roudennas antchou, a hadas avel, a holoas, a rustellas, a gompezas hag a boanias, nehet, c'hwi 'oar pegement, aotrou Doue ! »

Beteg kuz-heol e talhas. E amezeien a dremenas :

« Poent mond da glask penn euz koan, Togn ; a-benn warhoaz 'zo deiz, Togn ; n'out ket inouet c'hoaz, Togn ? »

Togn a ehanas, hag a respontas dezo :

« Ar paour n'en-deus ket amzer da veza inouet ; setu aze eur hleñved ha ne stag nemed ar vindivien :

Red eo d'an den ha n'eus netra
Labourad tenn hag heb gouela !

Hag e kuitaas e bark, goude eur zell diweza war e labour dreud ; hag e tistroas d'ar gêr gand an amezeien.

*

Togn a oa eur paour-kêz diaoul, eur fur a-ziwar ar mêz, hag en e furnez e kemere an traou e-giz ma teuent, hag ar bed war an tu ma troe, heol pa domme, ha glao pa hlebie. A-hend-all, poan a-walh dezañ koud e dri bochadig kerh bemdez hag eun tamm dillad bennag eur wech an amzer.

Rag Togn, mar poanie pa labourer, Togn en-doa e bep seurt siou, lakom fall, evid eun den dileve : Togn a chasee, Togn a besketae, Togn a zaremprede ar marhajou peurliesha hepken evid gwerza netra ha prena eur hovadig "odivi". Ar gwasa ma oa, Togn a oa eur c'hoarier, eur c'hoarier daonet, gouest da hoari n'eo ket e oll wenneien, mez c'hoaz gwreg ha bugale. Hag evel-se, e hellit kredi, n'eo ket pinvidikaad eo a ra Togn dre ma kerz ; e-leh daou varh mad gwechall, n'eus ken nemed eur hagn dreud en e varchosi, hag e eost a vez debret a-raog beza medet ! Dle a zo bet kemeret zoken war e dammig tiegez, an aotrou Sparfell her goar mad ! Nag a bateriou, nag a litanou, n'eo ket re ar zent !, a glev digand e Hlaodina, pa zegouez dezañ dond d'ar gêr eun tammig badaouet gand gwin-ardant !

Togn en-defe keuz, rag eur galon vad a sko en e greiz, med petra 'dalv "keuz war-lerh" ?

Ha n'eus netra evid distrei ar c'hoarier diouz ar hartou : bemnoz e tou ne hoario ken, ha, siwaz ! goude e gousked, bep mintin, pa gav e du, ez adkrog da hoari !

Petra 'fell deoh ? Al louarn a varvo en e grohenn, nemed ez-veo e vefe diskrohennet ?

Ha c'hoaz, piou 'oar ne rafe ket krohenn nevez ?

*

Setu aze Togn a zo savet hizio mintin-mad, ne oa c'hoaz enaouet nemed hanter-houlou gand an deiz ha meur a gillog diwezaad a oa c'hoaz o kana.

On den a zamm, war e gazez koz eskerne, eur zahad piz da hada, had kaer ma zo !

« Arbad dit, eme Glaodina diouz he gwele, arabad dit brousta da biz, nag hada re stank : te 'oar emañ an had diwezaad o vond ganit ! »

« Bez dineh, gwreg ! Ra vin-me skaotet en erh, pe skornet en tan, ma ne ve ket hadet mad ar piz-se ! Son, Morianez !... »

Ha togn etrezeg "park ar Hwiled".

Gwasa ma zo, e hanter hent, piou a gej gantañ ? Beskeneg, ar hemener, ruz e zaoulagad en e benn, o veza tremenet an noz en he hed o c'hoari 'r hartou, piou 'oar e peleh war ar mêz.

« Diwezaad emhout o tistrei d'ar gêr, Beskeneg. »

« Lavar 'ta, Togn, emhout-te abred o vond d'ar park. »

« Gwir eo, n'eus den c'hoaz war zav. »

« Ha ma rafem eun taolig kartou ? »

« Nann, Beskeneg, nann a-grenn ! »

« Deus 'ta, buan, unanig berr hepken. »

« Ha va fiz da hada ?... »

« ... A hortozo eur pennadig. »

Ha Togn, ma enebas da genta, ne reas ket pell. Ha Beskenneg a dennas e gartou. Diou, teir bartiad a oa greet, hag ar piz bihan a hortoze, ya da !...

E oa al laboused da vad o hragailad, hag an heol a hoantae diskuz e benn ruz du-hont, hag, a-haoliad war gleun ar park, an daou haorier a hoarie atao ! Hag, en eun taol, Togn a welas kollet e wenneg dieza.

« Sah an dienn ! emezañ, emañ sehet ! »

« N'eus forz ! Togn, lakom c'hoaz daou skoed e-barz, en em gaoud a raim goude. »

« Ma ! an daou skoed diweza neuze. »

Ha Togn eo a gollas.

« Alo ! kenderv, netra pe daou gement. »

« Ma ! deom dezi. »

Ha Togn eo a gollas c'hoaz !

« Neuze 'ta, Togn, lakom e-barz kement am-eus gounezet diwarnout ; mar kollan, e restaolan dit a-bez ; mar kollez, te 'roio din petra ?... da had piz bihan, sell !... Ya, emañ e-barz ? »

« Deom e-barz, Beskenneg ! An taol-mañ a zo din », eme Togn, pennfollet, e zaouarn o krena dre ma save e gartou.

Ye 'ta !!! Togn eo a gollas bepred.

Hag ar hemener louarn a zammas ar zahad piz diwar Morianez, ha yao d'ar gêr, goapauz !

« Kenavo, Togn ! », emezañ. « En dro genta, mar kerez, ni a hoario da gazeg fall ! »

*

Paour-kêz c'hoarier !... Petra da ober ?... Mond d'ar gêr, hag anzav ouz Glaodina ?... Nann, mil birviken nann ! Mond da brena had all ? N'en-deus gwenneg, na liard toull ebed !... Ha neuze, an oll a ouezfe e zoare, e-leh, gortoz, bremañ den ne glevo, rag ar hoarierien n'en em werzont ket etrezo ! Petra, neuze ?

« N'on ket evid hada piz, eme Togn ; med ma n'am-eus ket had, e hellan da vihanna ober an neuz da hada : na gwelet, na klevet, na gouezet. Deom ! »

Ha setu penaoz Togn a hadas avel e-leh piz.

Med a-ziwar neuze, broudet gand e goustiañs, Togn a lavaras kenavo d'ar werenn ha d'ar hartou. Glaodina ne ouie mui peseurt sant a chome c'hoaz dezi da drugarekaad ! Togn a boanie dalhmad, Togn a labourer bemdez war-dro e zouar, zoken war-dro "park ar Hwiled". E amezeien o-doa beh hen anaoud ; hag ouz hen gweled oh en em emelloud evel-se, an uzulier Sparfell a hoarze e zaoulagad, a-dreñv e lunedou brankou aour, pa zoñje er piz da zond, hag en hucher !

*

Hogen, pemzeg deiz goude, piz bihan Plougastell a oa deut er-mêz hag a zave o hlipennou, hag o renkennadou eeun a hlaze ar parkeier. Ne oa nemed "park ar Hwiled" ha ne hlaze ket... mouzet emichañs.

« Emañ da biz bihan war-lerh, Togn ! »

« Lez anezo da labourad a-zindan : gwelloh eo. »

An amezeien a lakaas skourrou d'o re ; med piz Togn ne zivorfilent ket, kaer 'oa o gortoz.

« Na pegen diwezad int ! », eme Glaodina.

« Marteze ar ouenn eo a ra ! », eme ar gwaz.

Med setu aze piz an amezeien a zo e bleun, ha "park ar Hwiled" a zo c'hoaz noaz ha kras e zouar. Biskoaz kemend-all ! Petra 'hoari ganto, ar piz daonet-se ?...

Togn a skrabe e benn, moarvad diouz an tu n'en-doa ket debron ; ha Glaodina gêz ne bade mui war he zreid.

Hebdale, ne oa ken ano nemed ouz Togn hag e biz : Plougastell a-bez en em emelle outo ; ha bemdez e terede tud da weled “park ar Hwiled”. An aotrou Sparfell a-dreist-oll a oa nehet... abalamour d’an hucher.

Ar vrud a redas eun devez e vije kavet, en eur ziskraba an antchou, viou naered e-leh had piz : ar merhed a-dreist-oll, ezomm ebed d’hel lavared, eo e kerze ar gwasas o latenn en-dro ! Pebez plip ! plep ! plap ! gouest a-walh da vouzara an oll zent mein, laeron, ivern, hag all, a zo en-dro da Galvar Plougastell ! Ha n’eo ket eston rag

*Abaoe ma’z eo bed ar bed,
Teod ar wreg ne jeñch tamm ebed :
Nemed he broz a ra bepred !*

Eur zulvez d’an abardaez, e oa e “park ar Hwiled”, ha Katell, Jefig, Seza ha Marianna, Berhed, Jantonig hag an oll re all, breuriez dibres an Teodou-Lardet, en he fez ! Breuriez, am-eus lavaret, C’hoariez a vefe dleetoh hag a galz ! Kuzul a oa dalhet, hag en eur vouez, e oa barnet ha disklêriet da gement a gare selaou ha d’ar re all ivez, penaoz e “park ar Hwiled” ne vije ket a biz bihan ennañ, abalamour ma oa sorset an had ! Ha sorset gand piou ? Kerzit da houzoud !!!

An oll a oar eun dra sorset a rank beza distrobinellet gand eun eil sorser galloudekoh. Renerez an Teodou-Lardet a oa karget dioustu da vond da Vro ar Roh, pe war-dro, da gaoud eur zorserez vrudet a gelenne du-hont, ha da glevet digand ar Wrah koz kement a oa red ober evid dizamma an dud kêz-se, Glaodina a-dreist-oll, eun druez bremañ he gweled ken nehet edo-hi.

Eiz real e koustas ar huzul dezi : ne oa ket re ger c’hoaz, ma ne oa ket diskuillet dezi dioustu ano sorser ar piz bihan, da vihanna lavaret e oa groñs e oa hemañ eur gwaz, ha ne oa na karet na prizet gand den er vro, hag ouspenn-ze mond a rafe ar sorser an deiz war-lerh beteg ti Togn !

Ne oa adarre nemed eur vouez e Breuriez dibres an Teodou Lardet : red e oa d’an oll izili en em voda antronoz e kêr Togn, ha, pa zegouezfe an haillon strobinner, an oll gand peb a vod lann a zaillfe hag a blantfe gantañ eur c’hwez ken na zavfe c’hwez an deiz diwarnañ.

Antronoz an oll gwraez a oa o hortoz hag o bodou lann ivez :
« Deus ‘ta, sorser ! Ha ni ‘zesko dit son al lann !... »

*

Togn, beh dezañ miroud da hoarzin, a venn lonka e deod evid tevel ! Kaoud a reas e du da vond d’ar vourh ha da genta da Veskenneg kement a dremene. Hag o-daou e c’hoarzent leun o chupenn, pa weljont an aotrou Sparfell, an uzulier divalo, o tond etrezeg enno.

« Frap ganit, Togn, ha treh kuit d’ar gêr, ha gra peoh ; emañ kavet an tu warnañ... Dilui da zivesker, paotr ! »

*

« Petra ‘hoari gand Togn, kemener ? », eme ar fri kaouenn o tegouezoud gand Beskenneg. Pres ‘zo warnañ, diamig, e-giz pa vije etre lost ha reor an diaoul. Ha koulskoude, c’hoarzin a ra, dreo e benn !

« Laoeun eo sur, aotrou Sparfell, ha leh da veza en-deus. »

« Hañ ! hañ !... Hag a-nevez gantañ ?... Heritaj marteze ‘zo deut dezañ ?... »

« Heritaj ! Gwelloh eo c’hoaz. »

« Gwelloh, diamig !... Lavar din ‘ta, kemener. »

« Ya da ! Lodenna ar voul ganto, n’eus ket da zislavared ! Soñjit ‘ta : en eur skarza e varchosi, er mintin-mañ, Togn en-deus kavet er voger, e-rez an douar, eur voestad leun a aour, ha n’ouzer ket ped pezh biskoaz n’eus ket e-barz !... »

« Diamig ! eme an uzulier, o hlaouri. Ha din-me Togn a dle war-dro hanter-kant skoed pe zaou-hant lur ; hag hirio, dres, e teu va billed da dermen ! Diamig !... »

« Poent deoh neuze, aotrou Sparfell, sacha ganeoh war-lerh hoh ibil, rag gouest a-walh e vefe dizale da zispign e oll beziou gand boutaill ha kartou ! »

« Mond a ran, diamig, mond a ran... »

*

Hag an uzulier, lugernuz e zaoulagad dindan e lunedou brankou aour, a vousec'hoarze d'e fri-kaouenn, en eur zegouezoud e-barz leur Togn.

« Ar Sparfell ! Ar Sparfell ! Eñ eo ar sorser !... » eme renerez ar Vreuriezh dibres.

« Evid gwir, eme Glaodina, bez' e oa harpet ouz kloued "park ar Hwiled", an devez ma oa hadet on fiz bihan. »

« Laosk da vond, neuze !... Beh d'ar sorser, c'hoarezed !... »

Ne oa ket red d'ar renerez gourhemenn diou wech : oll verhed Breuriezh dibres an Teodou-Lardet a zavas o brankou lann hag, aotrou Doue, c'hwi 'oar nag a daol, nag a flemm a lakas, n'eo ket ar sorser, gouenn ar zorserien eo eet ar penn er-mêz anezi, med an uzulier divalo, ken disprizet er Vro. Ar paour-kêz Sparfell ne oa nemed gwad, hag a-dra-zur, eur pennad mad a amzer a dremenas o c'hwennad ar pikou lann diouz e grohenn : n'eo ket deut d'hel lavared abaoe. Rag antronoz e tehas diouz Plougastell, heb lavared da beleh ez ee ! Kalz a geuz n'eus ket bet d'ar zuner divalo, a-dreist oll e-touez ar re reuzeudig a oa en e zle !

*

Ha Togn ? Piz bihan a-vernadou a deu bep bloaz, e "park ar Hwiled" hag en e barkeier all, abalamour m'eo bet dizorset, a gred lod, pe da vihanna, evel ma kred lod all, hag ar wirionez a dle beza gand ar re-mañ, abaoe ne vez mui ar Plougastellad war-dro ar hartou hag an tavarniou.

Deut eo a-benn zoken da hounid ar hemener ; ha meur a dro, Beskeneg hag eñ a hoarz diwar-benn an "hada avel", ha pikou lann ar Sparfell !

N'eo ket estlammi den lavared ez eo deut Togn a-benn da zavel e gein, hag emañ brao ar stal gantañ en e diegez : ha Glaodina ne gav ken hir heh amzer. Peb ar mare e ped oll zentezed ar Baradoz da zerhel war an hent mad he Fañchig Kervella, brudetoh kalz dindan al lesano a Dogn.

**

Soazig Tagnouz, gwreg ar Hidour

I

Piou n'en-doa ket e bar evid enaoui eun tantad tan 'leiz an oaled da domma e-pad ar goañv ? Hennez a oa ar Hidour, sur a-walh, pe n'ouzon ket piou all 'vefe bet.

Da genta e ruille, beteg toull ar fornigell, eur penn moulgos-dero, unan fonnuz da zevi : gand an dra-ze, trojenn balan da lakaad da gregi, ha, war horre, tammou fao heskennet ha faoutet, eur boued prim evid an tan. Ha buan e strinke gwrez en-dro d'an oaled. Ya, kaer en-doa ar Goañv skornet c'hweza e alan yen dre zindan an nor, ar Hidour ne grene ket evid se, en eur eva *flip* gand e vignoned, martoloded koz eveltañ. Hag an teodou a yee en-dro, e hellit kredi, buannoh eged na dro bannou ar vilin e-pad eun devez avel dirollet.

« Soñj e-teus, Kidour, pa oam du-ze, e bro ar Vorianed ? na pebez tud du o beg ! Gwir eo n'ez eus ket kalz a zour dre eno. Na pebez loened dre ar vro ! Na pebez gwez braz dreist-oll ! »

« Ya, eme Vendal ar Hantonier, me 'zo bet ivez du-hont oh ober va amzer. Eur wech e-pad eun devez glao, e oa ar rejimant a-bez er gwasked dindan eur wezenn, unan hepken ! »

« Basta ! a responte Jakez ar PRim, evid gwez ken braz ha me ne gredan ket ho-pefe gwelet : ar wech diweza am-eus greet tro ar bed, e oan en em gavet gand eun tamm gwezenn hag hi ken braz, ken teo, ken ma oan souezet-marzo ganti : kredit, mar kirit, deg devez leun am-oa lakaet da ober an dro da drojenn ar wezenn-ze, basta ! »

Ar vartoloded koz all a hoarze, rag hini ebed anezo ne grede tra euz ar pezh a gonte ar re all : oll eh ouezent :

*Arabad eo kredi kement tra a glever,
Dibaot ar wirionez, ha stank ar gevier !*

An oll a hoarze 'ta, ha c'hoarzin a ra vad d'an dud, a lavarar ; ya, an oll, nemed Soazig Tagnouz, gwreg ar Hidour. Tanfouich³³ ! nann, honnez ne hoarze tamm, al lorgnez a oa anezi, eun dostenn zivalo stag-mad he hroheñ ouz he hein : poan-gov he-doa, ken na ride he fri minaoued, netra nemed o weled ar re all o c'hoarzin en eur domma o zreid hag o bouzellou gand an tan hag ar *flip* bero. Rag setu eno ! ar heuneud tan en azmer hirio n'emañ ket evid netra ; nag ar *flip* kennebeud ne gaver ket aliez anezañ evdi eur "bennoz Doue", nag evid daou zoken.

An dommerien-everien koulskoude ne reent van ebed ouz an hini goz, kaer he-devoa homañ dislevi ; dihanaoui³⁴, bleugeudi, teufal, streviñ, lavared edo skuiz hag e oa deut poent mond da gousked.

« Ne welit ket, emezi,

*En tan, a nebeud da nebeud
'Ya e ludu ar bern keuneud.*

« Penaoz, Soazig ? » a eilgerie ar Hidour ; « re abred eo c'hoaz mond da voueta ar c'hwenn d'ar gweleou. »

« E koustiañ ivez soñjit ervad, va moereb, a gendalhe Vendal ar Hantonier, ahan da warhoaz vintin n'eus ken nemed noz ; ha neuze, ma vije hadet dindannoh pour pe gwiniz-du, a-benn ar mintin int a vefe dideñvet ha c'hwi treuzet ganto ! »

« Stank da forn, genaoueg, a-walh e-teus poazet ! »

« Ya, degasit din, moereb, eur banne flip c'hoaz da zikour da stanka. »

An oll adarre a horjelle outo o hovou dindan o chupennou kement e tiskordent da hoarzin. Hag an hini goz, a-eneb dezi gwir eo, a ziskenne banneou *flip*, ya, a-eneb dezi, me 'lavar ; rag kement pe wasoh eged an dispign, ar Hantonier divalo-ze n'en-doa ket e bar da lakaad anezi da gounnari !... »

Malloz va haz ! Mar gellfe-hi, eun dro bennag, kaoud gouzoug hennez dindan he boutez ! Pillig krampouez ! Neuze avad e vije gwelet traou !... Med Vendal, eñ, ne ree foutre-kaer ganti.

A-greiz suna c'hwek e gorn-butun, netra evid diskouez e oa c'hoaz beo, Jakez ar Prim a lavaras d'e vignoned, en eur zelled a-gorn ouz an hini goz :

*Anez ar gwin hag ar merhed
Ne ve ket kalz a drouz er bed !*

« Anez ar merhedou evel Soazig, a-dreist-oll, eme Vendal adarre. Sell ! Kidour, ar genta tro ma vi intañv, te 'oar, arabad dit kemer eur Gebenn, c'hoar d'az kwreg kenta ; deus d'am hlask neuze da vazvalan, ha me a zibabo dit mad ha brao, te 'welo. »

« Penaoz, emezi d'he gwaz, he dorn serret prest da vloñsa, ha te a zelaoufe al lakepoted-mañ ?... Respont 'ta, kaz koukset ! Mar befe intañv, e rafes eil-dimezi, amprevan ? »

Ar Hidour a oa eur fur a zen anezañ ; anaoud e wreg a ree ivez, ha ne gemeras ket aon rag he fennad : aliez en-doa klevet kement-se diganti.

« Kleo ! haillon ! a hourdrouze an hini goz. Mar dimezfes en-dro, sell, me a deufe diouz va bez da zacha ahanout d'am heul diwar-bouez da dreid. Ya, diou wech haillon, diwar-bouez da dreid ! »

Ar re all a hoarze :

« Grit peoh, Soazig ! emezo. Pa vezoh eet da rouantelez ar gozed, e kouskoh du-hont brao ha stard, e-giz an oll ! »

« Hag e kav deoh, e-giz ar re all ? Tra, la la, n'ouzoh ket c'hoaz piou on-me, paotredigou ! »

Ar Hidour, eñ, a anaveze ne oa ket atao brao ober gand e hini goz ; hag e soñje, en e furnez, e vije Soazig an Tagnouz gwasoh c'hoaz eur wech maro eged ez-veo.

³³ Tanfouich : tanfoeltr.

³⁴ dihanaoui : ? (digeri he genou ?)

bleugeudi ?

teufal ?

Penn-koad ! C’hweh sizun da houde ! glaz er barrez !...

*Kig hag eskern, fank ha bouillenn,
Penn-kil-ha-troad, setu an den !*

Setu ar vaouez ivez, ha Soazig eo a dremenas da genta !...

Kaset e oa hi d’ar vered evel an oll gristenien.

Saig al Logodenn, ar halvez kamm, a reas eur groaz koad da lakaad a-zioh he bez, eur groaz livet e du ha skrivet war he divreh e lizerennou gwenn :

Ci-gît

Françoise Tagnouz, épouse Kidour

Requiescat in pace !

Ar Hidour ne ouie lenn nemed ar brezoneg :

« Kalvez, petra al lizerennou a zo lakaet dezi ? », a houlennas-eñ.

« Ra ziskuizo e peoh ! hag he ano », eme ar gargamm all.

« Ha mad ! eme Kidour. Ar baourez kêz he-deus ezomm sur da ziskuiza. »

Hag e teuas d’ar gêr, en eru zoñjal :

« Diskuiza e hello emichañs, peogwir eo merket ! Soazig paour !... He hared a reen evelato, daoust d’ar re all, pegen tagnouz e oa !... »

Rag me ‘gred e soñjas ivez :

Evitañ da gaoud drein, e karer ar boked !

Ar pezh a zo sur eo e tistroas d’ar gêr kalonad dezañ.

II

Dirag ti Jakez ar Prim e termene.

« Basta ! deus en ti », eme hemañ a-ziwar an treujou.

Hag ar Hidour e-barz, e-pad ma lakae ar wreg ar bara hag an amann war an daol.

« Ha chaouia !, eme Jakez, gweled a rez, mignon paour,

*Darn a ouel, ha darn a gan ;
Ar bed a zo dudi ha poan !*

Ha neuze, te ‘oar, hirio pe warhoaz, peogwir e ranker serra al lagad ha mond kuit...

*Deut om a-boan
M’eo poent trei kein,
Lod a-raog koan,
Lod goude lein.*

Ar Hidour a lakae amann war eur genaouad bara.

« Sell, Kidour, eme ar wreg, daoust hag ho kaorig n’emaoh ket e soñj he gwerza, rag, evid eun intañv, c’hwil ‘oar, n’eo ket êz derhel loened ; gwerza ‘reoh, sur a-walh ? »

Evid gwir, eñ ne ouie ket c’hoaz petra ‘raje, na diouz e haor, na diouz e liorz, gwez-avalou enni, peadra da gaoud etre teir pe bemp barrikennad jistr ar bloaz, na diouz e dammig ti du-hont.

Da hortoz, e oa evet daou vanne hini melen, daou lommig evid lakaad ar galon war he zu mad.

Hag ar Hidour a oa o tegouezoud gand e zor, pa gejas gantañ Katell ar Sardin, bet o werza he fanerad pesked er hêriadennou war ar mêz. An hini koz he anaveze mad : ped gwech n’en-doa ket klevet a bep seurt diwar he fenn !... « “Eur pezh divalo”, a lavare Soazig Tagnouz anezi, hag a vefe gouest a-walh da zond e Breuriez ar Briedelez, daoust d’he daou-ugent ha n’ouzon ket ped bloaz ! »

« Neuze, setu-te da-unanig ? », eme ar Gatell d’ar Hidour.

Eun tammig klemmadenn a reas-eñ.

« O ! emezi c’hoaz, evid ar wirionez ha pa ne ve ken, red eo lavared ne oa ket eur seurt tra Soazig, nemed m’edo dispar da dagnouad, rag

*A-hend-all ne dalveze ket
Al lard euz eur hoz ki krouget !*

« Te ‘wel, emezañ dezi, ne gollan ket va fenn, abalamour m’am-eus kollet anezi. »

« Ha mad a rez !... Eur wech an amzer, Kidour, e teuin da weled ha n'e-teus ket ezomm a besked. »

« Ya, Katell, e helli dond da weled. »

Hag hi kuit gand he faner ; nemed e penn al liorz e tistroas da zelled war he hiz. Ar Hidour he gwelas hag a zigoras dor e di.

III

An nozveziou kenta a yeas en o zro, nemed ma chome dalhmad soñj Soazig e spered ar Hidour. Kerkent m'en-dije greet koan d'e haorig ha dezañ e-unan, e ree e dantad-tan, hag e vanne *flip*, evel kustum. Hag e hortoze ar housked da zond dezañ. Ar gwasas ma oa, e amezeien ne vezent ken war e dro, ken yen e teue frim ar goañv da veza : ken na oa prest ar Hidour da goll kalon.

War ar zizun, e tremenas adarre Katell gand he fanerad pesked hag he zahad keleier. Eur pennadig e chomas-hi da ober eun dommadenn ouz an oaled : tañva a reas zoken ar jistr, ha, pa yeas er-mêz, ar Hidour a zoñjas e kave muih goullo e di.

An noz a gouezas. An hini koz a deuas soñj dezañ euz Soaz Tagnouz : kaoud a ree dezañ he gweled, he dent skrignet prest da gregi, ha daouarn serret prest da vloñsa, hag he daoulagad o lugerni kounnaret.

« Gaou ! emezañ outañ e-unan, peogwir ema-hi du-hont o tiskuiza dindan he hroaz ! »

Koulskoude seblantoud a reas dezañ klevoud trouz en eil penn hag egile euz an ti, er hraou zoken. Hag antronoz e werzas e haorig hag e yer da wreg Jakez ar Prim, evid na glevfe ket a drouz hiviziken gand al lorgnez-se da vihanna. Ha gand o arhant e hellas kaoud eur voutaillad bennag euz *an hini mad melen e liou*, plijadur an oll vartoloded koz.

*

Katell a dremene aliesohig gand he fesked hag a droe en ti, amzer hepken da ober eun dommadenn da bennou he bizied anouedet ; nemed ne gavas ket e yee mad an traou pa glevas e oa gwerzet yer ha gaorig : ken na zeue e-giz keuz d'an hini koz en eur zelaou anezi !...

Hag en nozvez-se e chomas pell e zoñj gand ar werzerez pesked. Tañze³⁵ ! Ha perag ne zimezfe ket ganti ? Eur stal gaer !... Ha piou a virfe ?... Med an avel a lakaas an nor da storlokad, hag e klevet er-mêz e-giz eur hi o c'hweza war an treujou, o klask dond er goudor emichañs. Ken na zavas aon d'an intañv ker !...

Ha penaoz, koz, ankeniet, e hellfe-eñ chom evel-se e-unan ? E wreg zoken n'he-dije ket ar galon da houlenn kemend-all digantañ ; med kerzit 'ta da houlenn eun dra bennag digand ar re varo ?..Daoust ha Soazig Tagnouz n'he-doa ket touet zoken, ma eil-dimezfe heh intañv, e teufe da stleja aenzañ er-mêz diouz e wele ha diwar-bouez e dreid c'hoaz ?... Ar paour-kêz Kidour a oa barnet neuze 'ta da loueda e-unan, en e gozni, da chom war e wele gand ar hleñved e-unan, piou 'oar, da vervel e-unan, heb gouzoud dare da zen, kristen ebed war e dro ? ? ?

Antronoz, ouz an abardaez, pe zegouezas Katell gand he fesked, ar Hidour a ginnigas dezi eur werennadig euz e *hini mad*.

« Ha neuze, Katell, emezañ dezi a-greiz-oll, n'en em blijfeh ket en eun tiegez e-giz hemañ ? »

« Eo, me 'gred, rag amañ, gwir, e kaver pep tra nemed eur vaouez. Ha neuze, mignon,

Gwelloh eo daou eged unan

D'en em harpa ouz nerz ha poan.

Krak ! sellou don a rejont an eil ouz egile ; eur startadenn daouarn, hag eun hanter pok a oa ivez, mar deo gwir ar pezh am-eus klevet.

Katell a drohas kuit pa welas an noz o tond da ziskenn.

« Hag a-benn warhoaz, eme ar Hidour dezi a-zivhar an treujou, ez aim da staga on embannou ! »

IV

³⁵ Tañze : ?

« Ya, a zoñje ar Hidour ennañ e-unan, n'hellan ket chom er stad-mañ. Soazig (Doue d'he fardono !) n'ema mui, peogwir eo kousket du-hont : ne damallan ken netra dezi ; nemed ma lavarar

War-lerh merher e teu yaou ;

Biskoaz n'int heñvel o-daou.

Ha setu, emichañs, d'an eil tro n'am-bo ket unan dagnouz !... »

Mond a reas d'e wele, nemed ma rankas chom eur pennadig brao da hortoz ar housked da zond.

N'ouzer ket da bed eur, ar Hidour a zihunas euz a-greiz e gousk. Kaer en-doa difronka e zaoulagad, ne wele nemed noz dre an ti. Spontuz ! Trouz a gleve evel gand eun dorn o krabisa ar prenest, hag eur vouez a glemme yud... Aotrou Doue ! Soazig Tagnouz, na piou ken o tond da stleja anezañ a-ziwar bouez e dreid !... Tudou ! ema-hi aze o klask an tu da zond en ti, ha piou a lavar ne zeuio ket hi a-benn da zond e-barz ?...

Biskoaz ker braz aon ne lammas war gein ar Hidour, ken na grene evel eur bern deliou seh, ken na strake e zent dre e henou, gand kemend a drouz ha trouz eul lur piz bihan hejet en eur zorohell graz !... selaou ! Bremaig en-deus klevet e-giz trouz eskern o strakal ouz ar voger ; ha del ! kleo ! Tuchantig, petra ken nemed Karrig an Ankou en-deus gwigouret er porz ?...

Sell ! digoret eo an nor, ema-hi o tostaad, hi !...

Ar paour-kêz, pennfollet, a lammas diouz e wele en e zav war ar bank, a bakas e benn-baz a-ziwar ar rizenn ; ha dao, dao, a-gleiz, a-zehou, ha dao c'hoaz : e-giz unan zod !

« Diwall, Soazig !... kerz kuit, mar kerez : ne faot ket din e sachfes war va zreid ! »

Dres ! ar penn-baz a diz eun dra bennag : eun trouz o strakal seh, eur glemmadenn hir, hag an intañv paour a ruill kerkent semplet war al leurzi, a-stok korv, trehet ha dsikaret gand e vern aon.

« Aotrou Doue ! Truez, Soazig ! Ne eil-dimezin ket, Soazig ! »

*

Antronoz mintin-mad, Katell a zerede da glask ar Hidour da vond da gas an embannou. An nor a oa gourzerret³⁶, hag he en ti ; pebez euz !... An hini koz, en eur goueza, a oa stoket e benn ouz luferr³⁷ an daol, ha dre ar faout e oa skuillet e empenn. En e gichenn e oa ar pennbaz, ha neuze eur horn gaor, eur horn nevez-torret...

Katell a spontas hag a redas kuit da glask sikour.

Eur wall nozvez a oa bet an novez-se evid ar gêriadenn : maro ar Hidour !... Hga an tangwall o tevi ti Jakez ar Prim !

Jakez a oa rivinet : ne chome ken gantañ nemed ar haor en-doa prenet digand ar Hidour, ha c'hoaz, pa oa hi adkavet, e oa torret unan euz he herniel !

Al loen paour en-doa gellet terri e nask, ha tehel diouz an tan beteg ti e berhenn koz.

Gouzoud a rit petra a hoarvezas : hi, ar gaor, eo a oa bet pennabeg da varo ar paour-kêz Kidour, ha n'eo ket Soazig Tagnouz, kousket mad du-hont, er vered, dindan he hroaz o tiskuiza !

**

Arhant braz ar pillaouer

« Ya, Marianna, ken gwir ha ma'z eo staot-marh a werzit deom e-leh layout, mall a zo ganin mond ahann, mall ken n'on mui evid padoud war ruiou Brest.

Ha mond da beleh, Laou Druill ? eme an ostizez en eur rei eun taol ilin d'e fri ruz o hlaourenni dour butun-malet.

Ar pillaouer, gwisket kempennohig ar mintinvez-se, ne reas nemed eun hej d'e benn louedet, bleveg ha barveg evel eur broh, hag a dostaas ouz toull an nor, da stlapa eun distankadenn gourlañchenn e-mesk ar dour-glao a ruill en traoñ gand ru ar Werhez.

³⁶ gourzerret : ? (digor)

³⁷ luferr : ? Marteze « ar pez a zo luferr ».

Hag e talhe e zell war eun toull-lochenn koad hanter vrein a chome c'hoaz a-zav, dre voazamant emichañs, en tu all d'ar ru, dirag an ostaliri. Eno e oa bet e vaner abaoe meur a vloavez, e-touez ar pillou, an hernachou koz hag an eskern dastumet bemdez dre gêr. A-dra-zur, aotrou ar maner iskiz-se e-doa greet eno kov moan da boent meur a lein, ha debret meur a goan dindan eñvor : med bastik ! meur a zahad ivez a oa bet deut gantañ eno, ront o boutou, ha n'eo ket sahadou truillou e oant oll.

N'eus forz ! e oa o vond da zacha e dreid gantañ ahann, rag evid deg skoed en-doa gwerzet, an noz a-raog, da Varianna an ostizez, ar maner hag ar stalikerez. O ! stalikerez eur paotr koz a billaouer n'eo ket ponner ! Tregont lur kennebeud !

« Da beleh ? emezañ koulskoude, piou 'oar dare ? Gweled a rin, med en hent ez an. Abaoe m'eo eet va mignon Yann Bill da zizeha e eskern da Bark Botorel³⁸, en eur zelaou ar gwriziou o kreski, abaoe n'emaon ket mad e-barz va hrohenn, tamm foeltr ebed !... Gwir eo, daouzeg vloaz a vo da bardon Gouenou, abaoe ma oam on-daou o pillaoua, o vrocha an heveleb laou, koulz lavared ! Mad, maro eo Yann Bill, miz 'zo bet, hag abaoe e kavan re bonner va zah, re louz ar vicher, hag a-dreist, oll re frank va lochenn evidon va-unan ! Ha neuze, evid ar zaout eo mad beza staget da beuri ! Med eur pillaouer, hennez n'eus ket c'hoaz kavet, e ti braz Boulard e Brest, chadenn na nask d'e zerhel. Ya, ya, mond a ran en hentchou ; gwaso ma kavin a vo an diouer euz va mignon Yann Bill. »

« Gwir eo avad ; en em glevoud mad a reeh. Morse etrezoh na ger bihan na ger braz ! E-giz breudeur en em gleveh, gweloh zoken ! Daou goz pillaouer koz ! N'ouzon ket, med abalamour d'ar voazamant d'ho kweled an eil gand egile, e kavan kalz a heñveledigez etrezoh : heveleb torgenn war ho kein krommet, heveleb baro broh loued !

« Heñveledigez pillaouerien ! » eme Laou Druill, leun e zaoulagad a levenez.

« Kalz a denneh an eil d'egile, ha, koulskoude, n'edo tamm kar ebed etrezoh, bez' e oa ? nemed kerent kerentiez an anoïou : Lann Druill ha Yann Bill ? »

« Piou 'oar ? » eme egile, goapauz... « Prosper Proux em yaouankiz a gane deom e ve greet aliez

er sakristiri

Fals sinaturiou heb pehi.

Alese, marteze, eo red klask mammenn on heñveledigez ! N'eus forz ! ar paour-kêz Yann Bill, a-raog kemed ar zah hag ar hrog-pouezer, a oa bet "war an ton braz", mar plij. Bep tro ma karge eur banne a re, e tiskane din "o ! ya me 'zo bet em amzer eur...". Hag ouz e glevoud, e oa dimezet gand merh e vestr, hag an tiegez dioustu dezañ, saout ha kezeg, ha moh ha deñved ! Nemed e Vadalenn a oa deut eur Gebenn, eun diaoulez, gand kement ma tagnouze : dalhmad oh heskinad, o skandalad pe o vouza. Grafe pez a garfe, nemed a-wechou ne glevfe, ar paour-kêz pried, mevel deut da vestr ! An traou a oa fall, al loened a oa fallo, hag ar vuhez, foei, sell !... Ha c'hwi 'oar, Yann Bill a vervas ruz ar gwad dindan e ivinou, o kleved ken aliez ha ken hir pedennou. « Houp ! emezañ, eur zulvez ; mar don dimezet, n'em-eus ket greet marhad chom da bennzodi ganti : poent eo skarza kuit, nemed c'hoant ambefe da goll ar pez a chom c'hoaz ganin euz va skiant-vad ! ». Ha Yann kuit d'ar hêriou, ar yalh gantañ. Meur a dra a glaskas ober, ha beteg e wenneg diweza e tispignas ! Med e Vadalenn, emezañ, a gase he drougrañs war e lerh ; ha, diouz mad e kouezas e fall, ha diouz fall e gwasoh, ken na zeuas da billaouer da Vrest, e-leh ma ris anaoudegez gantañ. Ha daou vignon braz om bet, ya, boutin pep tra etrezom : pillou, laou, ha kalonou. Paour-kêz Yann Bill !... Sell ! e-leh randoni ha strana ganeoh, gweloh eo din mond prim en hentchou. Kenavo, Marianna Latouz !... Piou 'oar, en em weled a raim diwezatoh !...

Hag heb distrei e benn, flip ! setu Laou Druill er-mêz, e visah war e skoaz, o pignad ru ar Werhez, dindan ar glao, ha tiz warnañ emichañs !

*

N'en em jale ket na gand loustoni an amzer, na gand hirder an hent m'en-doa lakaet en e benn da ober : n'en-doa ket amzer a-walh da brederia gand kement-se.

An heveleb soñj eo a zave bepred en e spered :

³⁸ Bark Botorel : notenn gand an oberour : ano poblez Bered vraz Brest.

« N'eo ket da dorta, maout on, ha biskoaz n'am-eus tourtet ken eeun. Me, n'eo ket Laou Druill on ken, a-walh a laou evel-se ! me eo bremañ Yann Bill, ya, da lavared eo Yann-Kled ar Gall, ganet bloaz hag hanter-kant a zo e Plogoñ, ha bet gwechall ar mestr e Keradreiz, sko e Sant-Tujen-an-Alhwez ; me eo pried ar Vadalenn, kollet ganti an tri-hard euz he fenn abaoe m'eo chomet intañvez hlaharet ha beo he gwaz !... Seh da feunteuniou, Madalenn, setu da Yann o tond en-dro ; laz al leue lard mar zo, pe gra "fest an oh", evel ma kari !... Rag evid honnez... nemed deut e vefe gwelloc'h he fenn en-dro... Med ar re all ? Daoust ha kemered a raint Laou Druill evid Yann Bill ?... Da genta penn, heñvel a-walh e oam on-daou ; hag ouspenn-ze, Yann ne oa ket bet er Hap abaoe tregont vloaz, ne me kennebeud ; ha d'an trede, anaoud a ran doareou ar vro-ze ; ha, d'an diweza penn, tanfouich ! e baperiou a zo ganin, Yann a zo maro, ha me eo bremañ Yann, hag e damm peadra a zo dizale em bisah. Ar mignon Yann Bill endoa mez o tistrei d'ar gêr. Diod ! Laou Druill a yelo evitañ hag a yalhato en e leh, treud pe druz m'en em gavo da douza !... Piou a ouezo petra ?... Abaoe keid-all amzer !... Hag heñvel a-walh e-giz ma'z om !... Hag e baperiou a zo em godell c'hoaz ! Foei 'ta !... Nann, nann ! Yann Kled ar Gall n'eo ket maro, setu-eñ amañ ; e peleh ema an arhant a deu dezañ abaoe n'en-deus bet gwenneg ebed ?... ha ma vez dizoloet ar stal, ouf ! petra 'vo greet din-me ?... Gwerza va hrohenn ? Marhad divalo ! Ar varhadourez ne dalv ket kalz a dra vad, nebeutoh dre bouez eged krehen gozed, kalz !... Ha, mar deuan a-benn euz an taol, ema skubet al laou diwar va zraillou, ha setu-me peadra din ! Ha me perhenn war an diweza ! Ne vo ket bet re abred !

Ha Yann Druill a-wechou e c'hweze teo gand al lorh, sonn e benn, ha prim e droad ; hag... a-wechou all, e kromme striz e gein, hag e chome a-zav da zelaou ha da zelled, gand oan na glevfe pe na welfe *Beg-ma-Zok* (an archer !) o tond d'e zastum !

Hag en eur ober hent, n'eo ket e zivesker eo a skuize, e benn eo e oa kentoh ; muioc'h e tomme d'e dok rouz eged d'e voutou ler goad hanter distradet ! Med troha hent a ree, a-dammou fonnuz, heb gouzoud dezañ kalz. Ha, pevar devez goude, war-dro ar huz-heol, e tegoueze dirag Sant-Tujen.

Euz a-bell ez anavezaz chapel Mestr ar chas klañv. E oa e penn e veaj, rag setu a-hont, a-dreñv ar hroazhent, an ostaliri ma komze aliez Yann Bill anezi : ostaliri an Troh-Yalh, e-tal ar Hovel, e leh ma vije sul-gouel-bemdez o tañva ar gwin-ardant, en eur ober eun taol c'hoari trikont ! Hag ar verouri e-kicehnn, an dosta, a oa Keradreiz, a oa de hini ! ! ! aze a-dreñv ar hovel, e leh ma tistone c'hoaz anneo ar marichal.

Ha, pemp munut goude, a-uz d'ar bod-lore kras, ha d'ar skourr avalou-plu³⁹ seh, stag ouz toull an nor, Laou Druill a lenn :

KOSDANVAD, OSTIZ

« Amañ eo ema an dalh !, eme ar pillaouer. Red eo din en em rei d'anaoud bremañ : beuzi, pe neu ! »

Hag, heb marhata, Laou en ostaliri, ar hwezenn etre roched ha krohenn. Penaoz e trofe ar zoubenn ?...

Eun hanter-dousennad paotred koz a oa ouz taol o c'hoari. An ostiz, eur hoveg teo, divleo e benn, a deuas beteg ar pillaouer :

« Arhant da genta, paotr, rag gand ar rederien-vro, n'ouzer morse... A-wechou eh evont, hag a-wechou all e paeont... Amañ, ha pa ne baeont ket a-raog, n'eh evont ket goude kennebeud. C'hoari da gi, evel ma kari ! »

Laou a ziskrankas⁴⁰ e wenneien, heb dizerra grig. Ne evas nemed eur pennad euz e vanne gwin-ardant, ha, goude eur skarzadenn-hourlañchenn :

« Kozdañvad ? », emezañ, o hervel an ostiz war-bouezig.

« Ha da houde ?, eme ar hov-teo, en eur zistrei, e benn liou gwin ruz.

« Eur ger hepken. Selaouit 'ta !... N'ho-peus ket soñj euz unan hag a deue amañ gwechall ?... Hag a zo eet kuit goude-ze diouz ar vro ?... Klaskit mad !... Eun tregont vloaz bennag a dle beza abaoe... Eun amezeg tost deoh... ar Gall, Yann-Kled ar Gall ?... »

« Evid perag kemend-all, paotr koz ? »

« Evid gouzoud hag-eñ emañ e dud atao dre amañ. »

³⁹ avalou-plu : ?

⁴⁰ ziskrankas : dis-krank-a.

Ar hoarierien a zistroas pennou souezet war-zu ar pillaouer, eun dra bennag e-giz eur mouc'hoarz war e benn-broh.

« Gast ar gurun ! eme eur c'hoarier, daoust hag-eñ eo a vefe o tond en-dro ? »

Ha war gement-se, Laou Druill a zaoulammas e galon gand ar blijadur :

« Neui eo a ran ! », emezañ outañ e-unan.

« Ha perag emaut-te oh en em jala gand Yann-Kled ar Gall ?... Ha gouzoud a rez e zoare ? »

« Ya, ya, marteze a-walh. A-barz pell e weloh anezañ, piou 'oar. »

« Stank da veg 'ta, te, tamm koz truillenn divalo ! », eme eur c'hoarier en eur zével a-greiz-tenn. Penaoz ? N'e-teus ket mez o tond en-dro, goude an troiou fall az-teus bet greet dre amañ ? Nann, debret eo da vez ganit, ha dizahet ivez. Lorgnez ! Ni 'gave deom e oas eet d'ar bed all, nemed al lorgnez evel-dout n'eus ket a vervel warno, pez divalo ! »

« Petra ? petra ? eme Laou Druill, o tisonka e zaoulagad. Piou eo al lorgnez ? »

« Piou 'ta nemedout, pez didalvez, hag e teuez da ober da gas-kousked deom ?... Ma vefe bet amañ Lan ar marichal, e welfes, loen fall, hag-eñ en-deus dizoñjet an tregont bloavez tremenet, goude beza bet laeret diwarnañ e verh hag heh enor, eur plah koant evel-se... Hag e peleh out bet ganti, peogwir n'eus bet klevet ger ebed abaoe diwar ho penn ?... »

« Hag e teu en-dro ! pennmoh louz ! Tra divergont ! Tamm gagn !... Ar hi a zistro d'e zislonkadennou !... »

An oll a stlape gantañ e vrasa tamm ; hag ar paour-kêz pillaouer, hanter-zodet, a zoñje :

« Beuzi eo a ran !... Med, emezañ, tudou, n'eo ket me eo Yann-Kled ar Gall. »

« Bremañ n'eo ket te, a gav dit ? Da lorgnez a zo ledet war da benn-broh !... ha ma n'eo ket te, diskouez da baperiou, diskouez 'ta, tad ar gaou !... »

« Nann, n'eo ket me, n'eo ket me... »

« Gortoz, kaset am-eus da lavared d'ar marichal koz e oas en distro. Hennez a ouezo anaoud ahanout... Sell ! emañ o tond. »

Dre ar prenest, Laou Druill, pennfollet, a welas o teredeg ar marichal koz, e vorzol-anneo gantañ a-benn breh, ha daoulagad ruz en e benn, enaouet e-giz ar glao dindan c'hwez e vegin vraz.

Kleved a reer anezañ o tond en ostaliri e-pad ar jabadao-ze.

« O !... Dre ar prenest, er-mêz ! »

Hag ar pillaouer, en egar, a lamm el leur, hag a skamp kuit, heb chom da zelled war e lerh ; ha ki ar marichal war e roudou beteg Gwaien !...

En eur zegouezoud gand kenta tier kêr, noz-du da neuze, Laou Druill, difronket, ha dielhet o redeg, a droas e zellou war an Tri-Roue splann o sklêria an neñvou :

« N'eus forz, emezañ, red eo kredi, eul lorgnez eo bet ar mignon Yann Bill ! ».

**

Kloh an interamant

En abardaevez-se, tonton ar Gervini, a zeuas da zegas deom d'ar gêr eur harradig avalou-douar e oam bet o tenna du-hont, e Kervarzeg, en eun dachenn feurmet evid an eostvez patatez.

Soñj mad am-eus ; ne oan neuze nemed eur mousig fall a zeiz vloaz koulskoude, med skuiz e oan ken na oan, goude beza bet e-pad eun deveziad gwengolo o tibab avalou-douar chakez⁴¹, re vraz, re grenn, re ar moh, daoubleget, eet da zreid em hov ; ha setu perag, en eur zond d'ar gêr, e-leh bale war-lerh ar harr e-giz ar re vraz, e oan bet pignet war an uhella sahad er harrad.

Doue ra vennigo tonton Tomaz, rag soñj am-eus ivez en-doa damant euz e gazez.... Ha me, en abardaevez-se, penaoz e oa ganain treid ha kein, ne vefen ket ken hirio da lavared. Med penn hag empenn eul lakepotig a zeiz vloaz, skuiz a gorv, a chom enaouet war e vrasa goulou, pa zilenner dirazañ traou evel ma tilennas Tomaz ar Gervini, eur wech savet ar patatez d'ar hringol, ha diskennet

⁴¹ chakez : ?

er hovou, tra gounezet mad, soubenn al lêz amanennet mad, ha d'ar re vraz da houde-ze, eur banne kafe du hag e gementad a "odivi" : ya da !

*

Glaouerien Koad an Noz, tonton Tomaz, n'eus ket ganto en o zahadou, an hanter na tost euz teñvalijenn an noz-mañ ; ha, feiz da Zoue, d'ar Werhez on Itron Varia Kerineg, ne lavarfen ket ha ne zavfe ket spont ganeoh en eur vond d'ar gêr...

« Spont gand Tomaz ar Gerbini ? Ha gand piou emaoch o klask c'hoari ?... An eontr Tomaz n'en-deus ket bet aon nemed eur wech, med ar wech-se a dalveze kant. Selaouit, mar ho-peus c'hoant, ne vo ket dale pell... Alo ! en a-raog, Daniel, diskenn eur banneig bihan all da skraba-diskraba. »

Hag eur werennadig "trilonk" a ziskargas va zad d'an tonton Tomaz, enaouet a-benn neuze, o frapa war dan butun karot e gorn-pri berr, pouaf ! pouaf !

Ha neuze em-oa e-giz aon ouz an eontr koz-se : ha koulskoude !...

Dihenaoui a reas... an devez a oa bet tomm ha tenn ; hag e lipas euz an daou du e vourrou divarvet ; eun taolig mañch da houde, ha setu :

« Ya, ya, emezañ, izel e vouez, kalon mab-den emañ bepred krenadenn ar spont war var da lammoud warni. Ha koulskoude me 'gave din e oan en tu all da bep krenadenn, me : meur a wech, da neuze, am-oa bet gwelet ar pez na hell peurliesia gweled meur a rumm daoulagad marvel... »

« Dre amañ, gouzoud a reom oll kement-se, tonton Tomaz. »

« Ya, bez' ez eus daoulagad beo, troet o sklêrijenn war draou ar bed all, ha siwaz a ze n'eo ken evid o ferhennou, me a lavar deoh ; rag, e hellit am hredi, evidon-me ne houlennis morse gweled o tremen, sioul ha mud, e-biou d'am hêr, interamant on amezeien ha mignoned euz an tu all d'ar Menez, hag a ranke kemered an hent-se evid mond da ober ludu an diskuiz e-barz bered ar barrez. Ha koulskoude gwaz a ze evid ma gweled digor war rouantelez an ankou ! Me 'wele dalhmad, meur a zevez a-raog, beteg eiz deiz a-raog na vijent maro, o tremen evel-se interamant hini pe hini hag aliez zoken ne vije d'an ampoent na tohor na klañv na klañvidig... Hag ez anavezen piou a vije gand ar hloh bihan en a-raog, an tamm kloh bihan-ze hag a gargas ker braz korvad aon e Tomaz ar Gervini, ma n'eus mui netra evid her sponta na war greiz an deiz, nag e-kreiz an dua nozveziou ; hag e welen 'ta piou a vije o tougen ar hroaziou, o vleina ar marh a stleje ar horv : ne oa neemd hemañ, an hini a yee evel-se dirazon d'an anaon, hag a-raog e dermen, ha ne oan ket ket evid gouzoud piou e vije, peogwir e arched a gloze anezañ, rag a-hend-all e welen mad piou a vije o tougen ar goulou, piou er hañv, kerkoulz hag an amezeien war-lerh, gwazed ha merhed. Ha, pep taol, va gweledigez, eur pennadig da houde, a zeue da wir !... o ! nann, n'eo ket da hoantaad !... »

« Nann, nann ! » a lavaras re vraz an ti, a izel-vouez, e-pad ma skoachen-me, etre bank ar gwele e toull ar prenest, va izili o krena, ha serret va gouzoug stard beteg kredi mouga.

Amañ, tonton Tomaz a zavas da gemered, en oaled, eur hlaouenn da zikour tan e vutun-karot a venne mond da goll, rag, beb ar mare, e tizoñje da frapa warnañ.

« Ha yaouank e oan c'hoaz, emezañ, nevez desket ganin va micher gwiader, dilezet abaoe, abalamour m'eo deut d'he holl al lien bourhiz hag ar hoton a estren-vro, flourroh da grohenn korv mab-den, pa zegouezas ganin va gweledigez kenta. Da genta, spont braz, goude-ze aon, ha, gand ar voazamant, krenadennou ; med bepred eur skuizadenn gorv hag ene. Ha setu amañ perag : lakaet em-oa em fenn, o weled en a-raog evel-se o tremen interamant ar re all, e teuje din ivez gweled en a-raog va hini va-unan...Hag e hortozen... Dond a reas... »

« Ma Jezuz ! », eme mamm e korn an oaled.

« Ya, dond a reas : koulskoude red eo din lavared klevoud e-leh gweled. An dra-ze a hoarvezas war-dro an Oll-Zent. Stard ha tenn e oa bet red din kas en-dro ar stern hag ar vulzun evid dond a-benn euz ar wiadenn a hortoze re Gerfalzou, zoken eur pennad a oa. Setu bet beh ha beh warnon e-pad ar zizun penn-da-benn, nemed da foar ar Pont, d'ar yaou, am-oa ranket mond da gas da werza eun torad moh bihan. Med e oa bet an traou, nemed en eur vond, e Lokrist, eur gazez yaouank aonig a oa ganeom a droas re gernn e korn an ostaliri e leh, evel kustum, on-doa greet pemp munut diskuiz, hag a gignas

eun disterra he fenn, a zistresas eun tammig he gwakol : ouah ! nebeud a dra, labour eur hard-eur gand an nadoz vraz da starda a-nevez an hesk brevet, ha da adstaga ar hlohig bihan diskroget gand ar stroñs... »

« Evidout-te, tamm kloh fall, te 'vo staget pa vo amzer ! »

Rag trouz ar hlohig-se ne blijje ket din tamm ebed... abalamour ma tenne war hini klohig an interamañchou !...

Dre zerrpoania, d'ar zadorn a-benn koan, e oa prest ar wiadenn. Fall e oa an amzer, eun druez ! Glao tano, avel yen, med glao hag a dreuz, med avel-viz hag a droh, fall, c'hwi 'oar.

« Boulzouble ! da houde eur skudellad soubenn domm, ne rivin ket evdi mond beteg du-hont, ha neuze o hortoz emaint. »

Ha va faotr da lakaad kabestr e penn e gazeg aonig, ar wiadenn stardet mad war he hein, ha la ! o ! loariadenn ? Eun taol direnn war an tont, ha tan d'ar horn, pouaf ! pouaf !... Hag ar pennbaz en dorn dehou, an dorn kleiz krog er habestr, ha kerkent etrezeg Kerfalezou.

Teñval e oa... Setu amañ Tal-ar-Groaz : n'eus ket a houlou, emichañs n'eus den er gêr... Emaom raktal er Veuzid : mouez Yann ar Gall o sermon d'e gazeg er marchosi ; en ti all, emeur o pilad lann ; ha c'hwez ar hrampouez-sadorn diwezad e ti ar Perrot !...

« Te, va faotr, frap war da gorniad butun karot, ha war-raog ! Pouaf ! »

« Opala ! Tamm gagn kazeg ! Diwall 'ta, ne welez ket e oas o kas da vestr d'ar foz ? »

Nann, sur avad, ne wele ket, na me kennebeud n'am-oa ket gwelet, ken na oan o vond e-barz.

Mond a reom atao. Setu amañ karr-hent treuz-distrez Kervarzeg. Ha ya, hag aze, e korn, emañ ar skalier e leh ma kavas Fañch ar Hrog fri ar bleiz stok-ha-stok ouz e fri, eur zulvez pa oa o vond da'n overn-vintin : unan o pignad euz eun tu, egile euz an tu all, ha kement a aon dezo o-daou. Ha ya, lod a spont buan, rag, gwir, sponta dirag traou beo !... Ouah ! Dirag ar maro hag an tu all, a ! a ! setu eno eur zoubenn all !... Ha setu va zoñjou treud adarre ganin.

« Diwall 'ta, kalkenn divalo !... Ha red e vo din prena dit eur re lunedou, digwener, e foar Bouldahud ? Lorgenn daonet, ne welez ket ar poull-pri e oas o kas ahanom e-barz ?... »

Bign ! eun taol baz war he zalier !...

« A ! A ! perag e lammez evel-se, penn fall ? Ha da gala-goañv eo e teu dit c'hoant breskin, bloh an diaoul ? »

A bep seurt e tiskargas warni, med war wasaad ez a, ya da, ken na venn diskar ar wiadenn ha ma vriz ahanon penn-da-benn gand pri ar skosellou.

« Dao ! setu aze eun toull all, boulhurun !... »

« Drign !... Drign !... Drign !... »

« Kloh an interamañchou !... »

Nann, nann, ne oan ket kousket nag oh huñvreal a-hont, e gwaremm Kerfinidant, dindan ar wall nozvez sadorn-ze, rag evid kousked hag huñvreal, re a ranken lammed da heuill va hazeg aonig, ha diskalfa rampadennou hir, ken hir ma kreden regi va bragou-braz. »

« Drign ! Drign ! Drign ! »

« Chom 'ta ! Op ! chom 'ta ! »

Dond a ra beh warnon, rag, mar klevan mad ar hloh, kaer am-eus dispourbella va daoulagad, ne welan na muioh na nebeutoh : krena 'ran, daoust petra 'fell din ; ha ne grenan ket va-unan, rag va dorn kleiz a vrall kement ma kren va hazeg... »

Klak ! Lamm adarre a-dreist eur poull all...

« Drign !... Drign !... »

« D'am ziklour, Itron Varia Kerineg !.. »

Ya, ya, tudou kêz, pennzodi a reen : peadra 'oa da ober ! »

Ha ma vije bet c'hoaz en oablou du eun tamm biskorn-loar !... Netra, netra ! ne welen nemed, e-kichenn va fri, luhedennig va horn-butun. Ne badas ket beteg penn : broum !... plaf !... »

« Drign !... Drign !... Drign !... »

« Va hazeg a ra eun diswinkadenn, eul lamm-bloh, a-dreist eun toull all, tremen a hell a-dreist, nemed, me, he herhenn, a chom a-hourvez e-kreiz. Ha va horn-pri el lagenn, nemed eun tammig berr etre va dent. »

« A ! pebez spontadenn !... Kleved kloh an interamañchou, ha netra, netra da weled !... Interamant piou ?... Piou 'ta ken nemed va hini-me ?... Ne lavarin ket hirroh : n'ouzon ha ne ouezin biken penaoz, dre greiz son ar hloh daonet-se da heul, ez om degouezet betek Kerfalezou, va hazeg hag ar wiadenn araazon. »

« Ha c'hwi 'lavar : setu aze eur wiadenn hag a oa poent lakad anezi er c'houez ! »

« Me ivez ! An dour o redeg diwarnon, dour ar hwezenn ha dour ar glao, ne lavaran netra diwarbenn ar pri : penn-kil-ha-troad, eur paotrig brao a oa ahanon ! »

« Hag e haloupen !... »

« Drign !... Drign ! ... Drign !... »

« Lammed a ran en ti, ha betek an oaled ! Ne oan anavezet nemed diouz va mouez. »

« Ar mevel braz en em emellas euz va hazeg. »

*

Ne oa ket lazeta ar goulou, an nozvez-se, rag an oll en ti, pa oan deut e-barz, o-doa klevet evel don ar hloh o tiridignad...

A ! ya, mall a oa bet e Kerfalezou da weled goulou deiz ar zul o tond !

Dond a reas !... Ha n'on ket mar, e-giz va horn-butun, eme tonton Tomaz, en eur zewel da lakaad tan en-dro... Pouaf ! pouaf !... Arsa ! poent eo mond d'ar Gervini, ha dizaon c'hoaz, rag abaoe nozvez Kerflasou ne spontan ken..

« A ? »

« Nann ! Ne oa ket peadra da sponta zoken neuze war hent fall Kerfasou. »

« A ? »

« Na tamm ebed. Diouz ar zul, deut an deiz, eet kuit eun hanter euz ar spont war askell zu an noz, e teuas din c'hoant devi eur horniad : med kaer furchal va godellou, bleo, netra !... korn ebed ! N'am-oa ket a zoñj e oa chomet va horn el lagenn. Nemed eo gaou pa lavaran ne gaven netra em godellou : eo, eo, boughurun !... eur hloh bihan a oa e godell gleiz va bragou braz, ar hloh a oa distaget diouz gwakol va hazeg aonig, pa stokas, da foar ar Pont, ouz moger ostaliri Lokrist !...

*

« Eur banneig all, tonton Tomaz ? »

« Ya, mad eo, Daniel !... Ha bremañ, tudou, kenavo, ha deom d'ar Gervini. »

*

Pa ziblusken pe pa chaoken ar patatez-se, e teue d'am spered ar zoñj euz gwiadenn Kerfalezou. Hag abaoe, chomet eo e-barz, ha ne gredan ket e hellfe nijal kuit.

N'EUS KEN

